

38344

A. M. D. G.

B U E Z

AN AOTROU

MIKEL NOBLETZ

BELEC ENORUS NEURBED

Rener kenta ar Missionou e Breiz-Izel, er 17<sup>e</sup> cantvet

GRET

Gant an Tad J. BLEUZEN

EUS COMPAGNUNEZ JESUS



BREST

J. B. HAG A. LEFOURNIER

Leorierien, ru Vras, 86

KEMPER

E TI IAN SALAUN, LEORIER

56, ru Kereon, 56

PROPRIÉTÉ DES ÉDITEURS

## APPROBATION DU R. P. PROVINCIAL

---

Poitiers, Saint-Joseph, 21 Juillet 1879.

MON RÉVÉREND PÈRE,  
P. C.

La révision de votre opusculé : *Buez Dom Mikel Nobletz*, vient de finir, et vous est favorable. Je suis donc chargé, par le R. P. Provincial, de vous envoyer la permission d'imprimer.

Réjouissez-vous, et daigne Notre-Seigneur bénir votre zèle.

En union de vos s. s.

Rœ Vœ,

*Humilis in Christo servus.*

HENRI CHAMBELLAN, S. J.

---

## AUTORISATION DE MGR L'ÉVÊQUE DE QUIMPER

---

Nous autorisons l'impression du Manuscrit qui avait été soumis par le R. P. BLEUZEN au R. P. Provincial de la Compagnie de Jésus.

Quimper, 23 Juillet 1879.

D. ANSELME,

O. S. B.

Évêque de Quimper et de Léon.

## PROTESTATION DE L'AUTEUR

---

Nous déclarons, pour nous conformer aux décrets du Pape Urbain VIII, concernant la canonisation des saints et la béatification des Bienheureux, que nous ne prétendons donner à aucun des faits ou des mots contenus dans cet ouvrage, plus d'autorité que ne lui en donne ou en donnera la sainte Eglise catholique, à laquelle nous nous faisons gloire d'être humblement et tendrement soumis.

---

# LETTRE DU R. P. GOURVENNEC

Au R. P. BLEUZEN

Vannes, le 3 août 1879.

*Mon révérend et bien cher Père,*

P. C.

Il me serait impossible de vous exprimer tout le plaisir que m'a causé la lecture de votre manuscrit de *Buez dom Mikel Nobletz*. Sans parler de l'intérêt que doit offrir à tout vrai Breton la vie de l'illustre fondateur des Missions dans notre province, du grand thaumaturge de la Basse-Bretagne au commencement du xvi<sup>e</sup> siècle, votre opuscule a le mérite de joindre la netteté et la concision du style à l'ordre et à la lucidité dans l'exposé des faits.

Grâce à votre excellent livre, mon Révérend Père, l'apôtre des diocèses de Léon, Tréguier et Cornouaille va sortir de son tombeau, ou plutôt descendre du Ciel pour renouveler ses enseignements salutaires. En lisant les merveilles de zèle et de sainteté opérées au milieu de leurs ancêtres, les peuples de nos campagnes se sentiront portés à suivre leurs exemples et à pratiquer les mêmes vertus : l'apôtre du xvi<sup>e</sup> siècle leur parlera encore. *Defunctus adhuc loquitur*.

Les prêtres, j'en suis convaincu, liront avec empressement votre opuscule et ne manqueront pas d'en recommander la lecture dans toutes les familles de leurs paroisses. Pour moi, mon cher Père, je suis persuadé que le succès de votre œuvre répondra à votre zèle pour la gloire de Michel Le Nobletz.

Je vous souhaite, à vous et à tous vos lecteurs, la protection spéciale de l'apôtre du diocèse de Quimper et Léon. Puisse aussi votre excellente biographie hâter le jour tant désiré de la béatification de ce grand serviteur de Dieu.

En union de vos saints sacrifices,

Reverentiæ vestrae,

Servus in Christo,

H. GOURVENNEC, S. J.

---

## ALI D'AL LENNERIEN

---

Buez an den Doue dom Mikel Nobletz a so bet skrivet e gallec gant an Tad Verjus, eus a Gompagnunez Jesus, ha moulet er bloaz 1656, pevar bloaz goude maro ar missioner bras.

Ne oa ket diez neuze caout, e pep corn eus Breiz-Izel, calz a dud hag e oa bet testou eus an traou caer ha burzudus skrivet er vuez-se. Ouspen-se, an Tad Verjus en deuz bet entre he zaouarn cahierou ha taolennou Dom Mikel. An Tad Maner a veve neuze, hag e c'helle, goude maro he dad spirituel, discleria meur a dra divar benn he vertuziou hag he oberiou santel.

Dre-se, neket danvez a vanke evit scriva ar vuez caer-se.

Perac neket bet scrivet buez Dom Mikel e brezonec, er memez amzer hag e gallec?

N'ouffen ket hen lavaret. Eun dra estonus eo e ve chomet ar Vretonet bete vreman hep lacat dirac daoulagad an oll dud eus ho bro buez eur missioner ker brudet, enor Breiz-Izel, skuer ar veleien ha sclerijen an oll gristenien.

Eun draic bennac a so bet laket er gazeten *Feiz ha Breiz*, er bloaz 1866, gant an Aotrou Marc, person Sant-Per-Kilbignon, ha divezatoc'h, person Plougerne, divar benn Dom Mikel Noblet; mes ar gazeten a ve lennet, ha goude taolet a gostez. Setu perac am euz credet ober plijadur d'am c'henvroiz, o lacat e brezonec, an traou caera am euz cavet er vuez c'hallec gret gant an Tad Verjus.

Pedet am euz meur a hini da ober al labour-man; rac anaout mad a ran e ve red din caout mui a amzer eget n'am euz, ha mui a anaoudegez eus ar brezonec c'houec, evit gallout scriva eur vuez evel houman.

Mes, o velet na gemer den-all ebed ar bluen, e komeran an hardisdet da ginnig d'an oll-Vreizis buez santel ha burzudus Dom Mikel Noblet.

N.B. — Cette Vie était écrite avant que *Feiz ha Breiz* eût donné une autre biographie de Michel Le Noblet, par M. l'abbé DREZEN.

(Note de l'éditeur.)

Buez an Aotrou Mikel Nobletz

---

LEVR KENTA

---

Mikel Nobletz, bugel ha  
scolaer

## KENTA PENNAD

---

**Bloavezioù kenta Mikel Nobletz**

---

Mikel Nobletz a deuas er bed d'an nao varnugent a vis guengolo, er bloaz 1577, e castel Kerodern, e parrez Plougerne, en escopti Leon.

Herve Nobletz, Aotrou Kerodern, oa hano he dad, ha Franceza Lezvern, hano he vam; eus familh vras Coatmanac'h e tiskenne.

Herve Nobletz a ziskenne ive eus eul lignez huel ha brudet. Eun tamic re a gare an arc'hant; coulscoude aluzennou mad a rœ d'ar beorien, hag evit rei descadurez christen d'he vugale, na esperne ket he

iale'h. Unec crouadur en devoa, ha cant scoet ar bloaz a zispigne evit peb unan anezho, ar pezh a oa eur som bras en amzer-se. Pemp a baotret en doa, ha c'huec'h plac'h. Teir eus ar merc'hed a zemezas da dud a ligned huel eus ho bro; unan a varvas iaouankic c'hoaz; an diou-all a heulias kenteliou ha skueriou ho breur Dom Mikel, hag en em roas da servicha Doue hag ho nessa, o pratica ar c'haera vertuziou. Ar baotret oll a so bet tud a skiant, ha tud desket mad. Dom Mikel oa ar pevar.

O veza bet ganet ha badezet da c'houel an Arc'hel sant Mikel, ar bugel a recevas hano caer an Arc'hel-se, en deuz gret brezel da Lucifer, ha roet gloar d'he grouer ha d'ho Vestr : *Quis ut Deus*.

Dom Mikel a zalc'has coun eus ar c'hrasse, evit trugarecat Doue epad he vuez : Da genta da veza roet dezhan eun tad hag

eur vam a zoujans Doue; d'an eil, da veza bet an eur da zont er bed da c'houel an Aotrou sant Mikel; d'an trede, da veza bet an enor da zougen hano santel diffenner an Iliz; d'ar pevar da veza bet laket entre daouarn eur vagerez santel. Houman a bede an Aotrou Doue da rei he vennoz d'ar bugel-se, ha da ober anezhan unan eus he vrassa servicherien.

Dom Mikel o veza deut digant he vagez da di he gerent, a roas heb dale mercou scler eus an devotion e tlie da gaout epad he vuez oll. Tostic da gastel Kerodern edo chapelic Sant-Claoda. Evit mont d'ar chapel, oa red kerzet var bordic al lenn e oa entre ar chapel hag an ti. Hogen, ar bugel, oajet a bevar bloaz hepken, e vize cavet dalc'h mad er chapel, o pedi a greiz calon. Eun dudi oa he velet; coulscoude he vam e doa aoun ne douje da riscla eur vech bennac el lenn; rac-se e croze d'ar bugel,

evit miret outhan da vont he-unan d'ar chapel. Mikelic a responte : « Va mam vad, eus ti an Aotrou Doue e teuan ; eun Itron e deuz casset ha digasset ac'hanon dre an dorn, ha desket din pedi. » Evit gouzout ar virionez, he vam hen lacas eun devez en eur gambr, hag a brennas an nor varnezhan. Pebes eston ! Caout a ra ar bugel prestic goude, er chapel, var bennou he zaoulin, o pedi dirac imach ar Verc'hez.

— Piou en deuz digoret an nor deoc'h ? a c'houlennas ar vam.

— Ar memez Itron, eme ar bugel, hag hi caer meurbed, e deuz digoret din dor ar gambr, ha digasset ac'hanon d'an iliz ; lavaret e deuz din e renker pedi Doue gant devotion. N'ouzon ket piou eo an Itron vad-se, nag a be lec'h e teu, na da be lec'h e ia.

An Itron Nobletz e deuz bet discleriet ar c'hras burzudus-se dirac ealz a dud.

## EILVET PENNAD

—

**Mikel Nobletz e ti he dad coz, an Aotrou  
Lezvern (1884)**

—

An Aotrou Lezvern a c'hoanteas caout en he di he vap bian, Mikel Nobletz, oajet a seiz vloaz, evit hen lacat er scol gant he vugale vian-all. Eur belec vertuzus, an Aotrou Thomas Cozic, oa carget d'ober scol d'ar vugale-se e maner Lezvern. Mikelic a roas eno adarre mercou dispar eus he garantez evit Doue, hag eus he vodelsti.

Kininterezed dezhan, eus he oad, e oa er memez ti ; ma, ne gomze morse gantho, nag en ho c'hampr, nag el lec'h ebed,

nemet ouz taol, dirac daoulagad ho zud  
coz : merk anat en doa eur mestr-all,  
ouspen ar belec mad carget d'hen scolia.  
Mikel Nobletz ne chomas ket pell e maner  
Lezvern; mervel a reas he dad coz; hag  
an Aotrou Herve Nobletz a gemeras eur  
mestr scol evit deski he vugale, e maner  
Kerodern. Mikel a studias eun nebeudic  
amzer er gær; mes dizale oc casset d'ar  
scol vras, renet gant daou veleec santel ha  
brudet (1587). Dom Mikel en deuz bet  
divezatoc'h trugarekeet an Aotrou Doue  
da veza bet laket gant he dad entre daouarn  
ar veleien-se. Eun dudi oa d'an daou vestr  
mad guelet eur bugel dec vloaz, ker fur  
hag eun den oajet; hag oc'h he velet, e  
c'hellent lavaret ar pezh a so er Scriptur  
divarbenn Tobi : « Evithan da veza bugel,  
n'en deuz biscoaz gret bugaleachou. »

## TREDE PENNAD

**Mikel Nobletz e Plouzeniel**

O veza tremenet nebeud amzer er scol-  
se, Mikel oc casset da eur mestr-all, a  
chome e Plouzeniel, Lan ar Guen oa he  
hano. C'huerc'h vloaz e chomas eno, gant  
ar mestr gouiziech hag anavezet mad er vro  
evit eur mestr dispar (1587-1589). An dud  
a so breman er barrez vad-se, ne dle ket  
mont droug ennho, o clevet ar virionez  
divarbenn ho zadou coz. Mikel Nobletz en  
deuz scrivet d'an Tad Maner, ha da Jannet  
ar Gall eus Sant-Ronan, e oa Plouzenieliz  
en amzer-se, hep tam descadurez, hep  
doujans Doue, egiz tud gouez.

« Pa oan eno, eme Dom Mikel, d'an oad a bevarzec vloaz (1591), Jesus a deurveas en em ziskuez din, ker caer, ker skedus, ma n'hellan na lavaret, nag ober deoc'h entend ar joa am boe ouz he velet. »

Jesus a roas d'he servicher eur gentel gaer divarbenn dispriz ar bed, hag an traou a so kement meulet ha caret gant an dud : an enoriou, ar madou, ar blija-durezou. Compren a reas ar bugel, azalec neuze, e renker, evit heulia Jesus, caout cas ouz ar bed, he zispriz hag he drec'h a grenn.

Evit-se, Mikel a gommansas da garet ar groas, castiza a reas he gorf tener ha dinam, o cousket var ar c'haled hag o lemel digant he gorf kement plijadur a so, ar re zoken e c'heller ho c'hemeret hep offans e kenver Doue.

Neuze e claske ivez gounid da Zoue

calonou he nessa. An drouc-speret a vele gant malis santelez ar bugel iaouank, hag a reas dezhan eur brezel risclus. « Eun devez, emezhan, e oan e creiz eur c'hoad hag e santis eun dentation enep ar burete. Dont a reas em speret ar pezh o doa bet gret ar Sent evit trec'hi ar speret lous, hag e tiviskis va dillad evit en em ruilla en noaz, e touez an drez hag ar spern, eurus da rei va goad da Jesus ha d'ar Verc'hez Vari evit miret ar vertuz santel. » Eur vech all, o veza tentet adarre gant an diaoul lous, Mikel a ieas en noaz e creiz an erc'h, hag e chomas teir heur gourveet var an douar; he gorf oa hanter varo gant ar riou, mes he galon oa tommet gant tan ar garantez.

Doue ne ve morse trec'het gant carantez he grouadurien : Mikel Nobletz a recevas, goude ar brezel-se, ar c'haera eus an oll grassou : ne santas mui iviziken broudou

ar vis fall; epad he oll vuez, e chomas pur ha chast evel eun æl.

Mikel a gommansas da brezec, evel eun abostol, d'an dud paour divar ar mæs. Ne baouezze da ober catekiz dezho : var ar vered, goude an offis ; er parkeier, e kement lec'h e cave eur vanden dud bennac.

Siouaz, evit he boan ne gutuille aliez nemet dismegans, goaperez, taoliou zoken meur a vech.

En he gahierou a verk ez eo bet, dre c'hras Doue, diouallet bete seiz guech ouz ar risel bras da veza lazet.

---

## PEVARE PENNAD

---

**Mikel Nobletz e scolach Bourdel (1894)**

---

En amzeriou-se ne oa scolach bras ebet e Breiz-Izel; red mad oa d'an dud iaouank mont pell eus ho bro da beur-ober ho studi. Da Vourdel a iee calz anezho; essoc'h oa mont beteg ar gær-se, dre vor.

Da Vourdel oe casset Mikel Nobletz hag he vreudeur. Diou vech oant bet e risel da veza beuzet en eur vont da Vourdel. Mes eno e c'fjont eur risel goassoc'h c'hoaz, ar risel da goll ho eneou, e mesk ar scolacrien dirollet.

Neuze, evel breman, ha marteze muioc'h evit breman, ar Vretonet a gare ho bro,

hag en em gleve entrezho, evit stourm a enep ar scolaerien eus ar broiou-all, pa save trouz entre eur Breizad hag eun all. Unan e vize choazet da gabiten, priol ar Vretonet e vize leshanvet. Eur vicher risclus e oa hounez.

Breur hena Mikel Nobletz oa bet hanvet da briol; evit he sicour er brezelioù bianse, Mikel a zescas c'hoari gant an armou; dont a reas gouzied bras, hag e oe laketa da gabiten goude he vreur.

Hogen eun devez evit sicour he vreur goall voasket gant eun all, Mikel a savas he gleze us da benn ar scolaer iaouank-se.

Mes er memez amzer an Itron en doe guelet meur a vech e Kerodern, hag a gasse anezhan da bedi da chapelic Sant-Claoda, ar memes hini a deuas d'he gaout, a grogas en he zorn, hag a viras outhan da rei taol ar maro da enebour he vreur. Mikel Nobletz he-unan en deus contet ar

burzud-se d'an Tad Maner. Den all ebed, nemethan, n'en doa guelet an Itron. Eun nebeud deizioù varlerc'h, pa oa o vont d'al lec'h m'en em unane ar Vretonet, Mikel a glevas eur vouez o lavaret : « Chomit aze, chomit aze. » Ker buan a dennas he gleze. Mes an Itron en em ziskuezas dirazhan, hag a gomzas evelhen : « Clevit va mouez, ha sentit; red eo deoc'h heulia va Map Jesus var hent an humilite, ar glander, ar baourentez, ha dispriz ar bed. »

Kement a c'hressou dispar a ra da Viket trec'hi he oll enebourien; en em strinka ra d'an daoulin dirac ar Verc'hez, he Vestrez hag he Itron; lacat a ra he gleze var an douar, e kichen he zreid benniget, he choas a ra evit he Vam hag he Rouanez hiviziken, ha goestla a ra c'heulia beteg ar maro banniel Jesus crucifiet.

Petra da ober breman? Mikel Nobletz a

c'houlennas sclerijen ar Speret-Glan dre ar Verc'hez Vari.

Epad ma claske petra da ober, eun den bennac a gomzas dezhan divar benn scolach Ajen (Agen), renet gant Tadou Compagnunez Jesus.

— Eno, eme an den-se, e tesker coulz hag aman an oll draou a sell ouz ar bed, hag ouspen-se, ar scolaerien a so sicouret ar guella ma c'heller da servicha Doue.

Mikel en deuz skrivet en he gahierou : « Mill bennoz deoc'h, o va Doue, da veza roet din ar c'hras da anaout ar scol santel-se, scolach Ajen. »

Ractal e kuiteas Bourdel, hag e i eas da Ajen evit peur-ober he studi (1597).

## PEMPET PENNAD

—

**Mikel Nobletz e scolach Ajen (1697)**

—

Mikel a gavas eno ar pezh a glaske ; divezatoc'h e lavaro : « An amzer ez oun bet e scolach Ajen, eo ar c'haera loden eus va buez. »

Dalc'h mad e sonje en he bec'hejou, hag he santimanchou santel a greske a zeiz da zeiz.

C'hoantaat a reas mont e Breuriez ar Verc'hez, etouez ar re vella eus ar scolaerien. Neket red lavaret gant pebez joa oe digemeret gant an oll vreudeur. Leket oe da zigeri ha da brenna an nor var ar chapel, pa vize unanet ar scolaerien enni ;

an dever-se oa eur gark a enor evit an den iaouank devot. Souezet oa an oll o velet ar vertuziou caer a lugerne e servicher ar Verc'hez santel.

Ar studi a gerze da heul an oll vertuziou; Mikel Nobletz oa er penn kenta evit an oll skianchou.

Er bloavez diveza ma studie ar philosphi, an Aotrou Doue a roas dezhan eur c'hras dispar : bete neuze en doa kerzet var hent ar goure'hemenou dre an doujans santel da offansi Doue; azalec ar bloaz-se, oe savet he ene beteg ar garantez pur evit Doue, ha distaget he galon ouz peb aoun ha peb carantez evithan he-unan. Santout a reas ive, azalec neuze beteg he varo, eur garantez dous meurbed evit an dud paour, henvel ous carantez ar vam an denera.

Doue a roas dezhan da anaout e oa pardonet he oll bec'hejou, ar pezh a dennas divarnhan eur bec'h ponner, hag a reas

dezhan tanva an dousder eus servich an Aotrou Doue, guell evit araoc. Dre anaoudegez vad, Mikel a gommansas da heulia ar reolen var zispriiz ar bed, roet dezhan gant Jesus-Christ he-unan.

Er bloaz 1598, d'an 30 a viz guengolo, gouel sant Jerom, doctor eus an Iliz, Mikel Nobletz a voestlas disprizout ar bed hed he vuez.

Evit gallout pellat guell ouz safar ar bed, Mikel a c'houlennas digant he dad conjez d'en em zispartia diouz he vreudeur, deut da Ajen ive da beur-ober ho studi. Aotreet oe dezhan ar pezh a c'houlenne, hag e ias da loja e ti eun den santel, a veve gant he bried en œuvrou a drugarez. Gant joa vras oe digemeret Mikel Nobletz e ti an den-se. Eur gambr oe roet dezhan, hag ouspen, eul lec'hic-all muioc'h cuzet, en huella plas eus an ti, evit ma c'helje beza didrous eno, hag ober an orezon a galon

en he æz. Mikel a c'helle lavaret neuze gant ar roue David : *Elongavi fugiens et mansi in solitudine* : « Kemeret am euz an tec'h, hag ez oun chomet en eul lec'h distro. » Pedi, studia, ober pinijen, setu eno buez Mikel Nobletz. Ne vele he vreudeur hag ar scolaerien-all, nemet en eur vom d'ar scol, pe d'an iliz.

Ne gomze nemeur gant an dud-all nemet gant he dad covessour, ha gant he vistri scol ; gant an dud paour ive, evit ho c'honsoli ha rei dezho aliou santel. Clask a ree compagnunez ar scolaerien muia devot, evit ho dougen d'en em rei oll da Zoue.

Lenn a reas gant plijadur ha gant frouez buez sant Ignas a Loyola, hag e santas egin ar sant-se, eur c'hoant bras da labourat evit gloar Doue ha silvidigez an eneou. Mike na zebre ket a gik, ha na eve ket a vin. Dre-se e c'helle esporn darn eus an arc'han-

casset dezhan gant he dad, ha rei sicour d'ar scolaerien baoura. An aluzen-se a roe nerz d'he aliou mad. Setu aman penaoz e comze d'he gamaradet : « Grit breman ar pezh a gerot beza gret, pa vo red mervel. Seul nebeutoc'h a vadou o pezo er bed-man, seul essoc'h e vezo ober dilez anezho. Diouallit da goll an amzer roet gant Doue evit he c'hloar ha silvidigez oc'h ene. Buez an den a so eun devez labour hag a dremen buan : epad an deiz-se, sclerijen Doue a bar var an oll dud ; mes souden e teuio an noz ha ne vezo mui sclerijen, nag amzer da ober ho silvidigez. »

Dre c'hras Doue, meur a zen iaouank desket a heulias an aliou mad-se. E touez ar re-all e cavomp eun aotrou eus escopti Landreger, eus famill Kerozar, hanvet Per Kintin, pe an Aotrou Limbau. Heman oa bet en arme, mes dont a reas adarre d'ar scol, hag e ieas divezatoc'h en urz

sant Dominic. En he lizeriou d'an Aotrou Nobletz, Per Kintin e roe dezhan an hano dous a dad spirituel. Rac pa oant er scolach Ajen, Mikel Nobletz en doas desket d'he vignoun hent ar santelez : disprizout ar bed hag he vadou fazius. Per Kintin, epad ma heulie an armeou, en em voazas da eva re, hervez ar giz fall a rene en he vro. Dre ali Mikel Nobletz, e tiseclerias eur brezel disamant d'an tech fall-se : pedennou, pinijennou calet, aluzennou, Per Kintin na espernas netra evit trec'hi he enebour. Doue a roas dezhan da anaout e ranke dilezel a-grenn an evach, anez kement-se, e teuje da goll gras Doue hag ar vuez eternal. Heulia mad a reas an urz-se, a lavaras Mikel Nobletz d'an Tad Maner, hag azalec neuze e kerzas gant joa var hent ar Sent. Eur gernez vras e tigouezas er bloaz-se, e kær Ajen, hag er vro. Per Kintin a rannas d'ar beorien

he oll arc'hant. Goude-se e verzas, evit ho sicour, he listri taol hag he levriou zoken. Coulscoude ar beva, elec'h distaol, a deue keroc'h. Per Kintin a ieas da Vontroulez, a verzas he zouarou, hag e teuas adarre da Ajen, da sicour an dud paour, keid a badas he arc'hant. Coulscoude o veza en em c'hret paour en eun taol, e oe tamallet dirac barnerien Montroulez da veza debret he vadou, egiz eur prodig, er c'hoariou hag en ebatou. Red mad oe dezhan, dirac ar barner, discleria petra en devoe gret gant he arc'hant. Evel-se oe anavezet gant an oll he aluzennou hag he garantez burzudus !

Evit delc'her var he studi, e rencas ober scol d'ar vugale vian, ha gounit peadra da veva he-unan.

D'ar suliou ha d'ar goueliou, e vize guelet Per Kintin gant he vignon Mikel Nobletz, o vont d'ober catekiz d'ar bai-

santet er parreziou nessa, evit miret dezho ho feiz enep an hugenodet.

Mikel Nobletz a glascas pe seurt pleg fall oa ar c'hrenva ennhan c'hoaz evit ober brezel d'ar pleg fall-se, hag hen dis-c'hrienna ouz he galon. Anaout a reas e oa douget dreist-oll da garet beza prizet gant an dud; hag en doa aoun da veza disprizet. Pedi a reas an Aotrou Doue da rei dezhan lec'h da stourm enep ar pleg fall-se. Selaouet oe he beden. — Mikel oe souden goall vrudet, goapeet, disprizet gant tud ar bed. Santout a reas pegen diez eo trec'hi ar pleg a so ennomp da stourm enep ar goall deodou, evit miret hon hano mad; santout a rec ar goler hag ar venjans o trouza tro-var-dro d'he galon. Evelato ne gollas ket he nerz calon. Eun nozvez, daoulinet e kichen he vele, e c'houlenne digant Doue nerz da zougen ar groaz deut eus he berz. « Guerc'hez santel, emezhan,

Guerc'hez va Mam, ennoc'h ema va oll fizians, roit sicour din, me ho ped. » — Ar Verc'hez en em ziskuezas dezhan. « Va bugel caret, emezhi, n'o pet ket aoun; va Mab Jesus ho tiouallo, ha me ne vankin morse d'ho sicour. »

Mikel a bignas neuze en he gambr vian, oa dindan lein an ti, evit trugarecat he vam benniget.

Ar Verc'hez a roas dezhan eur c'hras-all, en em ziskuez a reas dezhan adarre gant teir gurunen :

« Setu aman, va bugel, teir gurunen am euz bet evidoc'h digant va Mab : Ar genta eo curunen ar guerc'hdet; c'hui viro ar vertuz-se, hep tach ebed, beteg ar maro. Pa vezo red labourat evit gloar Doue ha silvidigez an eneo, comzit hep aoun gant bep seurt tud, ha likit ho fizians e galloud ha madelez va Mab.

» An eil gurunen eo hini an doctoret,

ha mistri ar vuez santel. C'hui dle deski ar vuez-se da galz a dud, gant sicour va Mab.

» An deirvet eo curunen dispriz ar bed; c'hui renk beva gant an dispriz-se, ha dindan he lezen, e mesk an dud a Iliz. Commansit breman da heulia he lezen, ha disprizit an drouc-prezec faoz savet enep deoc'h; dizale e vezo anavezet ar virionez.»

Ar Verc'hez a ieas kuit hag a lezas an den iaouank leun a joa, a garantez hag a anaoudegez vad (1600).

Diganthan he-unan hon euz desket ar peze lacomp aman. Scrivet int bet ganthan en he gahierou, hag araoc mervel, dirac ar Sacramant santel, meulet ra vezo, Dom Mikel a zisclerias ar burzudou-se evit gloar ar Verc'hez Vari. Mikel Nobletz ne gomprenas ket mad avoalc'h (hen he-unan en deuz anavezet kement-se) ar peze doa lavaret dezhan ar Verc'hez divarbenn dispriz ar bed e renk an dud a Iliz.

Setu perac e chomas c'hoaz er scol, da c'hedal anaout mad bolontez Doue divarbenn ar stad a vuez. Da genta e sonchas chom er bed, hep dimezi. Mes goude beza pedet calz, ha gret pinijennou calet, a velas e tlie mont da velec, ha chom e touez tud ar bed pe mont en eur gouent bennac. Evelato ne vele ket petra da ober, na pehini choaz eus an oll urzou relijius. Tregasset oa he speret gant an traou-se. O lenn buez sant Ignas a Loyola, e tomme he galon evit Compagnunez Jesus; reolen sant Ignas, ha buez he relijiuset, a blije dezhan. Mes ne grede ket dezhan caout icc'het avoalc'h evit ober scol, pe labourat er missionou egiz a ree bugale sant Ignas. Urz sant Francez a blije calz d'he galon; Doue a roas dezhan grassou evit anaout ha caret Tadou an urz santel-ze, ho reolennou, ho finijennou, hag ho oll vertuziou. Hogen Doue en doa sonjou-all var Mikel Nobletz.

## C'HUEC'HVET PENNAD

Mikel Nobletz var ar studi da vont  
da velec

En oad e oa da veza beleget; he vignon  
Per Kintin oa cossoc'h c'hoaz; he eiz  
vloaz ha tregont a rene.

Mont a rejont ho daou da studia an  
theoloji da Vourdel, dindan an Tadou eus  
Compagnunez Jesus. Pevar bloaz int bet  
oc'h ober ho studi eno var an theoloji, ar  
Scritur sacr, var lezennou hag histor an  
Iliz. Renan du Louet, divezatoc'h Escop  
e Kerne, en em gave e Bourdel er memez  
amzer, hag e lavaras e c'houie Mikel  
Nobletz an oll Scritur santel *dindan evor*,  
e grec.

An Tad Laport, unan eus he vistri e  
Bourdel, a scribe dezhan, pa oe distroet  
d'ar gêr : « D'an doctor muia gouiziec eus  
Breiz-Izel, d'an Aotrou Mikel Nobletz. »  
Coulscoude Mikel Nobletz a heulie kente-  
liou eur Mestr-all, kenteliou ar Speret-  
Santel, a zeske dezhan ober peden a galon,  
hag a garge he speret eus ar c'haera  
santimanchou.

Renons a reas da gement plijadur a so,  
ha ne glasse nemet ar groas, gant Jesus  
crucifiet. He galon oa devet gant tan ar  
garantez divin : eun devez e rencas teurel  
dour ien var boull he galon, da zistan ar  
groez a deue eus carantez an Aotrou.  
Lenn a reomp ar memes burzud e buez  
meur a sant ha meur a santez; anez e  
vize diez credi kement-se.

Mes Doue na ro ket ar grassou caer-se  
evit netra, ne teuont nemet varlerc'h pini-  
jennou calet. Mikel a gemere bomdez an

disciplin, da lavaret eo, e tispenne he gori  
a daoliou fouet, aliez beteg ar goad; ne  
zebre nemet ar pezh a oa red, evit miret  
da vervel; cousket a ree var ar c'halced ha  
ne gemere perzh ebed en ebatou muia di-  
vlam.

An Aotrou Nobletz he dad, o veza clevet  
pegement a vrud en doa he vab evit he  
vouiziegez, a grescas ar som arc'hant e  
casse dezhan bep bloaz.

An den iaouank a grescas he aluzennou  
hag he oberiou mad. O va Doue, pege-  
ment a blije deoc'h eur garantez ken tener  
evit an dud ezomec!

Diou vech e tigouezas da Vikel caout,  
en he ialc'h, an arc'hant roet ganthan evit  
tenna eus ar prizon tud paour ne oant  
ket evit paea ho dle.

En em glevet a reas gant scolacrien-all  
evit mont var ar mæz d'ober catekiz d'ar  
vugale, ha d'an dud paour.

## SEIZVET PENNAD

Mikel Nobletz dare da vont da velec (1605)

O veza gret he studi var an theoloji,  
Mikel a sonjas adarre mont var roujou  
sant Ignas, ha rei eur bloavez oll d'an  
exercisou spirituel, araoc kemeret an  
urzou sacr. Ober a reas eur pelerinach da  
eur chapel devot savet en enor d'ar Ver-  
c'hez. Iun a reas epad c'huec'h miz;  
cousket a ree var eur planken calet, tre-  
men a ree an deiz hag aliez eur penn  
bras eus an noz, o veuli an Aotrou Doue.  
Goude-se, e ias d'ar gêr. Pebez joa evit  
he gerent! Mikel a vezo enor ha gloar he  
famill. Ia, bez' e vezo; mes ne vezo ket

hervez sonjou ha ioulou he dud. Ar re-ma oa mall bras gantho guclet Mikel o vont da velec; Mikel avad ne oa ket prez varnhan. Ne ket avoalc'h, emezhan, beza belec, red eo caout ar santelez hag ar vertuziou deread evit ar stad-se ! Sonjal a ree pegen diez oa d'ar belec, etouez an dud, beva distag he galon ouz traou væn an douar !

He dad oa drouc ennhan divar benn an dale-se, rac esperans en doa e vize roet eur renk a enor d'he vab, gant Aotrou 'n Escop Leon; Rolland Neuville, mignon d'an Aotrou Nobletz.

An Aotrou 'n Escop a bedas an Aotrou Mikel da zont gant he vreudeur da Gastel-Paol, ha da gemeret perz en eun diviz var an theoloji dirac an oll zoctoret gouizieca eus an Escopti. Mikel Nobletz a sentas, hag e roas eun desteni caer eus he vouiziegezh hag eus he santelez dispar.

An Aotrou 'n Escop a ginnigas d'an doctor iaouank ar c'henta cargou e vize bet da rei en Escopti. Elec'h ober plijadur da Vikel, ar bromessa-se a reas dezhan poan bras. Mont a reas buan kuit diouz Castel, da guza he zescadurez hag he vodedi. Breudeur Mikel Nobletz oe bet eus ar re vella ive etouez an theolojianet, hag an Aotrou 'n Escop en doa gret dezho oll promessaou caer.

An Aotrou Herve Nobletz oe carget a joa o clevet kement-se. En avis da lacat he vab Mikel d'en em blijout er bed, e reas ober dezhan eur guiscamant henvel diouz hini ar chaloniet hag ar velcien eus ar reng huela.

Mes Mikel a sonjas ne oa ket deread an habit-se evit eun den evelthan, en doa goestlet clask beza disprizet gant tud ar bed. Kemeret a reas he zillad coz hag a roas he re nevez da eur belec paour, en

doa an enor da zougen bemdez, entre he zaouarn sacr, corf hor Salver.

Pegen estonet oc an Aotrou Kerodern, pa gavas ar belec paour-se guisket gant dillad caer he vap. Mont a reas drouc ennhan, hag a reas d'ar belec kez-se tenna an dillad nevez hag ho c'hass d'an Aotrou Mikel. Crozal a reas ive calz d'he vap; Mikel a selaoue gant respet. Coulscoude, a respontas : « Va zad, penaoz oc'h euz credet ober dismegans da Jesus-Christ, rac dre garantez evit hor Salver eo am euz roet an dillad-se d'he velec. »

Ar c'homzou-se a bicas calon an Aotrou Kerodern; goulén a reas zoken pardon digant ar belec, ha rei a reas dezhan adarre an dillad oa bet tennet diganthan. Evelato, an Aotrou Kerodern, re stag euz traou ar bed, a glaske ober d'he vap mont da velec evit caout ar plas mad promettet dezhan gant an Aotrou 'n Escop.

« Va zad, a responte Mikel, n'oun ket goest da zougen ar bec'h ponner-se; n'oun ket galvet gant Doue da gemeret ar gark eus an eneou. Credi a ran ez oun galvet da labourat gant muioc'h a frouez, ha nebeutoc'h a riscl evidon, er missionou am euz sonch da ober e Breiz-Izel. Guell vize ganin beza laket da ziuall ar chatal, eget beza carget da c'houarn eur bopl tud, pe savet en eur renk huel en Iliz. »

Pebez taol curun evit an Aotrou Kerodern ! N'hellas ket mouga he gounar, hag e lavaras : « Mad, mar caf deoc'h ez oc'h galvet da ziuall al loenet, me a rei deoc'h ar gark deread-se ! » — Ha, var gement-se, e roas urz d'he vap Mikel da vont da ziuall eur vanden loenet.

« Va Doue, eme ar c'hloarec santel, displijout a ran d'am zad a so var an douar, mes c'houi a vel va c'halon; evit plijout

deoc'h, o va Zad a so en Env, evit ober ho polontez a ran kement-man. »

Mikel a chome stard en he volontez ; hag he dad a roas urz dezhan da vont kuit divar he dro ; ne oa ket evit hen gouzanv er maner.

Pellaat a ra Mikel eus ti he gerent, an dour en he zaoulagad, mes he galon carget gant joa an Env. Poan speret en deuz o velet he dad, hag he oll gerent, dallet gant ar garantez evit madou faoz ar bed, mes dridal a ra he galon gant ar joa, o sonjal ez eo goall gasset evit ar justis, evit beza kerzet var roujou Jesus he Roue.

Mont a reas da c'houlén digor digant eur vreg baour, oa bet he vam magerez.

Egiz eun æl oe digemeret e ti bian he vagerez ; ouspen eur miz a vevs eno, guisket ha maget evel eur paour kez. Coulscoude e comze gant an ælez hag ar sent ; he galon oa gant Doue. Pedi a ree

hep paouez, nemet pa c'helle ober catekiz d'ar vugale, ha d'an dud paour divar dro. Mont a ree ive da c'houlén an aluzen, hag e roe ar pezh a zastume d'an dud ezomec eus ar barrez. — Collet eo he benn ganthan, a lavare he gerent, o doa mez o clevet comz outhan.

## EIZVET PENNAD

Mikel Nobletz e Paris (1606)

Coulscoude, Mikel a glevas mouez an Aotrou Doue o lavaret dezhan : Red eo ober va bolontez ; it eta da glask sclerijen digant eun den santel bennac. Sonjal a reas eo risclus beva hep eur rener hag eur sturier ; anaout a ree ar pez a lavar an dud eus he vro :

Nep na sent ket eus ar stur,

Eus ar garrec e rai sur.

Mont a reas eta da gaout he dad gant fizians, da c'houlén diganthan mont c'hoaz nebeud amzer da studia da Baris, araoc

mont da velec. An tad kez-se, o clevet he vap o comz gant kement a zousser hag a fizians, a santas he galon teneræet, hag a roas d'he vap muia caret guechall, ar pez a vanke dezhan evit mont da Baris.

Mikel a i eas d'ar scoliou bras, mes n'en doa netra da zeski mui var sant Thomas hag an theoloji ; gouzout a ree kement hag ar re vouizieca. N'en doa ket desket c'hoaz iez an hebreeth ; deski a reas eta ar iez-se, evit gallout lenn ar Scritur Sacr, scrivet darn anezhi er langach-se. Mes elask a reas dreist-oll eur mestr da c'houarn he ene. An Tad Coton, eus Compagnunez Jesus, oa brudet caer evit he vertuziou hag he vouiziegez. Mikel a i eas d'he velet. Discleria a reas dezhan he vuez penn-da-benn ; madelezou an Aotrou Doue en he genver, ar c'hoant en doa da veza disprizet gant an dud, ha d'en em rei da ober missionou e Breiz-Izel.

Epad ma comze ar c'hloarec iaouank gant ar relijius santel, an Aotrou Doue a skuille he c'hrassou var an eil hag egile. An Tad Coton, an dour en he zaoulagad, a respontas :

« Va map, gras an Aotrou Doue a so ganeoc'h; na zaleit ket pelloc'h da vont da velec, ha bevet goude-se hervez ar sclerijen so roet deoc'h eus an Env, evit brassa gloar an Aotrou Doue ha silvidigez an eneou. »

Mikel a gemeras ar c'homzou-se evit comzou an Aotrou Doue. Goulen a reas beza beleget e Paris, ha goude-se, a reas le da ren ar vuez santela etouez ar veleien, hep kuitat ar bed.

## NAOVET PENNAD

### **Offeren genta Dom Mikel e Plougerne**

Evit ober plijadur d'he dad ha d'he vam garet, Mikel Nobletz a ieas da lavaret he offeren genta da Blougerne. Mes ne oa pedet da zont d'al lidou santel, nemet he gerent tosta; rac ne felle ket dezhan e vize gret, hervez ar giz fall a rene neuze en he vro, festou bras evit pevar pe bemp cant a dud, var zigarez he offeren genta. Piou a c'helfe lavaret gant pebez devotion e pignas eus an aoter an dro genta ! Azalec neuze, he zevotion na ienas morse; var gresk a ieas bemdez, keit a ma c'hellas offerenni.

Evit caout devotion da ginnik da Zoue ar sacrifis santel, e oa boazet da ober bep noz eur binijen bennac; neuze azalec hanter-norz beteg an heur da bignat ouz an Aoter, ne baoueze ket da sonjal er sacrifis divin; goude he offeren, e tremene div heur o trugarecat an Aotrou Doue.

Piou bennac, emezhan, a so galvet gant Doue da vont da velec a so galvet ive da vont da sant, hag e renk labourat d'en em sevel dreist ar re-all er vertuziou, egiz ma eo savet dreist an oll dre he gark. Setu perac e cave diez gulet tud iaouank o kemeret an urzou sacr, araoc beza dis-c'hriennet an oll vissou eus ho c'halon ha plantet en ho lec'h ar vertuziou christen.

Claoda Tourons, he niz, maro person e Plouescat, en Escopti Leon, n'en doa ket heuliet var gement-se aliou he contr santel; Mikel a scrivas dezhan : « Va niz, ar choaz

oc'h euz gret gant re a brez eus eur stad a vuez n'eo ket eur merk a furnez christen. Dlet oa deoc'h credi kentoc'h d'an Hini en deuz tennet ac'hanoc'h ouz an Egypt, da lavaret eo, ouz ar bed risclus, eget d'an dud a heuill dallentez ar bed, milliget gant Jesus-Christ.

» Red oa deoc'h clask ar groaz hag an dispizans, araoc sevel en huella renk etouez ar bopl christen.... Arabad eo mont da dad spirituel, araoc beza oc'h-unan eur christen crenv ha nerzus. Lennit evit-se an Testamant coz hag an hini nevez, ha grit hervez comzou hor Salver : Claskit da genta rouantelez Doue hag he santelez : an traou-all a vezo roet deoc'h var ar marc'had. »

Buez an Aotrou Mikel Nobletz

---

EIL LEVR

---

Dom Mikel en em ro  
d'ar Missionou

---

MISSIONOU E LEON HAG E LANDREGER

(1607-1614)

## KENTA PENNAD

---

### **Retred Dom Mikel e Tremenac'h**

---

Araoc commans he vuez a abostol, Mikel Nobletz, leshanvet azalec neuze Dom Mikel, a sonjas heulia reolen sant Ignas, ha tremen eur bloavez c'hoaz er retred.

Ober a reas sevel dezhan, demdost d'ar mor, en eul lec'h hanvet Tremenac'h, eul lochik goloet gant plous. Eno e veve he-unan, o pedi hag oc'h ober pinijen. Dougen a ree noz-deiz eur sae run ; ne zouge crez lien ebed, nemet ar c'hollier guenn dindan he soutanen. Bemdez en em fouette gant kerdenn bian, bete lacat ar goad da redec var he gorf ; he vele oa an douar ien, hag

he benn vele, eur mæen calet. Ne zebre nemed eur pred boued bemdez, ha pe seurt boed, siouaz ! Farz gret gant heis, hep hollen nag amann ; pe eun tam iod goular digasset dezhan gant eur vreg baour eus ar c'harter-se. Na eve nemet dour scler, ha c'hoaz na eve ket diouz he sec'hed.

Bete re a binijen a reas an den santel, ha dont a reas dezhan poan estomac, hag en doa bec'h goude-se o tibri he damic boued. Da fin he vuez e c'houlennas pardonn da veza manket dre ar binijen gret en he iacouankis d'al lezen ar furnez. Coulscoude en em gonsole, o sonjal en doa tennet varnezhan, dre ar vuez-se, disprizans tud ar bed, ha bennoz an Aotrou Doue :

Ma iec'hed am euz offanset,  
O trouc entend dispriz ar bed ;  
An dra-se n'am euz ket keziet,  
Rac ma Jesus am euz cavet.

Epad ar bloavez-se, Dom Mikel ne gomze gant den ebed, nemet gant he dad coves-sour. Ne guittee morse he diic, nemet evit mont d'an iliz da lavaret he offeren. Doue a skuillas varnhan ar c'haera grassou ; dreist ar re-all, e roas dezhan da genta ar c'hras da bedi, hep tregas ebed divar benn traou-all, epad he bedennoù ; d'an eil, ar c'hras da gomz gant an dud eus Doue hepken, hag eus ar silvidigez ; d'an trede, ar c'hras da anaout penaoz discleria d'ar bobl mysteriou ha lezennou an Aotrou Doue.

Eno e commansas ober taolennou mysterius evit rei da entend dre an daoulagad, d'an dud dizesket coulz ha d'an dud desket mad, ar pezh o deuz da gredi ha da ober evit plijout da Zoue, ha mont gant hent ar Baradoz. An diaoul oa counaret enep an den santel. Ne oa ket peur-achuet he vloavez retred, pa rencas pellat eus he

lochen. Drouc prezeget oc bet enep dezhan, gant eun den devot bennac. Heman ne oa ket evit credi e chome ar belec iaouank-se he-unan, da ren eur vuez ken rust, hep abec-all ebed, nemet dre garantez evit an Aotrou Doue.

Credi a reas eta da gomzou an dud fall, e oa bet touellet gant Satan da ober brezel d'an den santel.

Mes an Aotrou Doue a gemeras entre he zaouarn caoz he servicher leal; disku-zet e oa, hep dale, malis he enebourien.

Al lec'h m'eo bet Dom Mikel o chom er bloavez-se, oe anavezet evit eul lec'h santel gant mouez ar bopl, ha mouez an Aotrou Doue zoken, rac calz a vurzudou a so bet gret ennhan.

## EILVET PENNAD

**Mission Dom Mikel e Plougerne (1607)**

Piou bennac n'en deuz ket aked evit silvidigez he dud, ha da genta, evit tud he di, hennez, eme an Abostol sant Paol, n'en deuz ket a feiz; goaz eo egot eun den divadez. Dom Mikel ne veritas ket ar gourdrouz-ze. E parrez Plougerne, el lec'h ma oa ganet, e commansas he vissionou. Setu aman ar pezh a so bet discleriet var labouriou kenta ar missioner bras, gant he vreur hena, an Aotrou Kerodern, tad d'an Itron Carne, comtez :

« Caout a reas ar bopl hep tam desca-durez christen. Dom Mikel a gemeras

calz a boan da ober bemdez catekiz, evit planta e pennou an dud ar pez a renker da c'houzout evit beza salvet. Prezec a ree en ilizou, en tiez, er parkeier, e kement lec'h e cave tud dastumet ha bodet. Comz a ree gant calz a nerz enep ar vissou hag ar pec'het; ha dre he skueriou santel hag he sermoniou, e tistroas eun niver bras ouz ho Doue.

Mes an dud-all a gemere Dom Mikel evit eun den troet he speret.

He gerent tosta a reas dezhan adarre ar goassa brezel. Lavaret hon euz e oa douget he dad da glask an enoriou ha madou an douar, evithan hag evit he vugale.

An drouc-speret a gavas an tu, dre ar pleg fall-se, da lacat eur gounar estonus en he galon enep Dom Mikel. An Itron Kerodern oa fachtet bras ive, coulscoude e claske miret na vize scoet ha goall gasset

ar belec iaouank gant he dad. Mont a reas dre gaer dezhan : « Va map kez, emezhi, sonjit pebez counar a so e calon ho tad, ha n'euz abec-all ebet a gement-se, nemet ho puez ker dishevel ouz hini ar re-all. Renonsit eta d'ar vuez-se, ha kemerit eur gark bennac, evit caout peadra da veva ho-unan, ha da sicour zoken ho preudeur. » Dom Mikel a respontas : « Ma mam gez, bezit dinec'h evidon, providans Doue a bourveo ac'hanon. »

An Itron a deuas ive da gaout cas eus he map. Evelato, Dom Mikel a gerzas gant he hent, e creiz dismegans an dud; ne glaske bepred nemet silvidigez an eneo.

Mont a ree eus an eil kær d'eben da glask ar vugale, hag an dud-all, evit deski dezho ho fedennou hag ho c'hatekiz. An Aotrou Doue a skuille he vennoz var labour he vissioner, hag an oll dud-se a zeske buan ho relijion. Dom Mikel a zas-

tume an aluzen evit an dud paour; mont a ree da velet ha da gonsoli ar re glanv. D'ar sul ne oa ket avoalc'h evithan covez, prezec, ober catekiz e parrez Plouguerne, mont a ree da ober ar memez exercissoù er parrezioù-all tro-var-dro. Coulscoude, counar an Aotrou Kerodern a ieas var gresk, hag eun devez e c'halvas Dom Mikel, hag e lavaras, dirac an Itron Kerodern, ha dirac oll vugale an ti : « Guelit pebez coll evidoc'h, dilezel ar gark a ginnig an Aotrou 'n Escop; pebez disenor evidomp-ni oll, hag evit an hano e tougomp. It eta kuit eus ar maner-ma, it da glask lojeiz ha boued el lec'h ma carfot. »

Dom Mikel a ieaz kuit, hep lavaret comced. Ar pezh a ree muia poan d'he galon, e oa anaout pegen doun oa griziennet speret ar bed milliget e calon he gerent.

O veza digouezet en eul lec'h distro,

Dom Mikel a zaoulinas, hag, o sevel he zaoulagad varzu an Env, e lavaras : « O va Doue, setu me dilezet gant va zad ha va mam; mes c'hui vezo va scouazel ha va minic'hi. Va digemeret evit ho pugel, o va Zad eus an Env; o pet truez, me ho ped, eus eneu va zad ha va mam; na zalc'hit ket coun eus ho fec'het em c'henver-me. »

Dom Mikel e chomas c'hoaz e Plougerne, da genta evit eva beteg al li ar c'halizr eus dismegans ar bed; d'an eil, evit clask distrei ouz Doue he dad, he vam, hag he gerent-all.

Mont a reas adarre da c'houlenn lojeiz da diic he vam magerez. Pebez dienez en doa da c'houzanv ! Mes an Aotrou Doue a roas dezhan da zougen eur groaz pouneroch eget ar re-all : chom a reas hep dousder spirituel cbed, evel dilezet gant Doue ! Hen he-unan en deuz roet da anaout ar

stad-se eus he ene d'he govessour, a  
Aotrou Pennec, ha da veur a hini-all.

Coulscoude, derc'hel a reas da labour  
evel kent. Ar pezh a zigouezas gant Jesus  
he Vestr, e tigouezas ive gant Dom Mikel  
Cals a dud a bep stad, a bep oad, a bep  
renk, a gleve he sarmoniou ha catekis  
mou. Hogen ar re baoura ha distera  
zistroas da genta ouz Doue. Ar re vras  
pinvidica chome varlerc'h. Rac Dom Mikel  
a gomze hardiz enep ar vissou hag  
disurzou; enep gloar faoz ar bed, an  
risdet, al luxur daounet, al laeronsi,  
vezventi, ar festou noz hag an ebatou  
fall.

Ar seurt comzou-se na blijent ket d'an  
oll; meur a vech o deuz tennet var  
missioner goaperez an dud, ha taoliou  
zoken. Eun den bennac eus he familh  
ieas diou vech varlerc'h Dom Mikel,  
clask he dreuzi gant he gleze.

Dre c'hraas Doue, e vancas he daol fall,  
mes ne renonsas ket d'he c'hoant.

Mont a reas d'an iliz evit laza ar belec  
santel gant eun ten pistolen. Dom Mikel,  
eurus da vervel evit beza prezeget lezen  
Jesus-Christ, en em strincas d'an daou-  
lin, hag a zisoloas poull he galon.

Ar muntrer, souezet o velet kement a  
merz calon ha kement a zoujans Doue, a  
lezas he bistolen da goeza, hag he gounar  
a-iaez kuit. Nebeud amzer goude-se, an  
den-se oe condaounet d'ar maro, evit calz  
a dorfejou-all. An Aotrou Kerodern, he-  
unan, a deuas eun dro bennac, gant eur  
penn baz, varlerc'h he vap; mes Dom Mikel  
a dec'has, evit espern d'he dad ar glac'har  
da veza bet gret an drouc-se. Tamallet oe  
ive gant tud fall, dirac an Aotrou 'n Escop  
Leon. Mes an Aotrou du Louet, guechall  
er scol e Bourdel gant Dom Mikel, oa vikel  
vras. Ne oa ket diez anaout gevier an  
eodou fall.

## TREDE PENNAD

—

**Tad ha mam dom Mikel distroet ouz  
Doue gant ho map (1607)**

—

An Aotrou Kerodern en doa cas ouz he  
vap Dom Mikel, hag ouz he zoare da vev  
coulscoude ne oa ket evit miret da ve  
he garantez burzudus, hag he sarmonio  
caer. Doue a selaouas erfin pedennou Dom  
Mikel evit he dad hag he vam. An Aotrou  
Kerodern oa en iliz an deiz varlerc'h m'e  
doa clasket rei taoliou bas d'he vap belec  
Dom Mikel a bignas er gador, hag a reas  
eur sarmon leun a zouder, var deverio  
an tadou hag ar mamou e kenver he  
bugale, hag ive var deveriou ar vugale

kenver ho c'herent. An Aotrou Kerodern  
a santas pebez pec'hejou en doa gret e  
kenver Dom Mikel, he galon oa piket. Dom  
Mikel a velas kement-se. Mont a reas da  
gaout he dad, goude ar sarmon, hag e  
comzas dezhan eus he silvidigez. Dige-  
meret mad e oe; mont a reas er sal, hag  
eno, ar Speret-Santel a roas dezhan scler-  
rijen evit scolia he dad kez. Kemeret a  
reas eun tamic pri en eur skudel, hag o  
veza skuillet dour var ar pri-se, hen a  
lavaras d'he dad :

— Sellit brema ouz ho pisach uz d'an  
dour-se.

— Ne velan netra, eme an tad, re lous  
eo an dour.

— Evel-se, va zad kez, n'oc'h ket evit  
anaout stad ho coustians, rac ar garantez  
re vras oc'h euz evit traou ar bed-man,  
hag-a vir ouz sclerijen Doue da bara var  
ho speret.

An Aotrou Kerodern a recevas neuze grassou bras digant Doue, hag a lavaras d'he vap, ar pezh a lavaras guechall an abostol sant Paol : « Petra e rencan da ober, evit anaout holontez Doue. » — Dom Mikel a c'houlennas amzer da bedi, evit rei d'he dad eur reolen a vuez. An Aotrou Kerodern a gemeras ar reolen-se egiz pa vize deut digant Doue he-unan. Oc'h heulia anezhi, e pignas e berr amzer var hent ar sent.

An Itron Kerodern oa essoc'h da c'hounit da servich Doue. A viscoaz oa bet devot, hag e doa roet skoueriou mad d'an oll. Coulscoude pa deuas da selaou kenteliou he mab, ha da heulia he aliou, an Itron-se a velas pegen van eo traou an douar; pegen eurus oa he map da zispriz ar bed, ha da c'houzanv kement a drubuillou evit gloar Doue.

Pehez joa evit Dom Mikel, pa velas he

dad hag he vam, en em roet oll da servicha an Aotrou Doue! An Aotrou Kerodern a varvas pemp bloaz goude beza troet a-grenn gant Doue (1612). An Itron a vebas tri bloaz c'hoaz goude he fried; var he zremenvan, e doa an eur vad da gaout en he c'hichen he map santel, Dom Mikel. Mervel a reas evel eur santez, er bloaz 1615.

Don Mikel a scrivas eul lizer d'he go-vessour, Dom Per Bocer, divar benn maro he vam garet. « Araoc maro va mam vad, emezhan, e santer, e kichen he guele, eur c'houez dous ha c'houec meurbed. Goude he maro, he c'horf en doa miret ar memez c'houez vad : merk scler ez eo bet he maro dous ha grassius dirac an Aotrou Doue. »

Dom Mikel a bedas evit he gerent goude ho maro, ha plijout a reas d'an Aotrou Doue rei dezhan da anaout, hep

mar ebed, e oa he dad hag he vam er gloar eternal. Hen he-unan en deuz discleriet ar c'hras-se d'he govessour, d'an Itron Coatelan, he nizez, ha d'an demezel Ar Gall, eus Conk-Lochrist.

## PEVARE PENNAD

**Mikel Nobletz e couent menec'h Sant-Dominic, e Montroulez**

Goude beza roet d'he dad ar reolen a vuez, ha laket he vam var hent ar santelez, Dom Mikel a ieas da Vontroulez da velet he vignon an Tad Kintin, he gompagnon guechal e Ajen hag e Bourdel.

An Tad Kintin oa relijius eus a urz Sant-Dominic, e couent Montroulez. An Tad santel-se, a gemere calz a boan evit lacat miret reolen an urz er gouent-se; rac an darn-vuia eus ar venec'h na heuil-lent ket mad lezennou sant Dominic. An Tad Kintin a bedas Dom Mikel da zont

d'he sicour o tiscouez dezhan pegement a vad e oa da ober er gouent hag er vro. — Dom Mikel a gredas d'he vignon, hag e c'houlennas beza digemeret er gouent. Kerkent, e roas mercou caer eus he garantez evit oll lezennou an urz santel, hag ive, eus ar garantez evit ar groas. Ouspen ar binijen gourc'hemenet gant ar reolen, Mikel a c'houlenne ober calz a binijennou-all. — N'en doa gret nemet commans he noviciat, pa gouezas varnhan eur brezel bras, setu aman penaoz :

Eun demezel iaouank eus Montroulez a varvas, hag e oe sebeliet ebarz iliz ar gouent. An Tad Abad ar gouent oa bet en he iaouankis e ti mam an demezel-se, o scolia ar vugale.

Mam an demezel a lacas ober skeuden he merc'h var eun daolen gaer, hag e c'houlennas ma vize laket en iliz, stag eus ar piler oa e kichen he bez. Hogen, skeuden

ar plac'h-se oa gret ha guisket, evit plijout d'an dud, ha ne oa ket deread he guelet en iliz. Coulsoude an dud paour, o credi e oa skeuden ar Verc'hez, pe eur santez bennac, a deue da bedi dirazhi.

Dom Mikel oa mantret he galon o velet an disurz-se. En em glemm a reas d'an Tad Abad, ha da vam ar plac'h decedet. Ne oe gret van ebed eus he glemmou, nag eus pedennou calz a re-all. Eun devez, Dom Mikel, douget gant eur gownarsantel, a ieas he-unan d'an daolen-se, hag ho lacas en eur stad, ma na helje mui ober drouc da zen ebed. Allaz ! santout a reas souden buanegez ar vam, ha castiz he superioret. Ne oa ket bet guelet oc'h ober he daol ; mes pa c'houlennas an Tad Abad diganthan, mar oa hen en doa gret an taol-se, e respontas hervez ar virionez.

Castizet oe dirac an oll venec'h ; ha goude-se, oe casset kuit eus ar gouent,

en despet d'he vignon santel, an Tad Kintin.

---

## PEMPET PENNAD

---

**Dom Mikel a ra Missionou en Escopti Landreger**

---

O veza deut kuit eus couent Montroulez, Dom Mikel a ieas eun nebeudic amzer da Blougerne. Mes dont a reas adarre da Vontroulez, da rei missionou er vro-se. Pa gommansas da ober catekiz, calz a dud eus a bep oad hag a bep stad a deue d'he selaou.

An Aotrou Adrian d'Ambois oa neuze Escop Landreger, ha Montroulez oa eus an Escopti-se. Dom Mikel a c'houlennas eta digant an Aotrou 'n Escop, aotre da

brezec en eur chapel bennac eus kær Vontroulez, hag en tiez zoken, d'an eneuou mad a felle dezho en em rei oll da servicha Doue hag ho nessa. Caout a reas meur a hini, hag e touez ar re-all, an demezel Marc'harit Nobletz he c'hoar, a gerze er penn kenta. Laket e vezo he buez da fin al levric-man. Coulscoude an Aotrou 'n Escop Landreger a deuas da rei ar gonfirmation da Vontroulez, hag e oe gret dezhan clemmou enep Dom Mikel.

Araoc credi d'ar c'homzou-se, an Escop fur a reas eun enclask evit gouzout ar virionez. Elec'h caout eun dra bennac da rebech da Zom Mikel, ne oa nemet meuleudi da rei d'he santelez ha d'he labouriou mad.

An Aotrou 'n Escop a c'houlennas scoazel digant ar missioner, hag er pedas d'en em glevet gant an Tad Per Kintin evit ober

missionou en he Escopti oll. Gant ar brassa joa a resevas Dom Mikel ar beden-se.

Ne oa ket diez d'an daou vissioner en em glevet : ho daou a felle dezho senti; mes humilite Dom Mikel a drec'has hini an Tad Kintin; heman a rencas ren ar missionou-se, hag ober ar sarmoniou. Dom Mikel vize carget d'ober catekiz ha conferansou. Kement a gare an exercissou-se, ma ankounac'he avechou kemeret eun tam boued : he voued e oa rei d'an eneou bara ar vuez christen. Dom Mikel hag an Tad Kintin o deus roet meur a vission assamblez en Escopti Landreger. Nag a vad o deuz gret; nag a boaniou hag a drubuillou o deuz bet!

Mes ne gavomp netra skrivet e buez an den enorus Dom Mikel divar benn peb unan eus ar missionou-se.

## C'HUEC'HVET PENNAD

### Mission Enez Eussa

An Aotrou Nobletz en doa eur garantez dener evit Escopti Leon, he vro. Epad ma roe missionou e Landreger, e ieas eun nebeudic amzer da Blougerne, hag e clasas e pelec'h oa mui a ezom a zesca-dures christen. Credi a reas vize mad dezhan mont d'an enezennou Eussa, Molenez ha Vaz.

Diez bras oa mont beteg Eussa en amzeriou-se. Setu perac ne c'houie den ebed, abaoe pegeit ne oa bet Escop ebed en enezen-se.

Pa zigouezas Dom Mikel en Enezen

Eussa, unan-bennaceus an dud pinvidicad  
bedas anezhan da zont da loja d'he di, hag  
a roas dezhan eur gambrie vrag, gant eur  
guele blod. Re vad e cave ar missioner an  
traou-se; mont a ree da gousket en eur  
c'hoz-ti, var ar c'haled, eur mæn hepken  
dindan he benn.

Ar vrud eus santelez Dom Mikel a ieas  
buan eus an eil-ti d'egile; hag an oll dud  
a ziredas gant muioc'h a brez da gleve  
he gatekismou hag he sarmoniou. Ar  
missioner a reas d'an oll covez ha sacra  
manti, hag Aotrou Person ar barrez e  
doa esperans ha c'hoant bras da vev  
diviziken frouez ar Mission-se.

## SEIZVET PENNAD

### Mission Molenez

Dom Mikel a ieas goude-se da Volenez.

An dud e oa er gær a selaouas mad  
comzou Doue, hag a heulias aliou ar mis-  
sioner; mes ar besketerien ne oant ket en  
enezen.

Petra da ober? Mont var ho lerc'h var  
vor, hag ho heulia el lec'h ma oant o  
pesketa. Calz a dud eus al lec'hieu-all en  
em gave assamblez gantho. Guell aze.

Ar missioner a bigne var an hini huella  
eus ar bagou, hag e prezege gant kement  
a zouder hag a nerz; diskouez a ree ker  
scler poaniou souezus Map Doue, ha gre-

vusdet ar pec'het, ma lake an dud kez-se da skuilla daelou puill. Darn anezho a gemere kerdenn teo en ho daouarn, hag en em skoe dizamant, evit ober pinijenn eus ho fec'hejou. Dom Mikel en deuz lavaret an traou-se d'an Tad Maner, a so bet galvet da ren ar Missionou var he lerc'h.

---

## EIZVET PENNAD

---

### Mission Enez-Vaz

---

Dom Mikel en doa lennet buez sant Paol Aurelian; lavaret e rer er vuez-se, e feuas sant Paol eus Bro-Saoz da Eussa, elec'h ma chomas eur maread amzer da ziskuez lezen Doue d'an dud e oa eno; goude-se e ieas da Enez-Vaz.

Dom Mikel a heulias roujou Escop kenta ha patron Escopti Leon. Goude beza scoliet mad var ho relijion Eussais ha Molenis, e kemeras eur vag evit mont da Enez-Vaz. Labourat a reas eno, evel ma oa boazet. Ober a ree catekiz, conferansou ha sermo-niou, d'ar vugale ha d'an dud a beb oad.

Pa bigne ar missioner ergador, he gomzou a vize leun a dan carantez Doue.

Kemeret a ree he grucifi en he zorn, hag e comze gant Jesus staget ouz ar groaz. Skuilla a ree daelou he-unan, hag e laka an oll dud-all da vouela var ho fec'hejou ha var boaniou hor Salver.

Dom Mikel a dennas an oll bec'herien e oa en Enezen Vaz, euz ho disurzou, ha calz anezo, a c'houdevez, a renas eur vuez santel kenan.

Araoc mont kuit, Dom Mikel a zastumas an oll dud eus an enezen da rei dezho he aliou diveza. Biscoaz ne oa bet skuillet eno mui a zaelou.

« Va breudeur ha va c'hoarezet kez, eme ar missioner, o pet sonch eus ar pezh am euz desket deoc'h. Na brizit netra var an douar nemet oc'h ene. Claskit atao da genta ho silvidigez; rac-se red eo mervel kent eget coll gras Doue dre ar pec'het grevus.

Bete fin ho puez, grit pinijen, ha bevit e doujans an Aotrou Doue. »

O veza comzet evel-se, Dom Mikel a reas sevel var vek eur groaz ruz penn eun den maro.

« Sellit, emezhan, sellit ha lavarit piou ac'hanoc'h e c'hell credi ne vezo ket eun deiz bennac he benn henvel ouz ar penn maro-man ? Lezel a ran ganeoc'h ar penn maro-se, evit prezec deoc'h; me ho ped, selaouit mad he genteliou. Red eo mervel, a lavaro deoc'h; disprizit eta ar bed gant he c'hiziou fall, hag he madou væn; red eo mervel; grit eta pep tra evit gloar Doue : labourat, dibri, eva, cousket. Pini-jen, pinijen, va breudeur !

» Red mad eo chom dindan lezen hon Roue bras. Hogen tri baniel a so etouez an dud gouarnet gant Roue an Env : eur baniel ruz, eur baniel guenn, hag eur baniel du.

Peb-unan a ia da heul unan eus an t  
baniel-se.

» Ar baniel ruz eo Croaz Jesus, ruzie  
gant he voad. Ar bec'herien, dre ar gu  
binijen, a ia da heul ar baniel-se.

» Ar baniel guenn eo baniel an dud santel  
en em ro d'ar beden a galon, ha da bleustr  
ar sacramanchou aliez, evit mont dre hent  
ar garantez huela.

» Ar baniel du, eo hini ar bec'herien,  
gerz var hent an devalijen eus ar pec'h  
varzu ar flammou eternal.

» Heuillomp oll ar baniel ruz, pe an hin  
guenn, va breudeur, ha deomp oll var hent  
ar binijen pe hent ar santelez vrassa. »

Ar peza so laket aman a so bet lavaret  
gant Dom Mikel he-unan, ha gant Cathal  
Helouri, Thomas Douet, Iann ar Bescond,  
hag Alienor Euzen, eus Enez-Vaz. »

## NAOVET PENNAD

**Dom Mikel e Konk-Lochrist**

Goude mission Enez-Vaz, Dom Mikel a  
heas da chom da Konk-Lochrist. Setu aman  
perac e choazas al lec'h-se :

1<sup>o</sup> Eus Konk e oa æz dezhan mont var  
vor da rei Missionou en escoptiou Leon,  
Kerne ha Landreger;

2<sup>o</sup> Da Konk-Lochrist ha da gær Sant-  
Vaze e teue neuze listri marc'hadourien  
eus pep carter eus ar Frans, ar Spagn,  
eus Bro-Saoz. Dom Mikel a felle dezhan  
comz d'ar varc'hadourien divarbenn ma-  
dou guelloc'h eget madou an douar ;

3<sup>o</sup> Truez en doa eus ar vro gez-se, leun

a dechou fall hag a zizurz, en amzer-  
Kemeret a reas evithan comzou ar prophe-  
Isaïe (C. LVIII) : *Exalta vocem*, sav da voue  
Mes da genta, e clasas anaout mad an  
siou fall eus ar vro. Ar re e cavas mu-  
skignet etouez ar varc'hadourien, oa a  
avarisdet hag an ourgouil. Egiz ma oa a  
dezho dastum madou dre ar c'honven-  
e save fougé en ho fenn. Lacat a reent  
oll fizians e traou an douar; servich Dom  
avad hag ar Baradoz e oa dilezet.

Dom Mikel a zisclerias brezel d'ar visso-  
se, comz a ree c'hoaz hep aoun enep visso-  
an dud gentil a voasko re var ho merou-  
rien ha var an devezourien. Ne oa ke-  
evit caout nerz avoalc'h anezhan he-un-  
evit dont abenn eus an oll dechou fall-se.  
Dom Mikel a glascas scoazel digant ar  
santela etouez beleien ar c'harter. Un-  
a rec an Aotrounez-se, hag e prezeg  
dezho gant ar garantez birvidic var deve-

ho bras ho c'harg. Lavaret a ree dezho :  
« Labourit da ober sent gant an dud a  
volontez vad; eur sant, pe eur santez,  
emezhan, a ra mui a vad eget cant christen  
elouar. »

Coulscoude, calz a blegou fall a vir eus  
ar gristenien da veza devot ha santel.  
« Mont a reont, eme Dom Mikel, da gement  
Bec'h santel ha brudet a so er vro; ne  
vancont ket da visita an Ilizou pa ve  
indulgansou da c'hounit; neket drouc  
kement-se, mad eo zoken; mes neket  
avoalc'h evit mont da sant.

« Darn eus an dud a ra an traou-se, n'ou-  
zent ket ar guirionezou eus ho relijion;  
ne dosteont ket aliez ouz ar Sacramanchou,  
ne vevont ket hervez ar vertuziou christen.  
Bec'h o deuz o vont da govez eur vech ar  
bloaz, ha da sacramanti da Bask.

« Darn-all ne vancont ket da bedi, da ober  
pedi evit ho zud varo; eun devotion gaer

ha talvoudus eo. Mes ar memez tud a lezel  
ho ene paour er stad a bec'het marvel, hag  
an diaoul a so mestr en ho c'halon; hag  
aliez e lezont bep seurt disurzou en ho  
ziegezh.

» Darn-all a zispign calz arc'hant evit  
lacet offerennou ha ne baeont ket ho dle  
nag ho mevelien nag ho devezourien.

» Sicourit ho tud varo, eme Dom Mikel,  
lakit offerennou evitho, mes ne vankit ket  
da baea ar pezh a dleit; ne chomit ket er  
stad a bec'het, grit ma vezo servichet mad  
an Aotrou Doue en ho ti, ha gant an oll  
dud a so dindan ho lezen.

» Lod-all a iune dre zevotion eur vech,  
diou vech bep sizun, ha ne ziouallent tam-  
ebed var ho zeod fall; drouc-prezec a reent  
ha maga a reent ar gassoni en ho c'halon  
enep ho nessa.

» Guell vize deoc'h, eme Dom Mikel,  
miret ouz an drouc-prezec, pardonni a

oul frank, ober vad d'oc'h enebourien,  
aget iun bemdez zoken divar bara ha  
paour, mar na viret ket ouspen-se lezen ar  
garantez.»

An den santel a gomprens pegement a  
drouc a ra e touez an dud ar fals devotion;  
ac lacat a ra tud ar bed da zicrial ar guir  
santelezh ha d'ober goap eus an oll dud a  
glask heulia mad skoueriou hag aliou hor  
Salver Jesus-Christ.

## DECVET PENNAD

**Brezel enep Dom Mikel, e Conk-Leon**

Ne oa ket æz trec'hi an oll blegou ha siou fall a rene e touez an dud eus a c'hæriou hag ar parrezioù varbord ar mor. Pell eo bet Dom Mikel araoc tenna calz frouez eus he labourioù bras.

Na blije ket d'an dud clevet prezec enep ho avarisdet, ho ourgouil, ho fouge, var zigarez ma oant pinvidic, ho leziregez da servicha Doue ha da c'hounit ar Baradoz.

Kelliez guech ma pigne ar missioner en gador, bep tro e scube eun toullad tud e mæs eus an iliz. Ober reent goap eus Dom Mikel ; ne oa, hervez an dud-se, nemet eun

foll. O follentez divin, henvel ouz hini Jesus-Christ ! Hor Salver ive en he bassion oa bet galvet eun den foll gant Herodez, roue ar Galilee, ha gant tud he balez. Eurur ar re a so goapeet evit beza prezeget lezen Jesus-Christ !

Dom Mikel ne gollas ket fizians. Labourat a ree mui-ouzmui da c'hounit an dud touellet gant spret ar bed.

Darn-all eus an dud a damalle he zoare beva. Biscoaz, emezho, ne oe guelet eur belec evel dezhan, o vont eus an eil kêr d'eben, hep chom e nob lec'h !

Cass e rejont ho c'hlemmou beteg ar Vikel vras. Mes unan eus mignonet Dom Mikel, deuet mad gant ar Vikel vras, a scrivas enep an drouc-prezegeerien :

« Aotrou kez, e lavare en he lizer, clask a rer noazout d'an den santel a denn calz a bec'herien ouz an dizurz, hag a vir outho da vont da goll da viken. Casset a so deoc'h

clommou enep eur belec desket caer var an theoloji scolastic, var ar Scritur sacr, ha scridou an Tadou santel; var an oll skianchou a sell ouz ar relijion coulz ha var ar skianchou naturel.

Aotrou 'n Escop Landreger, o veza anavezet pegen desket ha peger santel eo, en deuz roet dezhan guir da brezec, ha da govez e peb lec'h en he oll Escopti.

An Aotrou du Louet a anavez anezhan a bell-so, hag a so leun a respet evit he vertuziou hag he zescadurez. Calz a veleien vad o deuz galvet anezhan da labourat en ho farreziou, hag oll ez int leun a garantez hag a respet evit Dom Mikel. Mar ia eus an eil kær hag eus an eil parrez d'oben, dre urz an eskibien eo, da scolia muioc'h a dud paour. Ne c'houlennet netra evit he boan, pell ac'hano; he oll leve e ro d'an dud ezomec ha d'ar re glanv. N'o deuz ket a vez an teodou fall da lavaret ne deo

Dom Mikel nemet eur galoper hag eur belec penn scanv!

Dom Mikel en em ziffennas, dre ar verz-man :

## GUERZ

### VAR BUEZ DOM MIKEL

---

Me am euz choazet eur vestrez,  
Eun Itron hag eur Rouanez :  
Ma c'halon a so ravisset,  
O sonjal piz en he genet.

C'hui eo, o Itron Varia,  
Deoc'h en em erbedan muia ;  
Pedit ho cuir Vab a druez,  
D'ober em c'henver trugarez.

Allas ! me 'm euz he offanset,  
Hag he Vajestez 'm euz douget  
Aliez da facha ouzin,  
Pedit Jesus d'am fardoni.

Bep mintin souden pa savan,  
Dirac ma Doue e ruzian,  
Ma Doue, ma Salver binniget,  
Pardonnit d'in ma iaouancetet.

Kelliez ma c'houlaoz an de,  
M'ho trugareca va Doue,  
Da veza ganeoc'h plijet  
Lemel ma c'halon eus ar bed.

Aotrou Doue distroet ouzin,  
Ha roit din ar pezh a fell din,  
Roit din ar c'hras da zispriz ar bed,  
Hag ar c'hras d'ho caret parfet.

Evit clevet ma drouc prezek  
Ne d'oun ket en em c'hlaç'haret,  
O sonjal e Salver ar bed,  
Ouz hor prena kement poaniet.

Evit ma beza paour guisket,  
Ha gant calz a dud disprizet,  
Me 'm euz esperans hag a gred,  
E plijin d'ar Salver ar bed.

Emaoun leun a baourentez,  
Ha carget a binvidigez,  
A binvidigezou speret,  
Ouz nep-ho c'hlaçk n'ho nec'het ket.

Ma iec'het am euz offanset,  
O trouc entend dispriz ar bed :  
An dra-ze n'am euz ket keuziet,  
Rac ma Salver am euz cavet.

Etouez an oll dud ar bed man,  
Ne c'houlennan nemet unan,  
Ne c'houlennan nemet Jesus,  
Gant sicour he Vam druezus.

Calz a dud a so estonet  
E defaot n'hellont lavaret,  
E defaot n'hellont compreni,  
Pebez buez eo va hini.

Ar vuez am euz-me choazet,  
A so catekiza ar bed,  
Ar vuez eus an ebestel,  
Mignonet ar Roue eternal.

Lucifer a so counaret,  
Ouz va guelet bale ar bed,  
Evit miret an eneou,  
Da vont d'an tan gant an diacoulou.

Ha te, pec'her criz aheurtet,  
Sao eus ar vouillen ar pec'het ;  
Sao timad mæz eus ar vouillen ;  
Ha chench da vuez ker monden.

Pec'her dibreder, sonch breman  
Peger berr eo gloar ar bed-man ;  
Gloar an douar ne deo netra,  
Nemet tremen ebioù ne ra.

An Aotrou 'n Escop o veza deut da Gonk da rei ar Gonfirmation, an teodou fall en em ruzas adarre beteg ennhan. Lavaret a rejont bep seurt gevier enep ar missioner, hep gallout lacat an Escop mad da gredi d'an drouc prezec-se. Coulscoude, credi a reas en doa roet, marteze, Dom Mikel lec'h d'ar c'hlemmou-se dre he zoare da brezec ha da veva. Rei a reas dezhan aliou mad var gement-se, ha Dom Mikel a selaouas comzou an Aotrou 'n Escop gant respet hag humilite, petra bennac ne oa netra guir eus ar pezh e oa tamallet dezhan.

An dro-man c'hoaz eur belec santel a zifennas Dom Mikel enep an teodou fall, hag e oe lezet frankis ganthan da labourat evel kent da zistrei ar bec'herien ouz Doue.

Skuiza a reas malis an dud fall, kentoc'h eget carantez an den santel; hag an Aotrou Doue, azalec ar mare-se, a skuillas var labouriou he vissioner, ar c'haera grassou.

Dont a reas an oll bec'herien eus ar c'harter nebeud a nebeud da anaout ho dallentez, ho stad fall, ha da gaout fizians e comzou Dom Mikel.

Darn anezho a ias d'he di da c'houlen euzul divarbenn ho buez. Gounezet eno gant carantez ha kenteliou ar missioner, an dud-se a gasse dezhan ho c'herent hag ho mignonet.

Dom Mikel a roas mill bennoz da Zoue, hag a scrivas d'he c'hoar Marc'harit da zont eus Montroulez da Gonk-Lochrist, da gatekiza ar merc'hed egiz e doa gret evit plac'hed Montroulez.

Senti a reas Marc'harit ractal, hag e ias da loja en eun tiic paour entre kær Sant-Vaze hag hini Conk. Essoc'h e vize cass dezhi an oll verc'hed vian da zeski ho fedennou hag ho relijion. Pebez eston evit an oll dud paour eus ar vro gullet Marc'harit Noblet, eun demezel a liguez huel,

o veva er brassa paourentez, o rei d'an dud ezomec mercou ker bras a garantez dener! Touchet oc an oll galonou dre skoueriou santel an demezel garantezus. Ar c'henteliou gret d'ar plac'higou, a ser-vije ive d'ho mammou ha d'ar merc'hed-all ne oant ket calz guelloc'h desket eget ar vugale.

Eun intanvez vertuzus eus Conk, Franceza Troadec, gounezet da Zoue gant Dom Mikel, a roe scoazel da Varc'harit Nobletz. Beilla an dud clanv, sebelia ar re varo, kelen an oll verc'hed, paour ha pinvidic, setu aze buez an intanvez santel-se.

Ne oa maouez ebed ken desket hag hi ebars ar vro, nag a dost, nag a bell : parlant mad a ree e gallec, e brezonec, er spagnol, e iez Bro-Saoz ; gouzout a ree ar pezh a sell skianchou ar vartolodet, hag ar c'honvers e peb bro eus ar bed, coulz ha nicun eus an dud a vor ar muia desket. Eur burzud

a speret hag a zescadurez e oa an intanvez-se. Hogen ne brize netra kement hag ar skiant desket gant Dom Mikel, skiant ar santelez : gouzout meuli, caret, servicha an Aotrou Doue, ha lacat ar re-all da ober kement-all, setu ar pezh a gare Franceza Troadec.

Epad ma labour e intanvez-ma gant an demezel Marc'harit Nobletz da zistrei ervad ouz Doue, merc'hed Conk ha re Sant-Vaze, Dom Mikel a gendalc'he da brezec gant calz a frouez.

Araoc ma teuas Dom Mikel er vro-se, ne dostae an dud eus ar Sacramanchou nemet d'an amzer Bask ; ar missioner a lacas an darn-vuia da vont da govez bep mis. Araoc ne glever gant an oll nemet jarneou, sacreou, mallozou ; ar missioner a lammas a grenn ar voaz gouez ha difeiz-se. Setu aman penaoz : Ar vugale, desket, siouas ! gant an dud oajet, a vlaspheme

egiz diaoulou bian. Ar missioner a c'houlenennas conjez digant ho c'herent da gastiz dirac an oll ar vugale a vize cavet o vlashphemi. Condaonet e vize ar bugel da zougen var he chouk guial d'he fouetta, dirac eur groaz savet var an hent. Calz a dud en em zastume, hag en em vode endro d'ar groaz. Ar missioner a gomze divad droad ar groaz enep ar leou Doue, a blasphemou, an drouc-pedennou a ra dismegans da Hano santel an Aotrou Doue Goude-se, e comze ouz ar bugel paour hag a ree fouetta anezhan evit he binijen hag evit skoueria ar re-all.

An tadou hag ar mamou a zioualle mad da vlashphemi, na da lezel blasphemidirac ho bugale; ar vugale, spontet, a daole evenmad, hag er giz-se, oe lamet buan eus ar vro eur pec'het hag a denn venjans an Aotrou Doue var an dud. Dom Mikel a c'hounezas ive da Zoue tud eus a lignez

duel; etouez ar re-all e cavomp hano diou zemezel eus maner Kerourien, a ieas da eanezed, hag an demezel Kerbescont, a zhommas er bed hep dimezi, hag en em groas d'an oll oberiou a drugarez.

Dom Mikel e oa ijin oll evit gounit an eneou da Zoue; gant an dud a vor e comze eus an traou a sell ouz ho stad, hag e goueze goude var ar besketerez santel, var ar mor e treuzomp evit mont da enezen an Euruset, etc., etc.; gounit a ree an dud paour dre he aluzennou, ar bec'henen caledet dre he binijen hag he bedenno.

Araoc kuitat ar vro-se, en doa leket an oll dud var hent ar Baradoz. Ar frouez eus he labouriou a badas pell.

Gloar da Zoue, ha mill bennoz d'he visioner santel!

## UNNECVET PENNAD

**Mission Landerne (1614)**

Piou bennac, eme an Abostol sant Paul, a glask beva ervad hervez lezen Jesus Christ, ne vanco ket trubuillou dezhan. Ne ket estonus eta e vez bet goal gasse. Dom Mikel e peb lec'h, pa labourere eneb Satan, eneb ar bed milliget hag eneb an oll dechou fall.

An devez kenta m'en em gave e Landerne, Dom Mikel oe goapeet gant eun den mezo; heman a vennas zoken rei eun taol cleze d'ar missioner. Petra n'hell ket ober eun den er stad euzus-ze; an diaoul mestr var an den mezo, a ra gant he ven-

brou ar pezh a gar : blasphemi gant he deod, lavaret comzou lous, drouc-pedi; petra ne ra ket gant he zaouarn, hag he zaoulagad, ha gant he galon?

An Aotrou Doue a viras Dom Mikel ouz an taol-se, mes lezel a reas an teodou fall da vont en dro enep sarmoniou ar missioner, ne blijent tam ebed.

Landerne oa neuze unan eus ar c'hæriou brassa ha pinvidica eus bro Leon. Convers mad a oa ennhi, ha dre-ze calz bourc'hizien pinvidic, ha leun a fouge var zigarez o doa madou eleiz.

Dom Mikel a chomas e Landerne daou vis bennac; nebeud a dud a zistroas ervad ouz Doue hag he servich. Evelato, ar reman a zalc'has stard d'he aliou hag a geras var hent ar sent bete fin ho buez. E Landerne e tisplegas dirac ar bopl an taolennou mysterius gret ganthan en he her-

mitach, e Tremenac'h. Anaout mad a re  
ar virionez eus ar pezh a lavar eur barz cozh.

« Ar pezh a zesk an dud gant ho diou-  
couarn hepken, ne douch ket ker pront  
ho c'halonou evel a ra ar pezh a velont gant  
ho daoulagad ho unan :

*Segnius irritant animos demissa per aurem,  
Quam quæ sunt oculis si objecta fidelibus, et quæ,  
Ipse sibi tradit spectator.* (HORATIUS.)

Epad ma explike an taolennou-se, eur  
vaouez a lavaras :

— Va zad kez, perac en em skuizit  
kement-all evit rei da entend an taolen-  
nou-se ; an traou-se a vezo taolet en tan  
goude ho maro.

— Ne vezint ket, eme ar missioner. Dont  
a rai dizale da Gemper, Tadou eus Com-  
pagnunez Jesus, hag an taolennou-man a  
dremeno eus va daouarn en ho re.

Kement-se a zo bet sevenet er bloaz 1640,  
pa roas Dom Mikel he daolennou d'an Tad

Maner dirac ar bopl dastumet en iliz Lo-  
christ, e Conk. Er bloaz 1649, an Tad Maner  
a roas eur mission bras e Sant-Houardon,  
e Landerne, hag evel ma tisplege taolen-  
nou Dom Mikel, ar vreg e doa comzet  
egiz hon euz lavaret hucloc'h da Zom  
Mikel, divar benn he daolennou, a ziscle-  
mas d'an oll petra en doa lavaret dezhi ar  
missioner santel, dre sclerijen an Aotrou  
Doue.

An dud paour, an devezourien hag al  
labourerien a dennas frouez mad eus  
labouriou Dom Mikel ; ar vourc'hizien  
avad, dallet gant traou an douar ; an itro-  
nezed hag an dimezelled, touellet gant  
an ebatou hag an dillad caer, a chomas  
bouzar da vouez an Aotrou Doue. Ar mis-  
sioner a gredas e oa guell lezel evit eun  
nebeud amzer kær Landerne, ha mont  
el lec'h-all da glask tud guelloc'h douget  
a selaou mouez an Aotrou Doue,

Buez an Aotrou Mikel Nobletz

---

TREDE LEVR

---

Missionou Dom Mikel en  
Escopti Kerne

## KENTA PENNAD

---

### Mission Kemper (1614)

---

An Aotrou Charlez Liscoet, Escop Kerne, oe maro d'ar bevarzec a viz meurs 1614. An Aotrou Guillou ar Belec (Guillaume Leprêtre), map d'an Aotrou Loïs Lezonmet, gouarnour Kemper ha Conk-Kerne, oe laket da Escop Kerne, er memez bloaz 1614. Dom Mikel Nobletz a deuas d'he saludi, ha da c'houlen diganthan aotre da rei Missionou en he Escopti. An Aotrou en Escop oe laouen o clevet ar gomz-se. Anaout a ree ezomou he Escopti, goude ar brezel oa bet dindan ren an Aotrou Liscoet.

Rac-se e roas galloud d'an Aotrou Noblet da brezec ha da govez en he oll Escopti.

Dom Mikel a gommansas dre ar gær veus an Escopti.

Pa vize e Kemper, e prezege bep sul parrez Sant-Vaze. Epad ar c'horaiz 1614, reas eur sarmon bemdez da leanezed Loc Maria, var boaniou ar Verc'hez Vari, epad passion he Map Jesus.

Coulscoude brassa labour ar missioner oa ober catekiz d'ar vugale ha d'ar bopl Douget e oa d'ober kement-se gant gras ar Speret-Santel, evit heulia skoueriou Jesus Christ. An dud na brizont ket calz ar garkese, mes dirac an Aotrou Doue eo huel ha talvoudus.

Evit caout sicour adarre, e c'halvas eur Conk-Leon he c'hoar Marc'harit hag an intanvez Franceza Troadec. Ar merc'hed santel-se a labouras e Kemper egiz o devoe labouret e Lochrist evit scolia ar plac'hed

bian, ha kelen ar merc'hed a beb oad hag a bep stad.

Dom Mikel a zastume ar vugale e chapel Sant-Primel, hag e chapel ar Vadalen, hag a gemere calz a boan da zeski dezho ho c'hatekiz. Dont a reas calon ar vugale da domma ouz calon ar missioner. Mont a reent a vandennadou d'he heul, eurus d'he velet ha da zeski ho genteliou. Ar bopl ive a selaoue gant frouez sarmoniou an den Doue.

N'heller ket rei ar memez meuleudi d'an dud eus ar renk huel ha d'ar vourc'hizien pinvidic. « Ne gave ket dezho e prezege Dom Mikel mad avoalc'h evitho ; tremenet e oa an oad dezho da vont d'ar c'hatekiz. » Siouas, calz anezho ne oant ket goall zesket var ar relijion, hag oll o doa ezom bras da glevet comzou Doue evit guellât ho buez.

Dom Mikel en deuz skrivet etouez ar

servicherien vella d'an Aotrou Doue, daou  
velec eus Kemper, a chomas unanet gant-  
han dre ar heden ha dre ar garantez beteg-  
ho maro. Unan anezho, oa chaloni eus  
iliz veur Sant-Caourintin, hag egile, Per  
Bocer, oa cure e parrez Sant-Vaze.

Dom Mikel a gemeras an Aotrou Bocer  
evit he govessour.

Etouez an itronezet oe cavet ive eun  
nebeudic hag en em roas d'ar vuez abos-  
tolic, da heul Marc'harit Nobletz ha Fran-  
ceza Troadec.

## EILVET PENNAD

### Mission ar Faou (1618)

Dom Mikel a chomas daou vloaz e Kem-  
per ; mes epad an amzer-se, e roas mis-  
sionou e meur a barrez eus Kerne. Er bloaz  
1615, a reas eur Mission er Faou, kæric  
vian var bord an aod, entre Castellin ha  
Brest. Bemdez e prezege hag e rec catekiz.  
Er Faou, evel er c'hæriou-all, ar vugale  
hag an dud simpl a denne frouez eus ar  
mission ; an dud vras hag ar re binvidic  
avad a enebe ouz gras an Aotrou Doue.

Epad ar Mission-se, eteuas kelou da Zom  
Mikel divarbenn he vam, dare da vervel,  
e maner Kerodern. Ractal ar bugel mad

a ia da velet he vam, evit he sicour, he  
c'honsoli, ha mar oa deut he heur, evit  
cloza he daoulagad dezhi.

O mam evurus da vervel entre divrec'h  
eur map ker santel !

Dom Mikël o veza grêt e kenver he  
vam garet, oll zeveriou eur bugel mad,  
a zistroas d'he Vission d'ar Faou, ha  
nebeud amzer goude e ieas da Gonk  
Kerne.

---

## TREDE PENNAD

### Mission Conk - Kerne

---

Conk-Kerne oa neuze eur gær vrudet  
dre he forz mor, hag he c'hastel diouallet  
a bep-tu gant ar mor bras. Calz soudardet  
e oa ennh. Dom Mikël a zigouezas e Conk  
d'ar sul epad ar gousperou. Da fin ar  
gousperou, e pignas er gador da brezec,  
ha da ziscleria d'an dud comzou ar *Bater*.  
Kerkent, ar soudardet a ia er mæz en eur  
c'hoarzin ; ar vourc'hizien a ia var ho  
lerc'h, en eur ober goap eus ar missioner.

« Petra, emezo, ar belec-se a gred eta eo  
red deski deomp-ni hor *Pater* ? »

Er mare-se, eun Itron eus Leon, an

Itron Kerouarz, a ieas da velet he c'hoar, dimezet d'an Aotrou Kerleano. Clevet a reas he c'hoar coulz hag ar re-all, o comzant dispriz bras eus Dom Mikel hag he sarmoniou.

— Penaoz, eme an Itron Kerouarz, c'hui gred eo ar missioner-se eun den hep descadurez, eun denic netra? N'ouzoc'h ket eta pegement eo prizet en he vro? Eur sant eo, eun den a lignez huel, ha desket dreist an oll dud-all.

Ar c'homzou-se a zifazias calz a dud, hag a reas dezho caout c'hoant da glevet Dom Mikel, ha da denna frouez eus he genteliou santel. Coulscoude an darn vrassa eus an dud pinvidic a chome er gær, hag a leze an dud divar ar mæz, hag an dud dister eus Conk, da vont da glevet comzou Doue, evit brassa mad ho encou.

## PEVARE PENNAD

**Mission Pont-n-Abbad (1618)**

E Pont-n-Abbad, ar missioner a zastumas frouez eleiz evit he labouriou. Gounit a reas eun niver bras a dud etouez ar bopl da servicha Doue a zevri. Ar vugale a zescas ho relijion; an dud oajet a reas bep a govession jeneral, ha meur a hini en em roas d'ar santelez vras.

Setu aman penaoz e c'hounèzas eur famill binvidic d'ar vuez-se :

En eur vont e kær, Dom Mikel a glaske pelec'h e oa paper da verza; goulén a reas kement-se digant eun Itron var ar ru. An Itron, bras ganthi clevet ar goulén-se, ne

brizas ket respont. Coulscoude dont a reas  
keuz dezhi ractal, hag e lavaras d'he fried  
petra e devoa gret. An Aotrou-se, den a  
zoujans Doue, ha leun a respet evit ar  
veleien, oe glac'haret bras. Mont a reas  
varlerc'h ar belec santel, hag e roas dezhan  
eur pezh arc'hant en aluzen, o lavaret :  
« Me so ho servicher, deut d'am c'haout  
en oc'h oll ezomou. » Dom Mikel a gemeras  
an aluzen, evit caout an digarez da vont  
da drugarecât he vadoberour d'he di. Comz  
a reas eno gant kement a zouder, ha kent  
deread, ma c'hounezas da Zoue calonou  
an oll dud eus an ti benniget-se. Eur  
c'hoar d'an Aotrou-se, an demezel Mari  
Meabe, en em roas d'an huella devotion,  
hervez aliou Dom Mikel.

---

## PEMPET PENNAD

—

**Mission Goazien (Goaien, Audiern) (1618)**

---

Eus Pont-n-Abbad, ar missioner a i eas  
da Voazien, elec'h ma oa calz a varc'ha-  
dourien pinvidic a vadou an douar ha  
paour dirac Doue. Ho c'halonou oa troet  
oll gant traou ar bed-man, ha ne glaskent  
ket grassou an Aotrou Doue hag an eurus-  
det eternal.

Ar c'henta guech e pignas Dom Mikel  
er gador brezec, an darn-vuia eus ar voa-  
zet a i eas ractal er mæz, ha goude-se, oa  
diez ober dezho mont da selaou comzou  
Doue. Ar merc'hed a dennas eun dra ben-  
nac a frouez eus kenteliou an den santel.

An Aotrou Doue na lezas ket hep castiz  
an dud difeiz-se. Dre sclerijen an Env,  
Dom Mikel en doa lavaret : « C'hui a zilez  
breman madou an Env, evit mont varlerc'h  
traou an douar. Mad ! guelet e vezo ; e ber  
amzer, Doue a lammo diganeoc'h ar ma-  
dou-se, evit rei da entend kentel Jesus-  
Christ : claskit da genta rouantelez Doue,  
hag he justis, hag an traou-all e vezo roet  
deoc'h var ar marc'had. »

## C'HUEC'HVET PENNAD

Missionou var ar mæz (1613)

Dom Mikel ne chomas ket pell e Goazien ;  
gras an Aotrou Doue a zouge anezhan da  
vont da labourat er parrezioù var ar mæz.

Evit mont buanoc'h eus an eil parrez  
d'eben, Dom Mikel a brenas daou varc'h,  
unan evit hen dougen, hag egile evit dou-  
gen he gahierou, levriou, taolennou, cha-  
peledou, ha traou-all a gasse ganthan da  
rei d'ar vugale ha d'an dud paour.

Hogen, an dro genta m'en em servichas  
eus he gezec, e cavas var an hent a gass  
eus Goazien da Gemper, paisantet daou-  
bleget dindan sammou pesket. Ar missio-

ner en deuz truez eus an dud kez-se, hag a brest dezo he gezec evit mont da Gemper essoc'h ha buanoc'h. Setu aze carantez Dom Mikel evit an dud a boan guella mignonet an Aotrou Doue !

Siouas ! en noz varlerc'h, unan eus ar c'hezec oe taget gant eur bleiz, hag a hini-all a gouezas en eur lagen don, hag a varvas eno. An dud kez oe spontet ! Penaoz cass ar c'helou-se d'ar missioner ? Petra vezo grêt dezho ? Red e vezo paea sur an daou loen-se, ha c'hoaz e vezint castizet marteze ! Setu ar pezh e sonje an daou zen paour. Mont a reont coulscoude da gass ar c'helou da Zom Mikel, hag evit touch he galon, en em strinkont var bennou ho daoulin, araoc discleria ar pezh a so digouezet.

Dom Mikel a vousec'hoarzas, hag a lavaras : « Kement-se n'edo netra ; coulscoude, evit ho pinijen, c'houi reno heuilla mad

exercissou ar Mission, ha lacât urz vad en ho puez ! »

Neket red lavaret peger souezet oe an dud-se, ha peger puill e couezas an dour eus ho daoulagad, o clevet comzou ho zad carantezus !

Ne zigouez netra nemet dre volontez pe aotre an Aotrou Doue ; Dom Mikel a sonjase roe providans Doue eur gentel dezhan, hag eur merk e tlie mont var droad d'he vissionou, etouez al labourerien. An dud vad-se oa evurus o clevet comzou Doue dre genou Dom Mikel. Ne anavezent nemeur a dra eus mysteriou ar relijion hag ar guirionezou eus ar feiz. Nag a gredenou faoz, nag a voaziou fall oe plantet e penn an dud-se.

Setu aman lod anezo : « Guelit ar gragez-se o scuba ho zi, hag o teurel en ær ar boultren e cavont. Perac an dra-se ? Evit

caout avel vad d'ho goazet da zont prim d'ar gær.

Lod-all a selape er parkeier eun trebez, pe eur gontel, pa vize collet ho loenet, evit miret ne raje ar bleizi drouc ebed dezho. Laket e vize mein tro-var-dro da dan sant Ian ha sant Per, evit ma helje enecou ho c'herent decedet, e oa er Purgator, dont da domma varnezho.

E meur a lec'h, e vize lezet an dud iaouank da zansal en ilizou hed an noz-veziou.

Darn-all oa boazet da vont var bennou ho daoulin dirac al loar nevez, ha da lavar ret ho *Fater* en he enor. Darn zoken oa ken dallet gant an diaoul ma reent sacrificsou en he enor.

Dom Mikel en doa truez o velet pegen goasket oa an dud kez-se gant enebour Jesus-Christ. An dud-se a selaouas e peb lec'h comzou ar missioner egiz comzou

Doue. Rac-se c'hellas lemel eus ar vro gant an devalijen eus ar pec'het, an oll greden-nou faoz hag an oll giziou fall.

---

## SEIZVET PENNAD

---

### Mission Enez Sizun (1613)

---

Enez Sizun a so var dro teir leo eus an douar bras. Diez bras oa mont beteg ennhi; hervez lavar ar re goz :

Biscoaz den ne dremen ar raz,  
Hep caout pe spont pe c'hlaz.

E gallec e lavarer :

« Qui passe le raz sans douleur,  
Ne sera pas du moins sans peur. »

N'euz forz, ne oa belec cbed en enezen; Dom Mikel a renk mont da sicour an dud keiz a so eno ken dilezet. Egiz eun æl eus ar Baradoz eo digemeret : biscoaz n'en doa cavet christenien guelloc'h douget da senti, da zeski lezen Doue, da heulia he oll aliou mad. Dom Mikel a brezege, hag a ree cantekez diou vech bemdez. An oll a reas gant an eur govession jeneral, hag a sacramantas goude-se. O pègement e oant dis-henvel eus ar pezh e oant araoc ar Mission? Peger caer e canent an offis, ha canticou santel, elec'h soniou scanv!

Dom Mikel a gavas etouez an dud-se eun den a galon vad, hag en doa eun tamiñ descadurez. Fanch Guilcher oa he hano; ha Fanch ar Su he leshano, dre ma oa e chom en tu creisdez eus an enezen. Dom Mikel na espernas ket he boan evit ober anezhan eun abostol etouez he genvroiz. Ober a reas dezhan lenn levriou devot,

evel Meditationou an Tad Lois du Pont; deski a reas dezhan pedi a galon, evit en em zistaga diouz an traou crouet hag en em sevel varzu Doue; discleria a reas dezhan penaoz labourat evit lacat ar re-all da vont gant an hent mad. Dom Mikel a gendalc'has goude ar Mission da beur-ober descadurez Francez-Su; scriva a reas dezhan aliez. Ar pesketaer-se oe laket da gapiten en enezen, ha pa ne vize belec cbed, ar pezh a errue aliez, ar c'habiten a gommande ive var exercissou ar relijion. Er bloaz 1641, an Tad Maner hag he gompagnon a gavas c'hoaz darn eus frouez ar Mission genta.

Souezet oant o clevet calz a dud o cana caer, hag hervez an notennou.

— Piou en deuz desket ar c'han deoc'h, eme an Tad Maner?

— Francez-Su, hor c'habiten, emezho, a so bet evel hor person meur a

vech, abaoue eo bet Dom Mikel aman :  
hen en deuz desket deomp ar c'hatekiz,  
hag ar c'han.

Francez oa bet er scol en he iaouankiz  
kenta; lenn mad a ree ar gallec hag  
al latin, ha gant levriou gallec, roet  
dezhan gant Dom Mikel, en doa des-  
ket mad ar virioneziou eus ar relijion.  
D'ar suliou ha d'ar goueliou e vize sonet  
ar c'hloc'h ha galvet an dud d'an iliz. Ar  
c'habiten a lake anezho da gana ar pez a so  
aotreet d'an dud fidel. Neuze e tisclerie ar  
goueliou evit ar sizun, an daouzec deziou,  
ar iuniou, etc., etc.

Ouspen-se da Vener ar Groaz a ree evel  
eur brezegen var Bassion ha maro hor  
Salver.

Setu ar pez en doa miret eno doujans  
Doue, hag ar giz da bedi ha da vont d'an  
iliz.

Ar visionerien a sante eur garantez

disparevit ar c'habiten mad. An Tad Maner  
a roas dezhan he ganticou; deski a reas  
dezhan an toniou, hag er c'hargas da zeski  
d'ar re-all. Sonjal a reas an Tad Maner  
e c'helje ar christen mad-se mont da velec,  
evit beza laket da berson en enezen-se.

« Intanv eo, desket mad var ar relijion;  
gouzout a ra ar gallec; lenn ha scriva  
brao; ne ve ket diez dezhan deski avoalc'h  
a latin evit lavaret an offis divin hag an  
offeren, ha studia an theoloji. »

Comz a ra var-se gant ar c'habiten.

— Me am euz bet aliez ar memez sonch,  
va Zad, mes ne greden ket fiziout ennhan  
rac ne viritan ket beza savet en eur gark  
ken huel. Coulscoude, ober a rin brema  
ar pez a blijo ganeoc'h.

Mont a reas da Gonk gant an Tadou da  
velet he dad spirituel Dom Mikel.

Pebez levenez santel evitho ho daou.

— Mad a rit, a lavaras Dom Mikel da

Francez, mad a rit mont d'ar studi evit beza belec, ha mont da berson da Enez-Sizun. Doue a rai he vennoz deoc'h ha d'ho labour.

E buez an Tad Maner e veler penaoz e oe digemeret ar c'habiten gant menec'h Landevenec, ha gant ar chaloniet e Kemper. Doue oa gant he servicher, hag e teuas a benn da veza casset da berson d'an enezenn benniget.

Seiz vloas e vevas, goude ma oe beleget, hag an Aotrou du Louet, Escop Kerne, o veza treuzet ar mor evit mont beteg Enez-Sizun, a lavaras divarbenn Francez-Su : « N'am euz cavet en neb lec'h person ebed muioc'h devot, na muioc'h aketus da labourat evit silvidigez he zenved. Bemdez a bede a galon épad eun heur var gomzou an Aviel ha deveriou he gark ; bep sula prezege hag e tisclerie ar c'hatekiz d'ar vugale, dirac ar re vras, hervez aliou mad

Dom Mikel. Douget caer oa ive da lacât an oll da gana an offissou ha canticou.

Pa varvas ar person santel, he vugale a vouelas dourec, hag a enoras bez an Aotrou Guilcher evel bez eur sant.

## EIZVET PENNAD

**Dom Mikel e Meillars, e Ploare hag e  
Kemper (1618)**

Pa oa Dom Mikel o tont eus Enez-Sizun da Gemper, e oe pedet gant Aotrou 'n Escop Kemper da vont da barrez Meillars (pe Meylars), nebeudic amzer, ha da ober eno cark eur person, rac n'en devoa neuze belec ebed da gass d'ar barrez-se. Dom Mikel a sentas ; mes ne oa ket galvet gant Doue da vont da berson, rac-se e pedas an Aotrou 'n Escop da lemel divarnhan ar bec'h-se, ar c'henta ma c'helje.

Sonjal a reas neuze mont d'ober eun eil Mission da Gemper. Mes da belec'h mont goude Mission Kemper? Pedi a ree an

Aotrou Doue da rei dezhan sclerijen evit anaout he volonte. O pebez nerz a so e peden eun den santel ! Ar Verc'hez sacr en em ziskuezas d'he servicher hag a lavaras dezhan : « Va map, sellit du-hont bek eun tour huel ; goude Mission Kemper, e tleit mont d'ar c'harter-se da besketa eneou da Zoue. Dalc'hit mad da labourat evit silvidigez an eneou, ha bennoz va Map Jesus a chomo ganeoc'h. »

Dom Mikel a gouezas var bennou he zaoulun dirac ar Verc'hez. Eur c'hras ken dispar a grescas tan ar garantez e calon ar missioner. Mont a ra var eeun da velet an iliz oa bet diskuezet dezhan gant ar Verc'hez. Da Verc'her al Ludu, e erruas e Ploare, hag e cavas an iliz leun a dud : labourerien douar, martolodet, bourc'hizien dister. Dom Mikel a bignas er gador, hag e comzas dezho gant calz a garantez ; prometti a reas ive gant gras Doue, dont

da rei eur Mission dezho goude beza tremenet ar c'horais e Kemper.

Epad Mission Kemper, Dom Mikel a visitas an dud gounezet ganthan ar vech kenta d'ar vuez devot; creski a reas an niver anezho, ha gounit a reas meur a hin adarre d'ar brassa santelez, eurus da vont gant hent roial ar groaz.

Buez an Aotrou Mikel Nobletz

PEVARE LEVR

Dom Mikel e Douarnenez  
(1615-1640)

## KENTA PENNAD

---

**Pe stad oa Douarnenez. — Labouriou  
Dom Mikel**

---

Dom Mikel en doa hast da vont d'ar gær  
iskuezet dezhan gant Mam Doue. D'an  
2<sup>a</sup> viz Mæ, e tigouezas e Douarnenez.  
Ho e c'hello kentelia var ho deveriou ar  
opl eus kær ha divar ar mæz; ar par-  
eziou nessa, hag ouspen-se an dud a  
avez; marc'hadourien, an dud a vor, a  
eue neuze da Zouarnenez evit ho c'hon-  
verz. Neuze ne oa ket henchou houarn,  
a henchou-all zoken, evel a so breman.  
ac-se, ar c'honverz hag ar beachou e vize  
ket var vor. Setu perac e oa kæriou bras

ha pinvidic var bord ar mor, hag a so  
dilezet divezafoc'h, pa eo bet chenchet  
doare d'ober ar c'honverz, evel kær var  
Penmarc'h, e Kerne, ha ker Sant-Vaz  
Conk-Leon.

Douarnenez ne oa ket ouspenn daou  
den ennhi, mes calz a varc'hadourien  
deuc di eus Bourdel, Marseill, ar Spagn  
ar Portugal, an Itali ha Bro-Saoz.

Araoc commans da brezec e Douarnenez,  
Dom Mikel a i eas da c'houlenn bennac,  
Aotrou person Ploare, hag aotre da brezec  
e iliz Santez-Helena, a so e kær demda  
d'an aod. Breman a so savet e Douarnenez  
nez eun iliz nevez, consacret da gale  
Jesus ha gret diou barrez gant par  
Ploare. Mes neuze ne oa nemet eur bar  
hag iliz Sant-Herle, e bourg Ploare,  
iliz parrez Douarnenez. Aotrou person  
Ploare oa bet test eus labouriou Dou

Mikel, e Conk-Leon. Evurus oa da gaout  
en he barrez eur missioner ken santel.  
Biscoaz, emezhan, n'am oa roet va ben-  
noz gant kement a joa.

Dom Mikel ne gollas ket he amzer;  
mont a reas d'an iliz da bedi dirac an  
aoter, ha goude he beden, a i eas da son  
ar c'hleier. Redec a ra an dud d'an iliz,  
en eur c'houlenn petra so a nevez, ma soner  
ar c'hleier d'an heur-man?

Aoun o doa ne vize bet arruet eun drouc  
bennac, pe croget an tan goall. Pa oe leun  
an iliz, Dom Mikel a bignas er gador da  
brezec.

« Aoun oc'h euz, emezhan, na ve croget  
an tan goall en eun ti bennac, goassoc'h  
drouc a so dare da goueza varnoc'h, pe-  
cherien... Evit miret ouz an drouc-se,  
deut da glevet comzou Doue. »

Goude ar sarmon, calz a c'hoarzas var  
gont ar missioner; mes darn-all o devoa

bet, epad ma prezege, santimanchou hag  
deue digant Doue hepken ; ar re-man  
grede mad e oa speret Doue gant ar mis  
sioner. En ho zouez en em gave eur belec  
anavezet bete neuze evit carout re ar  
guin. Ker piket oe he galon gant preze  
gen Dom Mikel, ma renonsas a grenn d'an  
evach. Pedi a reas ar missioner da vont  
da loja ha da zibri d'he di. Skueriou san  
tel Dom Mikel a zougas ar belec-se betec  
ar santelez vrassa. Epad ma chomas Dom  
Mikel e Douarnenez, ar belec-se oa egi  
he zorn dehou, hag a roe scoazel dezhan  
en he oll oberiou mad.

Dom Mikel a gavas e Douarnenez bu  
gale, tud oajet a bep stad, ha ne anave  
zent ket ar pez e renker da c'houzout evit  
beza christen, ha mont d'ar Baradoz. Com  
mans a reas da ober catekiz. Coulscoude  
ar vourc'hizien, ha cals eus an dud oajet,  
a zisprize ar c'hatekismou-se. « Ne dint

mad, emezho, nemet evit ar vugale. Coll  
he amzer eo mont da glevet ar mission  
ner-se. »

Coulscoude, nebeud a nebeud, daoust  
d'ar gevier-se, an niver eus an dud a se  
laoue comzou Doue, a greske bemdez.

Lod oa dalc'het c'hoaz gant malis an  
drouc-speret, ha gant an techou fall. Ne  
felle ket dezho mont d'ar c'hatekiz, var  
zigarez e oant re goz ; lod-all a zrouc  
comze ouz ar missioner : « Ne oa, emezho,  
nemet eun truffer, eur sorcer ; marteze  
zoken, e oa an Antechrist. » Rac-se e virent  
ouz ho gragez hag ouz ho bugale da vont  
d'ar c'hatekismou.

Setu pe seurt brezel a ree an diaoul d'an  
dud-se, evit pellât anezho diouz Dom Mi  
kel. Mes eur marc'hadour pinvidic, gant  
he bried, en em zisclerias evit ar missio  
ner. Diskouez a reas dirac an oll peger  
haaz oa ar rebechou grêt dezhan : « Nan,

eme ar marc'hadour-se, mont d'an offeren-  
clevet comzou Doue, kement-se na vir ket  
ne raje an den he afferiou er bed-man-  
rac dre gement-se eo e tenner bennoz an  
Aotrou Doue var eun tiegez. »

Comzou an den-se a roaz calon da gal-  
a dud discredic. Eun toullad a chome  
disent; neuze dre ali Dom Mikel, Aotrou  
person Ploare a zisclerias, er gador bre-  
zec, ne vize roet hiviziken sacramant ebed  
d'ar re ne haljent ket lavaret mad ho  
fedennou, ha respont d'ar c'hatekiz e vize  
goulennet digantho.

An dro-man avad e oa tizot ar guenn  
Dont a reas an oll d'ar c'hatekiz gan-  
aoun da veza casset d'ar gær gant me-  
pa vident deut da zimezi, da govez, pe da  
veza paeron ha maeronez.

An dud divar ar mæz e oa boazet d'en-  
em unani e meur a lec'h eur vech, diou-  
vech bep sizun, evit dansal eus an noz

An dansou noz a so peurvuia scol an  
diaoul. Ar missioner a gassas d'ar lec'hiou-  
se tud goueziec, da ober catekiz, da gana-  
ar pedennou ha canticou; evel-se e ve-  
chenchet scol an diaoul e scol Jesus-Christ.  
Dom Mikel a ziskuez aman an doare da  
denna frouez eus ar c'hiziou fall : red eo  
lalat kiziou mad en ho lec'h.

Mikel Nobletz a reas missionou er par-  
reziou tro-var-dro da Zouarnenez, mes  
dont a ree aliez d'ar gæric-se; eno e  
chomas pemp bloaz varnugent, ha chomet  
e vize bete fin he vuez, paneved malis an  
drouc-speret, a lacas rei urz dezhan da  
vont kuit.

Dom Mikel, egis he Vestr Jesus, a gare  
an oll dud, mes dreist ar re-all, an dudi-  
gou paour, an dud a boân, a veve dre ho  
labour. Ar re-man a anavezaz buan calon  
ho zad ker, hag en em blijas o cleve he  
genteliou mad.

## EIL PENNAD

**Buez Marc'harit Nobletz**

Dom Mikel a c'halvas adarre he c'hoar  
Marc'harit, e oa neuze e Kemper. Mad eo  
lavaret eun dra bennac var buez an deme-  
zel santel-se; setu aman eur verz grêt  
var-se :

Me ho suppli oll christenien,  
Clevit eun dra a so certain :  
Mont da heul Jesus a so red,  
Mar fell deoc'h beza salvet.

En escopti Leon 'z euz bet,  
Eur Verc'hez nobl, fur ha parfet,  
So bet santel en he buez,  
Hanvet Marc'harit an Nobletz.

Gant peb seurt enor ha respet  
He iaouankiz e deuz renet,  
E Kerodern, maner he zad,  
Ha ganthan oe desket ervad.

He breur belec e devoa bet  
Gant guir garantez sicouret,  
O cavout coun a gement-se,  
He breur evithi a bede.

Dan oad a bemp bloaz varnugent,  
En em lakas var hent ar sent,  
Oc'h imita humilite  
Jesus-Christ guir Den ha Doue.

Discleria a reas neuze  
He c'hoant bras hag he bolonte  
D'he breur santel Mikel Nobletz,  
Gant guir fizians ha carantez.

An den santel gant eur joa vras,  
He c'hoar garet a gelennas :  
« Red eo dispriz atao ar bed,  
Ha gouzanv gant patiantet. »

Rac-se, Marc'harit an Nobletz  
A renas eur vuez nevez ;  
Ha neuze a greiz he c'halon,  
En em roas d'an oregon.

Hag evit plijout d'hon Salver,  
He tilezas he dillad caer,  
Hag eun diamanant a briz bras,  
Da eur baourez kez e roas.

Ar rest eus he guiscamanchou,  
He dillad seiz hag he meublou,  
A galon vad ho renonsas,  
Netra anezho ne viras.

Miret a reas he leve,  
Rac, dre garantez evit Doue,  
E felle dezhi assista  
En ho ezomou, he nessa.

Maner Kerodern a guiteas,  
Ha da Vontroulez e ieas,  
Evit creski he santelez,  
Gant brassoc'h pinijen bemdez.

Pa oa o tont da Vontroulez,  
En hent e cavas eur baourez ;  
Eur baisantez goall baour guisket,  
Gant dillad lien fall meurbet.

Bras e oa sur ar garantez,  
E devoa evit ar baourez :  
He dillad mad a ziviscas,  
Ha d'ar vrek paour-se ho roas.

Hag el lec'h he dillad mad,  
Neuze e kemeras timad,  
Gant calz a joa ha levenez,  
Habit lien ar baourez kez.

Gant an dillad fall-se guisket,  
E ieas evurus meurbed,  
Dirac he breur Mikel Nobletz,  
Ar belec leun a santelez.

He breur belec pa he guelas,  
En devoe outhi eur joa vras,  
O velet e doa commanset,  
Breman da zisprijout ar bed.

En amzer-se e oe bet  
Eun dimezel vras distroet (1)  
Gant Doue dre he vadelez,  
Ha dre gomzou Mikel Nobletz.

Ordren a ra an den santel  
D'he c'hoar mont gant an demezel,  
Beva en he c'hompagaunez  
Hag oboissa dezhi bemdez.

Hag evit disprizout ar bed,  
Ha carout mad ar groas bepred ;  
Evit beza guisket ganthi,  
Eun habit gris a ro dezhi.

(1) An demezel Franceza Kizidic.

Rei a reas dezhi ouspen,  
Eur bissac'h greet gant lien,  
Hag en he daouarn eur skudel  
E oe leket d'ar plac'h santel,

Setu e pe giz ez eo bet,  
An demezel Nobletz guisket,  
Ha d'an ilizou oll casset,  
Egiz eur plac'h simpl a speret.

E Montroulez, en doare-se,  
An aluzen a c'houlenne ;  
Mes gant calz oe anavezet,  
Gant dillad ker fall 'n em visket.

Goude he breur he lakeas  
E pansion epad eur bloaz ;  
Egiz eur baourez e veve,  
Ar memez boued a gemere.

Neuze evit he labourou,  
Goude ober calz pedennou,  
Da c'hriat en em lakae,  
Evit sicour memproù Doue.

Rac gant ar pezh a receive,  
Bep bloaz evit he leve,  
Marc'harit roe aluzen,  
Evit soulaji ar beorien.

Etre daouarn he breur caret,  
Mignon hon Salver benniget,  
Dre ar vœu eus ar chastete,  
En em roas oll da Zoue.

Elec'h ma ie ar missioner  
Da brezec lezen hon Salver,  
E teue Marc'harit ive  
Da gelen merc'hed ar vro-se.

An taolennou a zisplege,  
Ha peden a galon ree,  
Gant ar merc'hed en he c'hampric,  
Goud' an exercissou public.

Beza e devoa distaget  
He c'halon oll diouz ar bed,  
Echui reas he buez,  
E creis ar brassa carantez.

Da c'houel sant Laurans a i eas,  
Gant carantez ha truez bras,  
E ti eur vaouez vertuzus,  
A voe outhi trugarezus.

Goall gl'ant e oa ar vaouez-se,  
Na espere den a vefje ;  
Pemp crouaduric e devoa,  
Necesser bras dezho e voa.

Marc'harit an Nobletz neuze,  
A galon a bedas Doue,  
Da zigas dezhi ar c'hlenved,  
Ha da rei d'ar vreg ar iec'hed.

Biscoas dre sur na voe guelec,  
Buanoc'h peden selaouet,  
Rac var an heur e oe roet  
Gant Doue dezhi ar c'hlenved.

Mes ar vreg kez e oa clanv bras,  
Souden ar iec'het e cavas,  
Evit sevel he bugale,  
E voa pareet gant Doue.

Ar servicherez da Zone,  
Abars ma rentas he ene,  
Epad nao devez penn da benn,  
A chomas e poan hag anken.

Neuze Marc'harit an Nobletz,  
Ouz Doue leun a garantez,  
Ar gomz diveza lavaras :  
Jesus, Jesus a brononsas.

A bep canton a so deuet,  
Goude he maro d'he guelec,  
Intanvezet, emzivadet,  
Ha tud paour gant hi sicouret.

Pa oa maro, ractal goude,  
Hep mar, dre sclerijen Doue,  
D'he breur Mikel oe discouezet,  
He c'hoar santel, en eurusdet.

E Plougerne eo bet ganet,  
Hag e Ploare interret.  
E traon an iliz oe laket,  
Egiz e devoe goulennet.

Dom Mikel he-unan en devoa skrivet  
buez he c'hoar Marc'harit, hag a lavare er  
vuez-se ne gouste netra dezhi ober mira-  
clou, epad ma veve er bed-man. — Goude  
he maro ive, calz a dud clanv o deuz bet  
ar iec'hed digant Doue, o pedi var bez an  
demezel Marc'harit Nobletz e Ploare.

Teir intanvez devot a sicoure Dom Mi-  
kel hag he c'hoar da ober vad d'an oll e  
Douarnenez : carget oant da velet ar re  
glanv, da rei aluzennou d'ar re baour, da  
ober lavaret bep sizun eun offeren evit ar  
Roue, hag eun all en enor da sant Joseph,  
evit goulenn dre ar sant bras-se eur garan-

tez tener e kenver Jesus ha Mari. Ar merc'hed-se a zisplege ive an taolennou mysteries, pa vizent pedet d'hen ober gant eur belec bennac. Ar belec a c'houlenne digantho, petra eo an daolen-se, perac al lagad digor, hac egile clozet; petra sinifi an anevalet-se e creiz ar galon, etc., etc. Ar merc'hed a responte dirac an oll. Ouspense, displeg a reent ar memez taolennou en tiez, dirac ar plac'hed-all, hag ar vugale.

Gouscoude Dom Mikel a sonjas e c'helje he enebourien caout abec ennhan divar benn an taolennou discleriet gant ar merc'hed devot. Cass a reas diou anezho da Gemper, da lavaret d'an Aotrou 'n Escop, petra oant boazet da ober.

« Mad a rit, a respontas an Aotrou Belec, Escop Kerne, va bennoz a ran deoc'h ha d'ho labour. »

Daoust da gement-se, oe drouc comzet

enep Dom Mikel, hag e rencas scriva d'an Aotrou Jermen Kergelen, vikel vras, eul lizer hir evit diskuez ne oa netra da rebech dezhan, na d'ar merc'hed a boanie kement-all da zeski d'an dud paour lezen hor Salver, hag an hent eus an eurusdet eternal.

Ar Vikel vras a velas ne oa netra da damall d'ar missioner, hag her pedas da ober evel kent, ha da veva hep aoun ebed.

## . TREDE PENNAD

---

**Mission reet gant an Tad Per Kintin  
e Douarnenez (1628)**

---

Dom Mikel oa chomet unanet dre ar beden ha dre ar garantez, gant he ziskibl Per Kintin, eus a urz Sant-Dominic. Aliez e scrivent an eil d'egile.

Er bloaz 1628, Dom Mikel a bedas an Tad Kintin da zont gant eur relijius-all eus he gouent, d'he sicour da Zouarnenez, evit peur-ober ar vad commanset gant gras Doue. Dont e rejont, hervez bolontez Dom Mikel. An Tad Kintin a brezege diouz ar mintin, gant calz a nerz, evit elumi en oll galonou tan ar garantez divin.

Dom Mikel a ree catekiz, hag ar relijius-all, compagnon an Tad Kintin, a ree eur gonferans diouz an abardaez.

An dud divar ar maes a deue d'ar Mission-se eus Ploare ha calz a barrezioù-all. Ar visionerien a icas ive da brezec er parrezioù nessa. N'ouffer ket lavaret pegement a vad a reas ar Mission-se.

An Tad Kintin a varvas er bloaz varlerc'h, 1629, e Vitre, kæric eus Escopti Roazon, en eur gouent eus he urz. Buez ar relijius-se, hervez testeni Dom Mikel, a so bet leun a vertuzioù hag a vurzudou.

## PEVARE PENNAD

—

### Brezel nevez enep Dom Mikel (1630)

—

Eur brezel nevez oe gret enep Dom Mikel ; c'hoant oa d'ober dezhan mont kuit eus Douarnenez. Evit-se oe lamet he gark digant an Aotrou Guillou Brelivet, cure bete neuze e Ploare ; ar belec mad-se a sicoure Dom Mikel en he labouriou hag a scribe evithan he gahierou. Eun all, an Aotrou Pennec, oe casset kuit ive diouz ar barrez ; red oa dezhan mont da offerenni da iliz Pouldavid.

Coulscoude an Aotrou Nobletz oa unanet dre eur guir garantez gant an Tadou Capucinet, relijiuset eus a urz Sant-

Francez, ha gant an Tadou eus Compagnunez Jesus, deut da ren scolach Kemper abaoe daou vloaz. Pell araoc, epad Mission Landerne (1614), Dom Mikel en doa diouganet e teuje Tadou eus Compagnunez Jesus da ren scolach Kemper ha da rei missionou brezonec var he lerc'h. Setu sevenet lod eus propheci an den santel ; ar peurest a vezo sevenet dec vloaz divezatoc'h, dre vissionou an Tad Maner hag an Tad Bernard.

Mont a reas Dom Mikel da velet an Tadou eus scolach Kemper, hag e choazas, dre volontez Doue, an Tad Bernard evit he govessour hag he dad spirituel.

« Va zad, eme Dom Mikel, den ebed na dle fiziout ennhan he-unan, ha me nebeutatoc'h eget nicun-all ebed. »

Setu aze ar guir humilite a denne var labouriou Dom Mikel grassou puill an Aotrou Doue : *humilibus dat gratiam.*

Discleria a reas d'an Tad Bernard he oll vuez, he zoare da brezec, da zisplega an taolennou, etc., etc.

Mo gred a boulze an Aotrou Doue an missioner santel da rei da anaout kement se oll, evit deski an doare d'ober missionnou e Breiz-Izel. Rac an Tad Bernard a vezo hep dale covessour an Tad Maner ha divezatoc'h, he gompagnon kenta e missionnou.

Unan eus Tadou scolach Sant-Ignas (scolach Kemper), a brezegas epad an c'horais e Ploare. Dom Mikel a scrivas dezhan goude ar c'horais, evit he drugar recât; lavaret a ree dezhan en he lizer pebez enkreiz ha poan en doa da c'houzan a berz tud ar bed hag aberz an drouc speret. An diaoul milliget oa ken counaret enep Dom Mikel, ma claske sevel en he enep an oll dud, ar re vad zoken. Dont a reas a benn da lacat Aotrou person Ploare

da c'houlen ma vize grêt d'ar missioner mont d'he vro, rac an oll dud en em glemme anezhan. An Aotrou Doue a lezas an drouc-speret da vont bete skei ar belec santel, egiz en doa he lezet guechal da lacât en eur stad euzus, corf an den santel Job.

Eur vech Dom Mikel oe bet skoet kement gant an diaoul, ma rencas chom pevar devez en he vele gant ar boan hag ar gouliou. Coulscoude o veza trec'het an enebour dre he nerz calon hag he batiantet, an Aotrou Doue a gargas ene he servicher a joa, hag a lacas an darn vrassa eus an dud e oa enep dezhan, da anaout ho faot. Guelloc'h c'hoaz : Jesus a deurveas en em ziskuez d'ar missioner, ouspen eur vech ; guelet a reas ive ar Verc'hez, sant Joseph, an aëlez mad, sant Caourintin, patron Escopti Kerne, ha sant Ignas, choazet gant an den Doue, evit he skuer hag he batron.

Dom Mikel en deuz skrivet ar burzudou-se en he gahierou, pe discleriet anezho d'he govessor. Evelato, Dom Mikel en doa collet he vignon hag he gompagnon-coz, an Tad Per Kintin; hen he-unan oar uzet gant an oad ha gant tregass tud ar bed.

Goulen a reas digant Doue dre galz a bedennou, mar plische ganthan digass eun all da ober missionou en he lec'h.

« Ho pedennou a so selaouet, a lavaras dezhan eur vouez eus an Env; an hini a reno ar missionou var ho lere'h, a so e scolach Sant-Ignas, e Kemper. Ar iaouanca eus ar vistri eo. »

Dom Mikel a gemer dioc'h-tu an hent da vont da Gemper, da velet ar relijius iaouank-se, Julian Maner.

Ne lavaras netra d'an Tad Maner eus ar pezh en doa anavezet, na divarbenn an amzer da zont. Comz a reas hepken eus

sant Per ha sant Andre, oa bet galvet ho daou da vont da heul Jesus.

« Pebez gras, eme Dom Mikel, beza galvet da c'hounit eneo da Zoue ! Mad o deuz grêt beza leal ha beza sentet ouz mouez hon Salver. »

O veza en em erbedet ouz Julian Maner, ha promettet dezhan sicour he bedennou, Dom Mikel a lavaras kenavo.

Eur person iaouank oe digasset da Bloare, var dro an amzer ma varvas an Aotrou Belec, Escop Kerne, ha mignon Dom Mikel. Holl enebourien ar missioner a savas adarre ho mouez, hag a lacas ar Vikel vras da skriva al lizer-man :

« Aotrou Noblet, prezeget oc'h euz ar vertuziou ha discleriet e renker senti ouz ar re a c'hoularn an Iliz; grit eta breman ar pezh oc'h euz desket d'ar re-all ober, dis-troit d'oc'h Escopti Leon, ha na zeuit biken mui d'an Escopti Kerne. »

Eun den a iliz oe carget da gass d'ar missioner eun urz ker calet, ha da reiz dezhan da anaout perac e scrive dezhan en doare-se.

Dom Mikel a lennas al lizer var bennou he zaoulin ; poket a reas meur a vech d'al lizer ; anaout a reas bolontez an Aotrou Doue, ha ne sonjas nemet da blega he benn, ha da senti.

Douc en em servich aliez eus an dud fall, hag eus malis an diaoul zoken, evit rei da anaout d'ar Sent, he volontez santel.

Darn eus mignonetar missioner a glasket ober dezhan gedal, hag e vize casset tud da velet ar Vikel vras, da ziscleria dezhan pebez vad a ree ar Mission e Douarnenez hag er vro. Dom Mikel na selaouas ket an dro-se aliou he vignonet.

Coulscoude ar c'helou eus an urz deut eus Kemper a so skignet en eun taol, hag

an dud a zired var-zu iliz Santez-Helena, ha var bord an aod.

Eun druez e oa gullet ha clevet glac'har an dud keiz-se hag ho c'hlemmou.

Gouela a reent a vouez hucl, egiz bugale o vont da goll ho zad muia caret.

Dom Mikel a vescal he zaelou gant re he vugale ; hag o sevel he vouez e creiz an trouz hag an hirvoud, a lavaras : « Va bugale geiz, abaoe ez oan deut en ho touez, aberz Doue, n'am euz ket espernet va foan evit ho lacât oll var hent ar Baradoz. Abaoe pemp bloaz varnugent am euz kinniget evidoc'h da Zoue, va daelou, va labour, va leve, va buez zoken, rac aliez ez oun bet e riscl da veza lazet gant oc'h encbourien. Eurur e vizen bet da chom ganeoc'h beteg ar maro, mes an Aotrou Doue a ro urz din d'ho kuitât. Va speret a vezo bepred ganeoc'h dre ar pedennou e rin evidoc'h. Dalc'hit sonch eus va

c'homzou diveza, va bugale geiz : « En em garit an eil egile ; carit oc'h enebourien ; lavarit bennoz d'ar re a lavar malloz deoc'h ; grit vad d'ar re a glask ober droue deoc'h, ha pedit evithan... Setu an diveza guech deomp d'en em velet er bed-man, mes ni en em velo oll e brô ar Sent.

» A greis calon e pedan Jesus ha Mari da chom ganeoc'h aman, ha da zont ganin em beach ; en Hano an Tad, hag ar Map, hag ar Speret-Santel. »

En eur lavaret ar c'homzou diveza-se, Dom Mikel a roas he vennoz d'ar bopla daoulinet.

'Pa oe guelet ar vag o pellaat ouz ar porz mor, e savas adarre hirvoud ha goelvan goest da denerât an oll galonou.

Keit ha ma vebas Dom Mikel e Conk-Lochrist, calz a dud eus Douarnenez a dreuze ar mor evit mont da velet ho zad spirituel, ha da glevet he genteliou hag he aliou mad,

Goude maro ar missioner e vize gueled muioc'h a dud c'hoaz o vont eus Douarnenez da vouela var bez ho zad, ha da c'houlenn bep seurt grassou dre sicour he beden-nou mad.

« Doue en deuz roet din, a lavare Dom Mikel, teir merc'h spirituel a so dounoc'h em c'halon eget ar re-all : Montroulez, Conk-Lochrist ha Douarnenez. »

Coulscoude Douarnenez a gare muioc'h evit an diou gêr-all : « Rac eno, emezhan, am euz bet muioc'h a boaniou da c'houlzav, muioc'h a c'hrassou var va labour ; hag eno am euz cavet muioc'h a eneou santel, distag ho c'halon eus an oll draou crouet. »

Sonch en doa da chom e Douarnenez betek he varo, ha c'hoant en doa da veza interret ebars ilis Ploare, dirac aoter sant Nicolas. Hogen Doue a reas dezhan distrei da Gonk-Leon da beur-ober al labour en doa bet commanset eiz vloaz varnugent araoc.

Buez an Aotrou Mikel Nobletz

---

LEVR PEMPET

---

Dom Mikel e Conk-Lochrist.  
— He varo hag he viraclou  
(1640-1652).

## KENTA PENNAD

---

### **Labouriou ha diskibled Dom Mikel**

---

Dom Mikel oa o ren he dri bloaz ha tri-ugent pa ieas kuit eus Douarnenez. Dre he labouriou hag he binijennou dreist-vuzul oa deut da veza ven ha sempl a gorf ; he speret avad oa ken lemm ha biscoaz ; hag he garantez hen douge da labourat egiz eun den iaouank. Ober a reas adarre sarmoniou, catekismou, ha missionou e meur a barrez eus goueled Leon. Clask a reas dibab eneou goest da ren ar vuez devot evit kenderc'hel he labour goude he varo.

E parrez Plouger (Ploumoguer), oa eur person mad ha desket caer ; mes, siouas,

ne c'houie ket ar brezonec. Dre ali mad Dom Mikel, en em lacas da studia iez he zenvedigou, evit gallout ober he gark. Goude-se oe savet gant an Aotrou 'n Escop, da eur renk hueloc'h, hag a reas calz a vad en oll Escopti Leon.

E touez an dud laket var hent ar sent gant Dom Mikel, Jannet ar Gall a so er penn kenta.

Eur vreg, araoc mervel, a bedas Dom Mikel da veza egiz gouard ar verc'h iaouank e chome var he lerc'h.

Eur plac'h divar ar mæz e oa Jannet ar Gall, disoursi, ha ne glasse gouzout netra. Ne sonje nemet da c'hounit peadra da vaga he c'horf.

Dom Mikel a reas dezhi dont da Gonk, hag he lacas e ti an demezel Fontenay. Evit he boued e thie labourat, gant promessa avad, e vize roet amzer dezhi da vont da zeski he relijion. Mes nebeud a

skiant e devoa; hag he mestrez na roe ket amzer dezhi da vont d'ar c'hatekiz. Comz areas zoken enep Dom Mikel, o clask miret gouz ar plac'h-se da vont d'he gaout.

O velet ar pezh a reean demezel Fontenay, Dom Mikel a sonjas cass ar plac'h paour da Zouarnenez, da di an intañvez Domnat Rolland; houman e oa boazet da zeski ar c'hatekiz d'an dud dizesket. Pa glevas an demezel Fontenay e oa c'hoant da lemel ar plac'h diganti, ez eas counar an diaoul en he c'horf. Lavaret a reas kement a deuas en he fenn, enep Dom Mikel hag he genteliou; rei a reas zoken eur javedad erenv var vizach ar baourkez matez. Dom Mikel o veza clevet an dra-se, a iegas da gaout an demezel, pa oa o tont er mæz diouz iliz Sant-Laurans; ha dirac calz a dud, a lavaras dezhi : « Dimezel didruez, c'hui oc'h euz drouc comzet divar benn comzou Doue, hag ar re a brezec aberz an

Aotrou; clask a rit, enep bolontez Doue hag enep ho promessa, miret ouz eur plac'h paour da zeski he relijion. Me n'am euz na guir, na c'hoant da skei varnoe'h. egiz oc'h eus skoet var ho matez; mes guir am euz digant an Aotrou Doue da daol en ho taoulagad, hervez comzou Jesus-Christ, ar bouldren eus va boutou. Kement tra oc'h euz lavaret enep comzou Doue, hag ar missionner, a so faoz, hag evit ma vezo anavezet kement-man, azalec bremañ beteg ho maro, c'hui a chomo mud, evit silvidigez oc'h ene. »

Doue a gomze dre genou he servicher; an demezel a chomas mud azalec neuze beteg he maro. Coulscoude, Dom Mikel a gassas Jannet ar Gall da Zouarnenez; eno e tescas epad c'huec'h miz an oll myste-riou eus ar feiz hag an oll guirionezou eus ar relijion. Dont a reas ker gouiziec ma c'hellas goude-se deski catekiz d'a

re-all, hag ober da entend an taolennou dirac ar bopl gant eur frouez estonus meurbed.

Mont a reas d'he bro, hag a renas beteg he maro eur vuez devot ha talvoudus d'he nessa, dreist-oll d'an dud clanv ha toc'hor. Kelen a reas gant eur garantez dispar he mestrez goz, an demezel Fontenay. Houman a varvas tri bloaz goude ma oe chomet mud, er guella santiman-choù a binijen hag a garantez.

## EIL PENNAD

**Dom Mikel hag an Tad Maner e  
Conk-Lochrist (1640)**

Da fin ar miz eost 1640, e teuas adarre da scolach Kemper, an Tad Julian Maner, evit en em rei oll da ober missionou e Breiz-Izel. Dom Mikel her pedas da zont d'he velet da Gonk, rac hen ne oa ket evit mont da Gemper, abalamour d'an urz en doa bet digant ar Vikel vras.

Ar beden-se oe evel eur gourc'hemenn evit an Tad Maner. Mont a reas da Gonk da velet Dom Mikel ha da glevet diganther bolontez vad an Aotrou Doue, hag an doare da ober missionou gant frouezh

Pebez joa evit an daou visioner santel-se. Dom Mikel a reas eur govession jeneral gant an Tad Maner. Goude ez ejont ho daou d'an iliz, el lec'h ma oa bet galvet ar bopl, ha Dom Mikel a lavaras dezho :

« Va bugale vad, setu aman rener ar Missionou e Breiz-Izel ; digasset eo gant Doue evit rei skoazel da vreiziz da vont d'ar Baradoz. »

Neuze Dom Mikel a roas d'an Tad Maner he gloc'hic hag he daolennou ; hag ez ejont ho daou da velet an dud clanv e kær.

Distroet da di Dom Mikel, ar belec santel a reas d'an Tad Maner kenteliou caer divar benn he gark-nevez. Eun dra bennac a dregasse speret an Tad Maner pell a oa. Dom Mikel a zigoras eur c'hahier hag an Tad Maner a lennas gant eston, ar respont d'ar peza boanie he speret. Rac-se, ar missioner iaouank a selaoue comzou

Dom Mikel evel comzou deut var eün eus genou an Aotrou Doue.

« Va zad, eme Dom Mikel, ho pedi a ran da gaout sonch eus kæric Douarnenez, ha da ober ennhi ho kenta Mission. »

Neuze a roas dezhan eur c'hreunen ben-niget, evit paraa an dud clanv. « Touchit ractal, emezhan, ar venonen savet aze var va zal. » An Tad a sentas, hag ar venonen a ieas kuit, hep na chomas merk ebed anezhi. Araoc lavaret kenavo da Zom Mikel, an Tad Maner a zaoulinas evit goulenn bennoz he vestr santel. Dom Mikel a savas he zorn da viniga an Tad Maner; goude-se, a ieas var he zaoulin ive, hag an Tad Maner a rencas rei he vennoz d'ar missioner coz. En em vriata a rejont en eur vouela, hag an Tad Maner a zistroas da Gemper, mall ganthan da gommans ober missionou hervez kenteliou Dom Mikel.

## TREDE PENNAD

---

An Tad Maner hag an Tad Bernard,  
galvet da zont da Gonk, gant Dom  
Mikel.

---

An Tad Maner a brezegas epad ar c'ho-rais e Douarnenez. Goude-se e oa o vont da Enez-Sizun gant an Tad Bernard he gompagnon, pa deuas kelou dezho ne oa ket ar voazet er gær; o pesketa e oant, el lec'h-all. Er memez amzer, eur vagik digasset eus Conk a zigouesas gant an Tadou : « Dom Mikel a bede anezho da vont da Gonk da ober Mission. » Ar visionerien a ieas er vagik-se, evit mont da Gonk.

An Aotrou Cupif, Escop Leon, e oa

neuze en Abbati Sant-Vaze. Ar vissionerien a ieas var cūn d'he saludi ha da c'houlén diganthan aotre da rei missionou en he Escopti. An Aotrou Cupif oa ganet e Paris, ha nevez laket da Escop el Leon : rac-se na anaveze ket an dud, na iez ar vro. Ne anaveze ket mad ken nebeud reolen Compagnunez Jesus. Setu perac a respontas d'ar vissionerien :

« C'hui so galvet d'ober scol er scolachou, hag er semineriou, neket da rei Missionou, rac-se n'oun ket evit selaou ho peden ; ouspen-se, me na vank ket beleien din, goest mad da gelen an dud eus va Escopti. »

An Tadou, hep respont netra, a zaoulinas da c'houlén bennoz an Aotrou 'n Escop, evit distrei da Gemper. Mes an Aotrou du Louet, viket vras Escop Leon, a glevas pe seurt respont oe roet d'ar vissionerien. An Aotrou-se, egiz hon euz lavaret, oa bet

e Bourdel e scol gant Tadou Compagnunez Jesus ; breman oa hanvet da Escop e Kerne, mes ne oa ket deut he baperiou c'hoaz digant an Tad Santel ar Pab.

Compren a reas e oa bet tromplet an Aotrou 'n Escop gant unan-bennac, divar benn Dom Mikel hag an Tadou missionerien. Mont a reas eta d'he gaout, hag a lavaras dezhan :

« Aotrou 'n Escop, anaout a ran ar relijuzet-se, hag ar reolen eus ho urz ; galvet int gant an Iliz, neket hepken da ober scol, mes ive da rei Missionou ha da brezec e heb bro ha da hep seurt tud. Me a so eurus da vont da Escop da Gemper, dre an espérans am euz da gaout sicour digant an Tadou-se, da scanvât va c'hark pouner. Cassit an Tadou-se, me ho ped, d'an enezennou dilezet a so du-hont (Eussa ha Molencz), hag o pezo anaoudegez eus ho bolontez vad. »

An Aotrou 'n Escop a reas clask an Tadou e ti Dom Mikel, ha pa oant distroet d'he gavout, a roas urz dezho da vont d'ober Mission da Eussa ha da Volenez. E *Buez an Tad Maner*, e caver pegement a vad a reas an Tadou en enezennou-se.

---

## PEVARE PENNAD

---

**Brezel enep Dom Mikel hag he daolennou**

---

Tud oa deut eus Douarnenez da glask eur Mission da Gonk ; mes an Tadou a oa en enezennou. Darn eus an dud-se a cho-mas e Conk da glevet comzou Dom Mikel, ha da gana canticou nevez desket dezho gant an Tad Maner epad ar c'houraiz.

Eun teod fall bennac, enebour da Vikel Noblet, a ieas da gaout an Aotrou 'n Escop da lavaret bep seurt gevier enep an den santel, ar c'hanticou, hag an Tadou missionerien, mignonet Dom Mikel.

An Aotrou 'n Escop a gredas d'an den-se, hag a c'halvas Dom Mikel. Araoc goulen

netra diganthan, an Aotrou 'n Escop a lavaras dezhan petra en doa clevef.

Dom Mikel na zislavaras ket ar gevier-se, mes dre humilite, a respontas : « Anaout a ran ne d'oun nemet eur pec'her, ha ne veritan ket an enor da zougen an hano a velec. »

An Aotrou 'n Escop a gredas ne doa Dom Mikel netra da respont d'ar pezh a damaller dezhan, hag a gondaonas ar c'hanticou hag an taolennou ; gourc'hemmen a reas cass kuit an dud eus Douarnenez.

Eun intanvez devot, Marc'harit Poul-laouen, en em glemmas da Zom Mikel :

« Perac, emezhi, n'oc'h euz ket diffaziet an Aotrou 'n Escop, ha diffennet diana an taolennou hag ar c'hanticou ? »

Dom Mikel a respontas :

« Bezit e peoc'h ; an Aotrou Doue a

gomero ar gaoz entre he zaouarn hag e rezo anavezet ar virionez gant an oll. »

Setu aman penaoz e tigouezas an traou : Var dro mill den bennac a deuas, da fin ar Missionou euz an enezennou, evit beza confirmet. Kerkent ha ma teujont var an douar bras, an dud-se en em rannas e diou vanden ; ar baotret-oll, unanet var ziourenk ; ha pelloc'h, ar merc'hed, ive var ziourenk-all. Mont a reent e procession d'an iliz en eur gana, egiz ma oa bet gret epad ar Mission.

Peoc'h, peoc'h, a lavare an dud eus kær, n'ouzoc'h-hu ket eo condaonet ar c'hanticou-se gant an Aotrou 'n Escop ?

Petra, emezho, canticou an Tadou santel a so condaonet, n'hellomp ket credi ; hag e talc'hent da gana.

Eur belec bennac a deuas d'ho selaou, hag e cavas caer ha mad ho c'hanticou, grêt oll var gourc'hemmenou Doue : ar *Gredo*,

an Actou a Feiz, a Esperans, a Garantez,  
ar Sacramanchou hag ar pec'hejou capital.

An Aotrou Pencrer, eus ar Folgoat, oa ar  
belec-se ; mont a reas da ziscleria d'an  
Aotrou 'n Escop, e oa bet tromplet gant  
eun teod fall bennac ; rac ar c'hanticou  
spirituel e oa devot, hag an taolennou ne  
oa netra da lavaret enep dezho. Glac'haret  
bras oe an Aotrou 'n Escop da veza grêt  
poan da Zom Mikel.

An Aotrou Dermat, belec a Sant-Salver  
(Recouvrance), e kichen Brest, a bignas  
er gador, da ziscleria ar virionnez divar  
benn an taolennou hag ar c'hanticou, ha  
da veuli Dom Mikel hag an Tadou missio-  
nerien, he vignonet.

## PEMPET PENNAD

**Clenvet diveza Dom Mikel**

Dom Mikel a labouras c'hoaz keit ha ma  
c'hellas ; sicour a ree ar Missionou roet  
gant an Tad Maner hag an Tad Bernard  
dre he bedennou nerzus. He vuez oa bet  
santel meurbet, he varo a vezo henvel ouz  
he vuez, maro eur sant.

Anaout a reas dre sclerijen Doue e oa  
lost an termen eus he harlu var an douar,  
ha Dom Mikel en doa bet a vianic eun  
devotion vras evit mysteriou ar mabic  
Jesus, ha myster ar groaz santel ; setu  
perac e pedas hor Salver da rei dezhan  
araoc mervel, ar c'hras da veza sempl ha

dinerz egiz eur bugel, hag er memez amzer, da c'houzanv poaniou eun den staget ouz ar groaz. Goulén a ree avad ar c'hras da viret nerz he speret evit gouzanv gant mirit an oll boaniou-se. An Aotrou Doue a roas dezhan da anaout oa selaouet he beden (1648).

Dom Mikel a zisclerias ar c'hras-se da unan eus he vrassa mignonet; lavaret a reas dezhan ive pe vare ha penaoz e tlie mervel.

Tri bloaz goude-se (1651), var dro gouel Mikel, oe cavet ar missioner santel seziet he oll vemprou; epad seiz miz e chomas er stad-se: red oa he sevel, he gousket, he basca, he visca evel eur bugel. He deod hepken a chome ganthan da veuli Doue ha da ober vad d'he nessa. Araoc ma couezas er c'hlenvet-se, en doa skrivet d'an dud a Zouarnenez:

« Na espernit netra, emezhan, evit rei

d'ho pugale descadurez christen; dre-se, claskit evit ho scolia, mistri santel. Enorit an oll dud a Iliz, ha dreist oll ar re en em denn muioc'h eus ar bed, hag a labour da vont da sent. Kendalc'hit da garet ha da sicour an Tadou Capucinet hag ar relijiuset-all; grit an aluzen evit gloar Doue hag ezmou ho nessa. Dreist pep tra en em garit entrezoc'h, ha Doue a scuillo varnoc'h he vella grassou. »

Scriva a reas ive he ziveza kenteliou d'he heritourien. Setu aman an testamant caer a lezas gantho:

« Lezel a ran ganeoc'h, emezhan, va zamic netra ha va faourentez, setu va oll vadou var an douar. »

Pa oe skignet ar vrud eus clenvet an den santel, e teue calz a dud d'he velet: tud paour, tud pinvidic, he gerent, he ziskihen.

Dom Mikel a roc dezho kenteliou hervez

hostad hag ho ezomou. Mes d'an oll a lavare evel sant Ian, an abostol muia caret gant Jesus : « En em garit an eil egile ; grit vad d'ar re a ra drouc deoc'h. »

An Aotrou Kerodern, ar c'hossa eus ho nizet, o veza deut da velet he eontr ha da c'houlenn gant he vennoz he aliou mad, Dom Mikel a lavaras dezhan :

« Va niz, amzer o pezo da zont c'hoaz d'am gueleit ; deuit, me ho ped, er penn kenta a viz Mae ; er miz-se, am euz esperans da vont d'ar vuez eurus. »

An Aotrou Marc'her Kergroadez o velet Dom Mikel en he diic goall vian, her pedas da zont ganthan d'he vaner. Ar missioner a vouse'hoarzas hag a c'houlennas : pegement e raje dezhan evit ober an troc-se ? — Goude-se, dre eur sclerijen divin, e lavaras : « Aotrou, ho trugarecât a ran ; miret ho castel evidoc'h, mes n'oc'h euz mui pell amzer da chom ennhan, ha neuze c'hui

garje beza bet troket ho maner gant eur gampric evel va hini. »

An Aotrou-sea varvas nebeudic goude-se.

Dom Mikel en doa cals a boaniou, evelato, goulenn a reas ma vizont cresket, evit caout perz e passion ha maro Jesus-Christ. An Aotrou Doue ne oa ket evit miret da glevet he beden, hag a reas d'an drouc-speret galloud da verzeria an den santel. Enebour an dud a labouras gant he oll arrach : bete teir guech oe scourjezet Dom Mikel gant Satan, ha duet oll he gorf a daoliou fouet. Meur a vech-all oa bet ar missioner goall skoet gant an diaoul, hen he-unan en deuz discleriet d'an Aotrou Passerue, eus Conk-Lochrist. Ar belec santel a chomas trec'h d'he enebour, ha Doue a roas d'he soudard calonec ar victor hag an tanva eus dousder an envou.

Dom Mikel o veza anavezet e oa tost he dermen diveza, a c'houlennas he sacra-

manchou. Araoc receo ar gommunion a fellas dezhan beza laket var al leur-zi; pedi a reas ar belec da lezel eun nebeudic ar Sacramant var an daol, ha dirac he Vestr hag he Zoue, Dom Mikel a lavaras :

« Douget oun gant gras Doue da rei da anaout eur merk eus carantez ar Verc'hez evidon. »

Discleriet hon euz er penn kenta eus ar vuez-man (1), ar pezh a reas ar Verc'hez e kenver Mikel Nobletz, pa studie e scolach Ajén. O veza discleriet kement-se, dirac ar Sacramant, Dom Mikel a recevas ar gommunion gant eur garantez dener meurbet.

---

(1) Pajen 39.

## C'HUEC'HVET PENNAD

Teir angoni Dom Mikel

Goude-se, e c'halvas unan eus ar merched devot, boazet da sicour an dud var ho zremenvan : « C'hoaz eun nebeudic, emezhan, ha va chadennou a vezo torret; va Mestr mad a zigemero va ene, daoust d'am fec'hejou. Tri angoni bras a chom ganin da c'houzanv; digassit coun din neuze eus ar pezh a lavaren d'ar re-all en ho fassion. An tri devez diveza eus va buez ne velin den ebed, nemet an Tad Maner va map ker. Mervel a rin entre daouarn an Tad-se, pa vezo an oll dud eus ar barrez-man o pedi evidon. »

Comzou Dom Mikel a verke scler ar pezh a so bet arruet.

Epad eur miz, couls lavaret, e padas he angoni ; coulscoude, terri a ree varnhan eur mare bennac ; entre teir guech eta em gavas en he bassion.

He angoni kenta a badas pemp devez goude-se, oe essoc'h epad pevar devez.

Coueza a reas adarre en he angoni, epad pemp devez-all. Epad ma oa en he eil angoni, he vemprou a oa ien scorn. Credi a reas an oll e oa maro, hag a scuillent daerou puill. Pebez eston evitho, eun han-

ter-heur goude, o velet ar c'hlanvour keza o commans da huanadi, da gomz, da zibri zoken, ha da gousket. Darn a grede e oa bet maro e guirionez, ha deut en dro er vuez dre c'hras Doue. Goulennet oe digant

Dom Mikel petra grede vargement-se ; na fellas ket dezhan respont, ar pezh a reas d'an dud credi startoc'h c'hoaz, e oa bet

gret ar burzud evithan. An Tad Maner hag an Tad Bernard o veza clevet e oa goall glanv Dom Mikel, a lezas an Aotrou Galern e penn eur Mission commanset e Kerne, hag a deuas da Gonk-Lochrist. Pa oant digouezet, e oa Dom Mikel o tont eus he eil angoni. Joa vras oe ganthan guelet ar visionerien.

An Tad Bernard a lavaras dezhan : « Calz a dud a ra ali din da zilezel ar Missionou, abalamour d'am skuisder ha d'am oad. Ouspen-se poan am euz o vale gant unan eus va divesker. »

— « Va Zad, a respontas Dom Mikel, baleit keid ha ma c'hello ho troad dougen chanoc'h, ha pa n'hello mui ho tougen, dougit anezhan, ha dalc'hit da vont d'ar Missionou beteg ar maro. »

An Tad Bernard a heulias an ali mad-se.

Dom Mikel a lavaras d'an Tad Maner : « Va Zad, entre ho taouarn e fell din mer-

vel, mes neket deut ar mare c'hoaz ; it eta  
da gaout ho missionerien ; pa vezo deut  
an amzer me a gasso kelou deoc'h. »

An Tadou a sentas ouz an den santel.

Dom Mikel a vanas adarre nebeudic  
deziou guellicoc'h. Rei a reas urz divar-  
benn he ziveza angoni, he varo hag he  
interramant :

« Lezit va c'horf var ar vascaon ebars  
iliz Sant-Christoph, essoc'h e vezo d'an  
dud paour dont da bedi evidon el lec'h-se.  
Pedi a ran va mignonet da vont da glevet  
an offeren da chapel santes Barba, evit  
repoz va ene, gant aoun e ve red din chom  
e tan ar Purgator, daoust d'ar vall bras  
am euz da vont da velet va Salver. Pedi a  
ran va c'herent ha va mignonet da interri  
va c'horf e chapel Sant-Tujan, ebars iliz  
Lochrist, elec'h ma ve interret an dud  
paoura. Arabad eo dougen dillad caoun  
goude va maro ; guiskit kentoc'h ho tillad

caera, ha roet trugarez da Zoue da veza  
bet ar vadelez d'am beza galvet d'am guir  
vro. »

Dom Mikel a ieas en he ziveza angoni ;  
hag an dro-man, he oll vemprou e oa inta-  
net ; he groc'hen, egiz devet, a stage ouz  
an dillad guele : pebez merzerinti !

Coulscoude a c'houlenne muioc'h a boan  
c'hoaz, dre garantez evit Jesus staget ouz  
ar groaz. An eil devez eus ar stourm di-  
veza-se, e cassas kelou d'an Tad Maner,  
hag er pedas da zont d'he velet. An Tad a  
deuas buan, hag a zigouezas abred avoalc'h  
evit clewet comzou diveza Dom Mikel, ha  
erra he zaoulagad, hervez he c'houlenn.

Dont a reas eleiz a dud da velet Dom  
Mikel, an drede deiz eus an angoni diveza ;  
pedi a reent e oa o vont da dremen, mes  
hom a reas epad div heur, hep finval, he  
zaoulagad digor, ha troet da sellet varzu  
an memez lec'h. He visach oa ruz evel eur

c'hlaouen flammet; e creiz eur joa divin  
a venne beza. An ôll dud, deut d'he vele  
er stad-se, a sante ho c'halon distaget eus  
traou an douar, ha savet varzu Doue,  
Goude div heur, Dom Mikel a deuas adarre  
ennhan he-unan, en he stad kenta, leun a  
boaniou. Unan bennac eus ar merc'hed  
devot Conk, a c'houlennas diganthan, en  
han Doue, petra en devoa gullet epad an  
div heur-se?

« Va Rouanez ker meurbet, emezhan, e  
deuz bet ar vadelez da zont d'am c'hon  
soli, egiz e oe deut guehall e Ajen. »

Goude ar respont-se, Dom Mikel a serras  
he zaoulagad, hag a vanas unanet dre an  
beden gant he Vestr divin.

## SEIZVED PENNAD

Maro santel Dom Mikel

Coulscoude, pa deuas an Tad Maner en  
he gichen, a sellas outhan gant eur joa  
ludius. An Tad a chomas pell e kichen he  
vestr mad, da gomz ganthan divarbenn  
ar Baradoz. An Tad Maner a reas  
da Zom Mikel an absolver, hag epad an  
baradoz, e oant ho daou o comz gant Doue, pe  
divarben traou an Envou. An deiz varlerc'h  
ho gouel relegou sant Caourintin, abostol  
Breiz-Izel, ha patron Escopti Kerne. Dom  
Mikel her pedas da rei sicour dezhan en he  
tourm diveza enep an drouc-speret; hag  
diveza gret actou a Feiz, a Esperans, a

Garantez, ar missioner bras a echuas he  
vuez santel, d'ar 25 a viz mae 1652, d'an  
oad a bemzec vloaz ha tri-ugent, epad ma  
pede oll dud ar barrez evithan, en offeren  
bred.

## EIZVET PENNAD

**Burzudou goude maro Dom Mikel**

Jannet Perret, Jannet ar Gall hag an  
dud-all a sicouras sebelia corf Dom Mikel,  
a gavas ganthan eur c'houez dous ha  
c'houec, couls ha gant an dillad hag ar  
plous eus he vele. Hervez an urz merket  
ganthan araoc he angoni, e oe lezet he  
gorf var ar vascaon ebarz iliz Sant-Chris-  
toph. Calz a dud a velas he vuzellou o  
finval hag he visach o tont da veza skedus  
meurbet epad ma lavarent litanioù an  
Itron-Varia. Epad daou zevez e chomas  
ar c'horf er chapel-se, var ar c'hleder.  
Eun niver bras a dud a deuas d'he velet,

da boket d'he dreid ha d'he zaouarn ; da ober touch outhan ho chapeledou, ho levriou ha traou-all.

Meur a hini o devoe gullet sclerijen gaer ebarz iliz Sant-Christoph, hep gouzout a belec'h e teue, rac ne velent goulaoen ebed var elum. Clemans Teston hag he bugale o deuz discleriet dirac ar belec carget gant Escop Leon da ober enclask, o devoa gullet sclerijen o tont eus ar chapel, epad ma oa corf Dom Mikel ennhig, hag ouspen-se, o devoa clevet eur c'han dudius, azalec ar chapel bete var ar porz mor. Gullet o devoa ive uz d'ar mor, eun dez (un dais) guenn ha skedus, hag en dro dezhan, evel leternou a daole sclerijen vras. Martolodet, o tont diouz Eussa, hag a boanie da vont da Gonk araoc eul lestr bras a glaske laerez anezho, a velas ar memez burzudou, hag a gavas, dre ar sclerijen estonus-se, an hent da vont er porz Conk.

Eur marc'hadour bennac eus ar memez enezen Eussa, e creiz eur barr goall amzer, oa o vont da goll, paneved eur sclerijen henvel ouz sclerijen an heol da greiz deiz, a deue e mæz diouz chapel Sant-Christoph. Galloud a reas, dre ar sclerijen-se, labourat gant he dud da aoza he lestr, ha dont hep drouc ebed bete Conk. Mont a rejont var eün da drugarecat Dom Mikel, rac credi a reent, hep mar ebed, e oant dleourien dezhan, da veza c'hoaz e buez.

Eun demezellie eus ar Frederic, e kichen Sant-Vaze, a goueze abaoe daou viz e drouc-sant, hag a grene gant eun derzien vras. Casset oe ar plac'hic kez, dre ali an Itron Keranrouz, merc'h d'an Aotrou du Predic, da iliz Sant-Christoph, hag a douchas he daouarn ouz corf ar belec santel. Ne santas mui nag an drouc-sant, nag an derzien. An Itron Kerourien, Marc'harit

Tanguy, Francez Kermenno, ha calz a reall, a so bet testou eus ar burzud-man.

Dom Mikel en devoa kemeret poan da gelen eur plac'hic daouzec vloaz, a oa mud ha seziet he oll memproù. Eun devez, ar plac'hic a glasse pedi a c'henou, hep gallout hen ober. Dom Mikel a bedas evithi, hag an Aotrou Doue a roas d'ar plac'hic ar parlant. Mes he memproù a chomas seziet, ha nebeud goude, e collas ar gueled, hag a ieas ker fall, ma coueze simpl ken aliez ha bemdez.

An noz varlerc'h maro Dom Mikel, ar plac'hic-se a santas an dentation d'en em glemm ouz Doue, ha da vlasphemi. Clevet a reas neuze, en he speret, Dom Mikel o comz outhi, hag o lavaret dezhi penaoz trec'hi an dentation. Discleria a reas kement-se d'he mam ha d'he zad covessour.

Neuze oe douget ar plac'hic paour da iliz Sant-Christoph, hag he mam a lavaras

dezhi : « Emaoc'h tost da dreid ho Mestr mad. » Ar baourkezic a bocas da dreid he zad spirituel gant eur fizians leun, hag he daoulagad a zigoras ractal. An deiz varlerc'h, e commansas da gerzet, hag e berr amzer, a oe pare mad he oll membrou.

## NAOVET PENNAD

### Interramant Dom Mikel

An trede deiz goude maro Dom Mikel, oe interret he gorf santel. Eun niver bras a dud oa en em zastumete Conk : tud paour, tud jentil, beleien, relijiuzet. An oll a roe mercou a c'hlachar hag a zevotion. An Tad Maner oe pedet da ober ar brezegenn gaon. Ne oa ket diez lacât an dud da gredi da santelez ha da vuzudou Dom Mikel Nobletz, rac calz eus ar re oa eno, oa bet testou eus ar pezh a lavare ar prezeger. An oll dud a vouele : darn gant glac'har da veza collet ho zad ker ; darn-all gant ar joa o devoa, o sonjal oa Dom Mikel e gloar

ar Baradoz, hag e vize evitho eun advocat leun a garantez.

Corf Dom Mikel ne oe ket interret hervez he beden, e mesk ar re baour ; an Aotrou Halgouet a c'houlennas an enor da lacat corf ar missioner e bez he familh.

Araoc ma oe diskennet ar c'horf er bez, an Itron Kervasdoue, elanv abaoe meur a viz gant an derzien kart, a ziskennas e toull ar bez ; hag o poket d'an arched, a c'houlennas gant feiz beza pareet dre viri-tou an den santel. Ractal e santas eun dra bennac o finval en he oll membrou, ha ne grenas mui an derzien.

An den carget da c'holoi ar c'horf, a cho-mas e kichen ar bez beteg an noz ; ne oa ket evit kuitât, emezhan, rac eur c'houez dous ha c'houec a sante eno : biscoaz n'en doa santet netra henvel ouz an dra-se. Calz a dud-all, deut da visita bez Dom Mikel, o leuz tanveet ar memez dousder burzudus.

Buez an Aotrou Mikel Nobletz

---

LEVR C'HUEC'HVET

---

Profetiou ha Miraclou  
Dom Mikel

## KENTA PENNAD

---

**Prophetiou grêt gant Dom Mikel**

---

An Aotrou Doue, evit lacat anaout hag enori he servicherien muia leal, a so boavezet da rei dezho he sclerijen hag he c'halloud divin. Dre sclerijen Doue, ar sent a c'hell discleria ar pezh a so anavezet gant Doue hepken, evel ar pezh a vezo grêt en amzer da zont dre volontez frank an dud, pe gant Doue he-unan ; dre c'halloud ho C'hrouer, ar Sent a ra burzudou dreist ho nerz, hag aliez dreist nerz an oll grouadurien, evel rei ar guelec d'an dud dall, ar vuez d'ar re varo.

Plijet eo d'an Aotrou Doue rei d'an

Aotrou Nobletz ar mercou-se eus he vadez : he sclerijen, evit anaout an amzer dez zont, hag he c'halloud, evit ober eun niver bras a viraclou.

Tost da nao viz araoc ma oe gane Lois XIV, roue Frans, Dom Mikel a lavaras : « Ar Rouanez a zoug eur bugel hag a reno rouantelez Frans gant gloar ha furnez. »

Eun devez ma oa Dom Mikel o caozeal gant he vignonet, e chomas sioul nebeud amzer, e giz pa vize souezet..., hag e lavaras goude-se : « Doue ra vezo meulet, beza hon euz eur Pap nevez, Innocent eo he hano. » Er momet-se, oe laket var gadol Sant Per, e Rom, eur Pap nevez, Innocent X.

Discleria a reas ive, eur bloaz araoc ma commansas ar brezel e Bro-Saoz : « O tud maleurus, emezhan, laza e raint ho Roue. » Sevenet oe he gomzou er bloaz varlerc'h.

Pa oa an Tad Julian Hayneuf e penn scolach Kemper, en devoe an enor da velet meur a vech Dom Mikel Nobletz. An Tad-se ne oa ket neuze e sonch da ober levriou. Coulscoude ar missioner a lavaras dezhan eun dro-bennac : « Va zad, c'hui a scrivo levriou, hag a rai calz a vad en Iliz. »

An Tad Hayneuf hag an Aotrou Tremaria, o deuz roet testeni eus ar brophetiman.

Eur belec bennac, person e Leon, o veza deut da velet Dom Mikel epad ma oa clanv bras, a lavaras dezhan e vije mad receo an Nouen.

Dom Mikel a respontas : « Va mignon, trugarez a laran deoc'h ; hogen c'hui eo a dle beza prest, rac c'hui a varvo kentoc'h evidon-me. »

An Aotrou-se a varvas en eun taol, nebeud deiziou goude-se.

An Itron Carne (de Carné), nizez da Zom

Mikel, a ieas da velet he eontr santel araoc he varo. An Itron-se na c'houie ket c'hoaz ha ne grede ket e oa brazez. Hogen Dom Mikel a lavaras dezhi : « Dougen a rit eur bugel, mes ne dleit ket lacat oc'h esperans var gement-se, evit caout lignez, rac ho pugel a zeui er bed araoc he amzer, ha ne vevo ket pell. »

An oll brophetiou-se, ha calz a re-all gret gant Dom Mikel, a so bet oll sevennet en ho amzer, merk scler e oant gret din-dan sclerijen an Env.

## EIL PENNAD

**Miraclou gret gant Dom Mikel epad  
he vuez**

Comzet hon euz e buez Dom Mikel eus a galz a draou burzudus gret ganthan en oll broiou en deuz treuzet o prezec lezen Jesus-Christ. Setu aman c'hoas darn-all gret ganthan epad he vuez.

N'euz ket brassoc'h miracl eget rei ar vuez d'anden maro, hogen an Aotrou Doue en deuz gret ar burzud-se meur a vech dre bedennou Dom Mikel.

Eur vrek a Zouarnenez oa bet goall fall epad ma oa brazez ; Dom Mikel a bedas evithi hag ar vrek a bareas, hag a lacas

he bugel er bed. Mes ne oa ket c'hoas eur  
bloaz fournis, pa zeuas da vervel. Chom a  
reas peder heur varnugent var ar vascad  
hag o vont d'hen lacat en arched e voent

pa erruas Dom Mikel. Consoli a reas ar  
vam gez, hag a lavaras : « Likit ho fizians  
e Doue, goest avoalc'h eo, mar plich gant  
han, da rei adarre ar vuez d'ho Map. »

O clevet ar c'homzou-se, ar vam baoude  
devoe fizians vras, rac anaout mad a re  
galloud ar missioner santel.

Dom Mikel a ieas var bennou he zaoulin  
ober a reas eur beden verr, mes calonec

Neuze a reas sin ar groaz var genou ar  
bugel maro. Ractal e savas hag a ieas kuit  
Kerkent oe guele ar bugel leun a vuez hag  
a iechet. Ar c'hrouadur-se a vevas pemzek  
vloaz e Douarnenez, anavezet gant an oll  
ha leshanvet : « Iannic a so bet maro. »

Marc'harit Laboux, intanvez Iouen Moal  
ha calz a re-all, o deuz roet testeni divar

benn ar miracl-se, dirac barner an Iliz.  
Intanvez Ian Guillacer e doa lianet ar  
bugel hag a douas var he guele, pa oa  
dare da vervel, e oa guir ar pezh a vercomp  
aman.

Eur vam bennac eus Douarnenez, a lezas  
eur plac'hic vian, goallglanv, entre daouarn  
he magerez. Ar vam a renke mont da Vrest,  
evit he afferou. Dizale oe casset kelou dezhi  
e oa maro he bugel. Ar vam a zistroas,  
buhana ma c'hellas, rac gortozet e oa evit  
an interramant. E oant o vont da gass corf  
ar bugel d'ar bez pa deuas Dom Mikel en

« En em gonsolit, emezhan d'ar vam, ha  
gortozit ken am bezo gret va feden. » Mont  
a reas da bedi, ha goude a ieas e kichen  
ar bugel, hag a reas sin ar groaz varnhan.  
Ractal ar plac'hic varo a savas he fenn,  
hag a roas mercou anat e oa leun a vuez  
hag a iec'hed. Ar plac'hic-se e deuz bevet

pell; dimezet eo bet d'an Aotrou Kerbas-ken.

Mari Perennou, an Itron Tremenec ha Marc'harit Gouzac'h, a so bet testou eus ar burzud.

Dom Mikel, hervez an desteni roet dirac barner an Iliz, a ressuscitas c'hoaz : 1<sup>o</sup> Eur bugelic da Vernard Poullaouec, eus Douarnenez, oa bet mouget en he gavel gant eur c'haz gourvezet var he visach; 2<sup>o</sup> Guillou Nicolas, oajet a seiz vloaz; 3<sup>o</sup> Eur vreg mouget o tibri eun tam bara tomm.

Calz a dud clanv, dilezet gant ar vedicine, net, a gred eo bet hirreet ho buez dre ben-dennoù Dom Mikel.

Eun intanvez vad, Cathel Danielou, gant e Douarnenez hag o chom e Kemper, oa pareet er bloaz 1649, tri bloaz araoc maro Dom Mikel, en eun doare souezus.

Cathel oa clanv fall, gant an derzien

domm; ar medicin a lavaras e oa mad hasta da rei dezhi he sacramanchou diveza; n'en doa mui a esperans evit he buez. Clasket oe eur belec, hep cavet nicun da zont da govez ar baourkez intanvez. Boazet oa da govez gant an Tad Bernard pe an Tad Maner; mes ne oant ket er gær en deizioù-se.

Coulscoude, pa oa tregas divar benn caout eur c'hovessour, setu eur belec coz o tont er gambr, he sourpilis ganthan, hag a lavaras d'an hini glanv :

— Me so mignon d'an Tadou missionerien, a labour breman er Mission; deut oun d'ho covez en ho lerc'h.

— Piou ez oc'h, me ho ped, a respontas Cathel ?

— Mikel Nobletz eo va hano, emezhan. Cathel ne doa ket gullet Dom Mikel, mes anaout a ree he vuez santel, leun a vurzudou.

— Penaoz, emezhi, oc'h euz gelled dont man diouz Konk-Leon, el lec'h am euz clevet ez oac'h clanv ?

— An Aotrou Doue en deuz bet ar vadelez d'am digas aman.

Goude e lavaras : — Ne varfot ket gant ar c'hlenvet-man, ha dont a rai an Tadou missionerien d'ho kuelet goude ho Mission.

Cathel a reas he c'hovession d'ar belec santel, ha gant an absolven, a recevas en eun taol iec'hed ar c'horf hag an ene.

An Tad Maner, an Tad Bernard ha calz a re-all, o deuz roet testeni var gement-man.

An Itron Keriven, an Itron Kerourien, hag he mam, a so bet ive pareet en eun taol, dre bedennou Dom Mikel.

Eur vreg a Zouarnenez e doa drouc en he glin. Ar vedicinet na gredent ober netra dezhi, gant aoun da voassat an drouc, ha da rei ar maro. Clasket oe eur chirurgian

eus Bourdel. Heman, o veza guelet e pe stad e oa ar c'hlin-se, a lavaras : « Red eo faouta doun ar c'hlin, pe troc'hi hueloc'h evit an drouc. »

O clevet kement-se, ar vreg gez a reas clask eur medicin-all : Dom Mikel.

Heman a lavaras : « Gortozit bete var-c'hoaz. » Ober a reas sin ar groaz var ar c'hlin glanv. Ar vreg a gouscas ractal ; pell a oa ne doa ket gallet cousket. Anternoz vintin, pa zihunas, ne sante drouc ebed ; sellet a reas ouz he glin ; pareet e oa ker mad, ma ne veler merk ebed eus ar c'hoenv.

Jaketta Hascoet oa hano ar vreg-se.

An intanvez Clemans Restou, eus Konk-Lochrist, a recevas eur c'hras henvel ouz hounez : ar chirurgian e oa o vont da droc'hi he brec'h, debret gant ar c'hrignbeo. Dom Mikel a grachas e mesk eun tamic poultren, hag a lacas an tam poultren

tren trempet-se var ar vrec'h, hag a reas sin ar groaz. Clemans a gouscas an noz varlerc'h, hag en em gavas pare mad. Coulscoude eun drouc-bennac a vane c'hoaz. Dom Mikel a lacas ied troc'het en eur park var ar vrec'h glan, en eur lavaret : « Pare e vezoc'h ; evelato, eun tamic poan a chomo en ho prec'h, evit caout coun eus madelez an Aotrou Doue. »

An Itron Kerescar (Franceza Goulair), eus Crozon, a ias da Zouarnenez er bloaz 1633, da glevet kenteliou santel ar missioner bras. Pa oa o vont en dro d'ar gêr, e couezas, oc'h ober eur gammed a dreuz, hag a dorras he gar. Chom a reas pell entre daouarn ar vedicinet, mes he gar ne oa ket bet aozet mad, hag a rencas mont da Grozon, gant calz a boan. Dom Mikel o veza digouezet e Conk, a glevas e pe stad e oa an Itron Kerescar. Mont a reas d'he

gulet, da Grozon, hag en eur ober sin ar groaz, a bareas ar c'har glanv.

Eul leanez eus Calvar Montroulez (la mère Catherine de Sainte-Gertrude), Cathel Santez-Gertrud, a anavezaz e doa bet cals a c'harrassou dre veridou Dom Mikel. Setu aman unan anezho :

Eun devez bennac, a lezas da goueza var he zreid eur podad souben vero. He zreid oa lesket. Epad ma haste al leanezet-all da ober eun oagnamant bennac da zistan he foan e teuas da sonch dezhi e doa bet eul lizer skrivet gant Dom Mikel. Lacat a ra ar paper-se egiz relegou var an drouc, ractal he zreid en em gavas pareet.

## TREDE PENNAD

---

**Miraclou gret e Tremenac'h goude maro  
Dom Mikel**

---

E calz a lec'hiou eo bet anavezet galloud burzudus Dom Mikel, goude he varo ker-coulz hag en he vuez. Setu aman darn anezho, gret e Tremenac'h, e Conk-Leon, e Sant-Mikel-Douarnenez :

Er bloavez 1664, eur bugel c'huec'h miz varnugent, Nicolas Mintern, eus Guissezni, a gouezas en eur lenn, tost da doull eur vilin. Mont a reas gant an dour rêd var rod ar vilin, hag e couezas en eun toull dour izeloc'h. He dad a glascas ar bugel kez epad eun heur, hag her c'havas dindan

rod ar vilin, var he gein, he zivrec'h digor, he gorf leun a zour.

An Tad paour, mantret he galon, a savas ar bugel entre he zivrec'h. Sonjal a reas en em erbedi ouz Dom Mikel, hag ober le da rei eun dra bennac evit chapel Tremennac'h. Ar vam a voestlas ive lacat eun offeren ha cass he bugel da chapel Tremenac'h. Ractal ar bugel a gommansas finval he zaoulagad hag he vuzellou ; dislonca a reas an dour e oa ennhan, hag e oe dioc'h-tu ken iac'h ha biscoaz.

Ian Mintern, tad ar bugel, Guilmett Carhais, he vam, Mari Donval ha Mari Kerron, o deuz roet testeni eus ar burzud-se.

Eur bugel daou vloaz hanter, Yvon, mab da C'houlven Facheux, eus parrez Ploneour-Treaz, a chomas dall varlerc'h ar vrec'h e oa bet ganthan. He dad hen cassas da chapel Tremenac'h, hag a bedas

Dom Mikel ovit-han, hag er memez momet ar bugel dall a velas mad.

Yvon, map da Fanch Patinec, eus parrez Goulven, oajet a drizec vloaz, oa bet mud a viscoaz. He dad hac he vam a ias da chapel Tremenac'h da bidi Dom Mikel evit ho map. Pa oant distroet d'ar gêr, Yvonic a gomze egiz pa ne vije bet morse mud.

Eun den iaouank, Renan Trevien, eus Guiniventer, oajet a zaou vloaz varnugent, oa troet he vrec'h gleiz, ha serret he zorn ouspenn pevar bloaz a oa. Ober a reas pedennou epad nao devez e chapel Tremenac'h, hag o veza touchet gant he zorn hag he vrec'h gleiz, imach ar belec santel, en em gavas diboaniet ha paro en eun taol, dirac daoulagad eun niver bras a dud. Calz a re-all, mac'hagnet, cam, seiziet, a so bet pareet er memez chapel, evel Yvon ar Gall, eus Lesneven; Cathel Castel, eus Kerlouan; Yvon Queffurus, eus Tremenac'h;

Anna Madec, eus Plouarzel; Yvon Bihan, eus Guisseni; an demezel Guilmett ar Garrec, eus Lesneven; Yvon ar C'ham, eus Plouneventer.

---

## PEVARE PENNAD

---

### Miraclou gret e Konk-Leon

---

Bez Dom Mikel a so enorus dre gals a vurzudou. Scrivet hon euz darn eus ar re en deuz gret araoc he varo, hag entre he varo hag he interramant. Goude he varo, eleiz a dud o deuz bet grassou burzudus o pedi var bez ar missioner.

An Aotrou Carne (comt) oa dimezet da eun nizez da Vikel Nobletz. Er bloaz 1658, an Aotrou Carne a chomas epad daou viz planv bras gant an derzien domm. Ar gon-

tez, he bried, a voestlas mont ganthan da bedi var bez ho eontr santel.

Er memez mare, an derzien a ieas kuit evit mad.

Tri eus bugale an Aotrou-Carne a so bet ive pareet dre c'halloud Dom Mikel, goude ma vijent dilezet gant ar vedicinet.

An Tad Marcel Santez-Genoveva, superiol eus couent relijiuset Carmez, e Brest, a scrivas eul lizer hirr ha caer evit discleria e oa bet pareet eus eur goall glenvet goude beza gret le da vont da bedi var bez Dom Mikel.

An Tad Daniel, eus ar memez couent, hag he vreur, an Aotrou Lestobec, eus parrez Lochrist, a so bet pareet dre ar bro-messa da vont da bedi var bez Dom Mikel.

N'hellan ket discleria pegement a reall o deuz cavet ar iec'hed evit ho c'hortha santelez evit ho ene, var bez ar missioner, ebarz iliz Lochrist.

## PEMPET PENNAD

—

**Miraclou gret e Sant-Mikel Douarnenez**

—

Goude maro Dom Mikel, calz a dud a glevas sôn eur c'hloc'h en tiic elec'h ma oa bet ar missioner o chom e Douarnenez. Ha coulscoude ne oa cloc'h ebed eno. Mont a reas tud da velet eus a belec'h e teue an trouz; ne velent den ebed, na netra, ha coulscoude ar c'hloc'h a gen-dalc'he da sôn. An Aotrou du Louet, Escop Kemper, oe kelennet divarbenn ar burzudse, hag a reas ober enclask.

Calz a destou a oe galvet, hag a ziscle-rias ar pezh o devoa elevet meur a vech.

An Aotrou'n Escop a sonjas mont he-

unan da glask sicour digant ar missioner en doa kement caret epad he vuez. Eiz miz a oa ne c'helle mui plega he zaoulin na chom var he dreid. Douget oe da di Mikel Nobletz. Gant pebez fizians ha pebez devotion a bedas an Escop santel e camp ar missioner ! Goulen a reas beza pareet evit galloud lavaret an offeren, hag ober an deveriou eus he gark. An dregont a vis guengolo, er bloaz 1663, Doue a selaouas ar beden-se, an Aotrou'n Escop a savas ractal, hag a gerzas hep poan ebéd. Antro-  
noz, e chomas var bennou he zaoulin epad an offeren, lavaret dirazhan ; ha goude-se, en deuz gallet lavaret he-unan an offeren, rei ar gonfirmation hag an urzou sacr, hag ober oll deveriou an Escop.

Evit diskouez he anaoudegez vad, an Escop devot a reas sevel el lec'h-se, eur chapel gaer en enor d'an Aotrou sant Mikel arc'hel, patron an Aotrou Nobletz.

An Tad Maner a reas eur c'hantic evit an dud a ree pelerinach da iliz Sant-Mikel e Douarnenez. Setu aman ar c'hantic-se :

# CANTIC

## EVIT PELERINET SANT MIKEL

### E DOUARNENEZ

—  
Ton *Kelven*.

Mikel Nobletz, guir vignon da Rouanez ar bed,  
C'hui so bet en ho puez eun tenzor bras cuzet ;  
Hogen gant ar Vretonet e viot disoloet,  
Goude an oll boaniou bras oc'h euz bet gouzanvet.

Ebars en ho ti santel ar groaz oc'h euz douget,  
O clask distrei oc'h Doue ar bec'herien dallet ;  
Kuiteet oc'h euz ho preundeur, kerent ha mignonet,  
Evit ma haljac'h libroc'h catechiza ar bed.

Hon tad leun a drugarez petra lavarec'h-hu,  
Pa edoc'h er Baradoz leun a c'hloar a bap-tu ?  
— Pidi a ren evidoc'h, ma vizec'h pardonnet,  
Evit ma teujac'h em zi, elec'h m'am euz chomet.

E keric Douarnenez ez oa va demeureans,  
Na blije ket din neuze mont da heul an noblans;  
Gant tud paour ha tud dister e oan neuze hentet,  
Dezho e roen va bennoz, ha d'an oll dud poaniet.

Selaouit, Douarneneziz, mar am euz ho kuiteet,  
Ne d'oc'h ket dirac Doue, ganin anconnac'heet;  
Gant eun devotion bras donet a reot em zi,  
Da ginnik ho calonou da Jesus ha Mari.

An Aotrou'n Escop (1) en deuz, gant he c'hras kemenet,  
Ma vize e Douarnenez, el lec'h am euz chomet,  
Er porz, ha demdost d'ar mor, savet prim eur chapel  
Da c'hloar Doue, hag enor an Aotrou sant Mikel.

An xelez er Baradoz o deuz nao guech sônet  
Eur c'hloc'h a ne vele den, el lec'h am euz chomet;  
Kemerit courach eta, hastit oll christenien,  
Nao sôn a so bet, pred eo monet d'an offeren.

Galz a belerinerien a deui a bell bro,  
Da visita ar chapel en ho touez pa vezo;  
An treuzou, pa ve hoarn, a vezo sur uzet,  
Gant ar belerinerien a vezo digasset.

E chapelic Sant-Mikel grassou vezo roet,  
Mar car va Mestrez ken dous pidi Salver ar bed :

---

(1) An Aotrou du Louet, escop Kemper.

Ar re vud a brezego, ar re zall a velo,  
Ar re vouzard a glevo, ar re gam a gerzo.

O vont eun deiz eus ar C'hap varzu ar gêr Kemper,  
Ne ouien pelec'h monet da brezec va Salver;  
En donar e plantis va baz, ha me var va daoulin,  
O pedi ar Verc'hez glan da rei sclerijen din.

Va c'halon a droas d'an nord gant eun esperans bras,  
Ha me da sevel neuze, oc'h ober sin ar groaz;  
Guelet a ris eun Itron, ha me ho trei diouith,  
E claskis tremen er park, 'vit mont abiou dezhi.

Neb aoun, emezhi, Mikel, me so Mam da Zoue,  
Setu ahont eun tour huel, e parrez Ploare,  
It gant bennoz va Mab ker, it hardiz en han Doue,  
It da besketa an dud var dro ar c'harter-ze.

Ha me mont e Douarnenez en esper da asten,  
Va rouejou e creiz an dud leun a devalijen;  
Pebez poan am boa neuze, ô Douarneneziz,  
Galz a dud a lare din mont buan var va c'hiz.

Monet a ren da brezec, bep mintin ha bep noz;  
Nebeud a dud paour ha simpl a bede din bennoz;  
An nemorant a gêris a re fae d'am c'hlevet,  
Dre ma lavaren d'an oll ar virionez bepred.

Goapeet oan egiz eur foll gant an dud ar c'harter,  
P'am guelent, e lavarent : Setu eun affronter,  
An Antechrist, eur bigot, divroet ha truffer;  
Red eo hen strinca er mor evit netaat ar gær.

Ne falle ket din lezel, evit ar c'homzou-se,  
Ar pezh am boa commanset, fizioù 'moa e Doue;  
Scrivet oa doun em c'halon comzou mad va Mestrez,  
Gant nerz calon e talc'hen bepred d'am peskerezh.

Jesus a roas erfin he vennoz d'am rouejeù,  
Ar re vian, ar re vras a gredas d'am c'homzou;  
Diski a rejont gant feiz an deveriou christen,  
Hag e feujont da veva hervez ho sclerijen.

Esper am boa bet ato achui va buez  
E douar sant Caourintin, hag e Douarnenez,  
Hag en iliz Ploare am boa choazet va bez,  
Evit chom beteg ar varn gant va bugale gæz.

Hogen Douarneneziz, red oe din ho kuitaat;  
Va bugale a rencas dioueret ho zad mad,  
Casset oan divar ho tro dre avi an ærevent,  
O vèza prezeget deoc'h pemp bloavez varnugent.

Trizec bloavez e chommis c'hoaz e Conk-Leon;  
Coun am boa bepret ouzoc'h e creiz va oregon,

Kinnig a ren da Zone, bemdeiz ar Gerneviz,  
Ha dreist-oll va bugale, oll Douarneneziz.

Aba oun er Baradoz coun am euz ac'hanoc'h,  
Pidi a ran va Jesus, da rei he c'hras deoc'h;  
Va digemeret oc'h euz, o sevel eur chapel  
Da gabiten an Elez, va fatron sant Mikel.

Scrivet en ho calonou ar pezh am euz desket,  
Pa edon en ho touez, gant calz patientet :  
Disprizit ato ar bed, ha sonjit e tremen  
He oll vadou ha gloar, egiz eun avel ien.

Carit an eil egile mar d'oc'h va bugale,  
Mirit ar peoc'h entrezoc'h, ho pet doujans Doue;  
Mirit an humilite, ar guir simplicité,  
Ha sicourit ar beorien, egiz membrou Doue.

---

Ar miraclou gret e chapel Sant-Mikel,  
pe e kenver ar re a voestle eun dra bennac  
d'ar chapel-se, evit beza sicouret gant Dom  
Mikel Nobletz, a so hep niver. N'hellomp  
ket zoken scriva aman an oll burzudou a  
so bet discleriet dirac barnerien an Iliz,

dre urz an Aotrou du Louet, Escop Kerne, hag an Aotrou Coetlogon, Eskop var he lerc'h. Lacat a ran hepken, an daolen eus ar burzudou brassa, skrivet e buez Dom Mikel gant an Tad Verjus.

*Bugale resuscitet.*

Eur plac'hic pemp bloaz, Helena Melou, merc'h da Venn Stipon, eus Douarnenez. 1663.

Anna Bourlez, oajet a c'huec'h vloaz, ha merc'h da Wuillou ha da Berrinn Fouket, eus sant Rivoal, e Braspartz. 1665.

Jannet Runavant, oajet a naontec miz, merc'h da C'huivarc'h Runavant ha da Levenez Thomas, eus Ploare. 1661.

Cathel Guivarc'h, oajet a dri bloaz, ha merc'h da Francez Guivarc'h ha da Var-c'harit Boon, eus parrez Scaer, escopti Kerne.

Anna Moin, oajet a dri bloaz, merc'h da Ian Moin, eus parrez Commana.

Claoda Ferec, oajet a dri bloas, eus parrez Crozon.

Eur bugel da Adelig Normand, eus Cle-den Cap-Sizun, maro pa deuas er bed, a resuscitas dre c'halloud Dom Mikel, pedet gant ar vam gristen. Mes o veza bet badezet, ar bugel a varvas adarre.

Eur verc'hic daou viz, ne oa ket badezet c'hoaz dre faot he c'herent, an Aotrou hag an Itron Peiguern, eus an enezen, hag ar bugel a varvas epad eun noz. Casset oe he c'horf da chapel Sant-Mikel, ha Dom Mikel, pedet gant kerent an hini varo, a roas dezhi ar vuez hag ar iec'hed. 1665.

*Tud clanv bras, pareet en eun taol goude  
beza pedet Dom Mikel, ha goestlet mont  
da chapel Sant-Mikel.*

Al leanez Corantina Mam Doue, eus  
hospital Kemper.

Andre-Joseph Lesormel, map d'an Ao-  
trou Lesormel ha da Varc'harit Trogoff,  
eus Plistin, escopti Landreger.

Mari Jouhan, enebarzerez Kergourant,  
e Kemper, oajet a dregont vloaz.

Stephan Gouzien, eus Poullan, escopti  
Kerne.

Mari Penvern, eus Plomodiern.

Guillou Poulicart, eus Plouguer-Carhez.

Louisa Drevat, pried da Laurans Coeffic,  
eus ar Faouet.

Loïs ar Gall, eus Mellac.

Pezr Cail, eus Tredarzec, escopti Lan-  
dreger.

Nicolas Kervarec, eus Poullan.

Guillou Jac, eus Meillars.

Marc'harit Moreau, eus Ploeven.

Cathel Lozac'h, eus Pennars.

Mikel, map da Loïs Lubin, Aotrou  
Kerivily.

*Tud dall, o deuz gullet dre bedennou  
Dom Mikel.*

Guillemett Guiec, eus Landrevarzec.  
1664.

Jann Godec, merc'h da Ian ha da Izabel  
Kervorien, eus Douarnenez.

Franceza Bourdon, pried da Francez Lo-  
zac'h, eus parrez Dirinon, escopti Kerne.

*Tud mud o deuz clewet, dre bedennou  
Dom Mikel :*

Franceza Pouliquen, eus Pleiber-Sant-  
Tregonnen (*sic*), escopti Leon.

Yvon Morvan, eus Commana.

Louisa Turmel, eus Loqueoret (Loqueffret).

Mao, pe Maze Cariou, eus Ploare.

*Tud cam, mac'hagnet, pe dalc'het gant goall  
glenvejou, aliez diremet, hag o deus bet ar  
iec'het, dre bedennou Dom Mikel :*

An Itron Kersulvan, eus Landerne. 1664.

Andreo Coz, eus Nizon.

An Tad Fuljens-Santez-Facond, eus  
couent an Tadou Sant-Aogustin, e Carhez.  
1664.

An Tad Lan Launay, eus Compagnunez  
Jesus. 1664.

An Aotrou Tremaria, eus Plougon, helec  
ha missioner da heul an Tad Maner.

Cathel ar Pap, eus Plouhinec.

Marc'harit Poullaouec, eus Douarnenez.

Adeliç Jobic, eus parrez Elliant.

Itron Lanvilio, eus Plomodiern.

An demezel Pericaud, eus Kemper.

Jannet Duperre, eus parrez Scaer.

Loisa Bidan, eus Plounevez.

Mari Treut, eus Roscanvel.

Setu aze avoalc'h a vuzudou evit dis-  
kouez d'an oll pebez galloud en deuz  
Dom Mikel er Baradoz. Goulennomp dre  
he scoazel ar pez a garomp digant Doue,  
hag e velfomp c'hoaz burzudou nevez e  
Tremenac'h, e Conk hag e Douarnenez.

Pedomp ive an Aotrou Doue hag ar  
Verc'hez da rei gloar var an douar da  
Zom Mikel Nobletz, missioner Breiz-Izel,  
er seitecvet cantved (1614-1652).

O pegoulz e c'helfomp lavaret var an  
Auter : « Sant Mikel Nobletz, pedit  
evidomp !! »

## MARI AMISS PICART <sup>(1)</sup>

EUS A VICLAN

E c'henta amzer

Ia, e peb stad ac e peb oad, e peb amzer ac e peb leac'h e caver tud ac a ziscuez, en o c'homzou ac en o oberou, an ent mad d'ar re-all. Clascomp eta anezo en or bro ive. Eleiz a ve caved. Setu ama unan eus ar re anavezeta, choazed en ur renc izel. Mari Amiss Picart, ganed e Guiclan,

(1) Les Editeurs de *Buez an Tad Maner* ont cru qu'il serait agréable aux lecteurs de trouver, à la suite de la Vie de Michel Le Nobletz, une notice historique sur l'une de ses plus célèbres pénitentes, Marie-Amice Picart, traduite en breton par M. ROUDAUT, curé-doyen de Ploudiry.

Cette notice est extraite de l'ouvrage, *An Ene christen e Bali an Ee*. — Imprimerie Desmoulins, Landerneau.

e Kergam, deiz Gouel ar Chandelour (1599); a oue badezet e iliz Guimiliau. E zud, tud a zoujans Doue; a c'houneze o bara divar bouez o divrec'h. Amiss a oue a vianic devod d'ar Verc'hez a da Sant Iann an Avieler. Var an taolennou e vele aliez ar Verc'hez a sant Iann eharz ar groaz, oc'h arvest or Zalver da vervel evidomp ac ahano, evit doare, e teue e devosion da Vam Jesus, a de ziskib muia-cared. Ne oa nemet 7 vloaz pa goumansas, goude ur zarmon e d-oa cleved, goulén digant Doue an teir c'hrass-ma : da ober atao bolontez Doue ; da c'hounid curunen ar Verc'hez ; da zantout poaniou ar Verzerien.

Christoph Abgrall

De eiz vloaz e oue lekcat da baotrez-saout e ti Christoph Abgrall, ul labourer douar eus a ghichen ac un den eus ar re

honesta. Iann Picart, en-deun, nac Agatha Mallegoll n'oant ket tud da lacaat o merc'h er c'henta plass a gavsent, ac eb gouzout etre daouarn piou. Tad a mam ac a iafe da fiziout evelse o c'hrouadur er c'henta deuet, e ve tud criz a dinatur. Mari Amiss n'oa ket evit beza gvell errued. El ti Christoph Abgrall ne glevse na blasfemi na jarneal. Eno e vize discuezed dezi respeti ar Zul, pedi Doue noz a mintin; ne velse ket mestr an ti oc'h ober bizach laouen d'ar re a vize divezad o tont d'ar g'ear d'an deiziou gouel, d'ar pardonieu. Christoph Abgrall a ioa scuier an dud vad. Ouzpen ma laboure douar, oa ive marc'hadour lien, ac e claske ar viaderien ac ar viaderezet paoura evit rei labour dezo; a pa zea d'ar marc'had da brena neud pe draou all, e troe ouz ar re a gave muia izomeg, evit prena o marc'hadourez, a rei tro dezo da c'hounid. Doue a vennigas e gommers, ac

e lezas ur fortun v Rao var e lerc'h. Ur c'hrass oa abers Doue erruout da zervicha. e ti ur seurt mestr.

Amiss o tioual ar zaout

Pemp bloaz e choumas en ti mad-se, varlerc'h ar zaout; ac a zalec neuze e teuas da veza ur plac'h a beden ac a orezon. An disterra tud ervez ar bed a zao avechou dreist ar re-all e carantez Doue, pa lacaont o spered da sonjal : scanvoc'h int, en-deun, da sevel varzu an Ee, o veza ma int distacoc'h diouz an douar. Ur paotric denved a ioa, a pa vele e loenedigou reiz o peuri en dro d'ar grec'hen, a choume a-ban arped var e vaz da zellet ouz an Ee, a pa goumanse e *Bater* : *On Tad peini zo en Ee...*, e teue an dour eus e zaoulagad. Me, emeza, ur c'heaz dioualler denved, caout un tad en Ee! Me, ur c'hrouadur a ne ra den ebed van aneza,

beza crouadur d'an ini zo ar bed-ma deza tout ! An tad eus an Ee caout joa ouzin-me ive, un den ken dister ! O va Doue ! o va Zad ! — Ac e choume da zonzal, edoare pa velse an Aotrou Doue o sellet carantezuz outa.

Evelse, ar re a vez lezed o-unan, eb den da ober van anezo, o veza o-unan gant Doue ac o Eal-mad, a vez sclereed aliez dreist an oll ; evel an ermitet santel, evel ar paotr denved-se, ac evel Mari Amiss Picart. O veza e-unan ive gant e loened, e Eal-mad ac i, pell diouz trouz ar bed, e cave e zu da bedi a da vidita. Dalh-mad e vize e zonzj e Doue, ac e crescassuan e zantelez. Tostaat mui ouz-vui ouz Doue, setu eno var betra edo e spered. Eus a greiz e lanneier ac e goaremou, e save a galon, da bep mare etrezec an Ee

En em zave en eer  
Evel un Alc'hueder.

en e spered. Diouz ar mintiniou, etouez ar c'huez-vad a zave divar ar c'hleuziadou ac ar parcadou bleunv, coulz a divar ar peuri a zindan treid e loened, emesc ar c'huez vad-se an ezenn vintin a zigasse betec enni son an Oferennou eus ar parrezou tosta ; a pa zave ar verc'hic trizec vloaz var ur c'hleuz pe un tamic creac'h bennac, an fouriou a ziscueze dezi e pe arroud, tro-var-dro e teue e Zalver var an Aoter da nevezi evit an dud sacrificis ar groaz : ac evel pa velse Menez Calvar tost dezi, e selaoue, en e c'halon, meur a oferren. Lavaret a c'helle evel un all eus e c'henseurt : — Va Eal mad, iit evidon.

Amiss distro da di e Zad

Trizec vloaz oa pa rancas dont d'ar g'ear da zicour e mam. E zad a c'hoarvezas ganta caout un taol bouhal en e c'har, ac a oue pell etre e vele ac an tan. Meur a

veach e oue o pardouna evit e zad, e Sant Neven, e Treg'er, ac e tigueuzas ganti anaout an Tad Quintin, eus a urz Sant Dominic, e Couent Montroulez. An Tad ne oue ket pell na velas santelez ar plac'h humbl, ac a roas dezi ur groaz evel ur merc eus ar poaniou e devize en e buez. E zad a bareas evel dre viracl. N'oa ket souez, pa en d-oa un evelep merc'h da barlant evita da Zoue a d'ar Verc'hez.

Maro e zad

Iann Picart ne oue ket pell na glanvas adarre, eb esper ebed da barea en drama. Abars mervel e comzas de vugale evel ma tere ouz un tad carantezuz. Da Vari. Amiss e lavaras : Amiss, c'hui o pezo poan var an douar : dalhit mad atao : o dalhit mad, a na rit van ebed eus ar pez a lavaro an dud. Pa gavo deoc'h e vezoc'h muia dilezed ganto, Doue a lacai ar re ma

sonjoc'h nebeuta enno da sevel ganeoc'h. Amiss, choumit ganeen ; o vont da guitaat ar bed-ma emañ ; e guitaat a ran eb glac'har. Me ho lez etre daouarn Doue da ober e volonteiz ahanoc'h. Anter-noz eo ; poent eo mont eus ar bed-ma ; ama n'euz nemet traou vean a doareou trompluz. It da lavaret digass va zacamanchou d'in, rac e mare goulaoui-deiz e tremenin. An aotrou Person eus a Viclan a zigassas e zacamanchou deza, ac ur pennadic goude e lavaras de verc'h e vele ar Verc'hez, caer a dudiu, a gant un ear carantezuz. — Lavaret a ra, emeza, em c'hasso dirag ar barner, ac e laca ahanon da gaout ur fizians vraz. Ar varn a zo spontuz, mes c'hui, va merc'h, am zicouro o pedi evidon. — An aotrou Person a deuas da gaout e vele. — Va zad, eme ar c'hlan-vour, sicourit ahanon da vervel e stad vad. Aoun am euz : evelato, em euz

muioch c'hoas a esperans. Goude beza responted ouz ar pedennou diveza, e lavaras : Adie! *in manus tuas, Domine.* Va Doue, me ro deoc'h va ene; ac e tremenas pa edo an deiz o c'houlaoi.

Amiss, goude maro e zad

Amiss a choumas gant e mam betec e femp bloaz a tregont, ac evit gallout rei mui a zicour dezi, e tescas griat, ober lien ac al labouriou all, ar re denna zoken; ac en eost ez ea var ar meaz da eosti. Mont a reas ive, gant assant e mam, da blac'h da Vontroulez; mes eb dale e rancas distrei da gaout e mam. Ober a ree oll lavarou e mam, nemet pa roe ali dezi da zimizi : ne d-oa c'hoant ebéd da vont er bed. Agatha Mallegoll a lavare avechou de fried : pa deuio ar maro deomp, petra deui Amiss da yeza? — Doue, eme Iann Picart, ne zilez jamez ar re a laca o fizians

denna. Amiss a revuzas an oll fortuneiou, evit choum gant e mam. — Va Doue, semezi, an dud a lavar em euz aoun rag ar boan : va Doue, n'euz na poan na paourentez, nemet beza eb ho carantez. — Pa zee da un eured, ez ea atao ive d'an iliz, da bedi evit an daou bried : disevel diouz eleiz, ne deont nemet da azeza ouz taol an dud nevez. Ne d-ea d'ar pardonieu, nemet evit pedi, a clevet ar zarmon : e buez oa clevet comzou Doue, a ne d-oa diver-amzer ebéd nemet evelse. An aotrou Guillerm, Person eus a Vimiliau, a roas dezi meur a ali mad, ac e descas da erzel ouz ar poaniou ac an trubuillon a dlie coueza varni.

E foaniou braz

Er bloaz 1634 e c'haller lavaret e comansas e merzerentiou. En amzer-ze ez ea ar brocession eus a Vielan da Lam-

bader, deiz ar pardon, a ioa an 19 a viz Mae. Amiss a i eas da heul ar brocession, ac o veza e-unan o tont d'ar g'ear, e oue dare dezi coll e buez oc'h en em zifeneb un den fall. Ken trubuillet e oue, ma clanvas, ac e oue ur pennad mad diez goude-ze, ac e coumansas santout divar neuze poaniou ur verzerez. Doue a roas dezi da anaout mui-ouz-vui an trubuillou a dlie digouezout ganti, ac e oue ispirad da offri da Zoue e oll foaniou evit an oll bec'herien. D'ar mare-ze ez eas da Gastell da choum, dre ali an aotrou Person eus a Vimiliau, nevez anved da Vikel vraz gant Escob Castel. Agatha Mallegoll a ioa maro red eo ma vize.

Caer e d-oa beza fur a devod, e couezas dindan teodou an tud, ac e troas menod an oll en e eneb. Diou blac'h o d-oa keserued cas ar maro outi, dre ma tisali anezo da laerez o mistri, o c'hourdrou

discuil anezo. Lavaret a rezont guassa a ghellzont anezi : e lacaat a rezont gaouadez, bigodez, everez e cuz, etc. Ober a rezont d'an dud e c'hemered evit ur plac'h fall, ac an aotrou Guillerm e-unan a deuas da gredi an droug a lavaret anezi : ac e oue mired ar gommunion outi.

#### Amiss consoled

Amiss a venne coll e spered, o velet an oll en e eneb. Mes dre fors d'en em erbedi ouz an ini a gonsol ar re e poan ac e glac'har (*Consolatrix afflictorum*), dre fors da c'helver de zicour ar Verc'hez, Sant Iann an Avieler, etc..., e teuas da lacaat e fizians en ini a anaveze ar virionez, ac e c'hallas gouzav ar beac'h, ac e pounner. Doue a lacaas ive tud vad da gaout struez outi. An aotrou Trebodennic, Arriamered gon a Vikel vraz da Escob Castel a roas ur gambr dezi da loja, ac e c'honsolas atao.

An oll a deuas da anaout, dre vercou  
scler ac aned, santelez ar plac'h disprized  
a dued gant an teodou fall. An aotrou  
Guillerm e-unan, distroed da berson da  
Vimiliau, a velas oa bet re vuan da gredi  
ar guall-deodou. Clenvel a reas, ac Amiss,  
pa glevas, a c'hoantaas mont de velet; ac  
e c'houlennas pardon outi, abalamour ma  
oa bet re vuan da gredi ar guall-deodou.

#### Maro Christoph Abgrall

Christoph Abgrall en d-oa dalhed at  
da istimout e blac'h mad; gouzout a rea  
oa faosoniou tout an traou a lavaret en e  
eneb. Evel-se, ez ea bep-en-amzer da Gas-  
tel da velet anezi a de c'honsoli. Ar veach  
diveza ma z-eas, a oue d'ar meurs. Falc  
1647, ac e kimiadas diouti an daelou en e  
zaoulagat : santout a rea ne velse mui  
Amiss var an douar. Ar 7 a viz Mae en  
em zantas fall, eb beza clanv da lavaret

clanv, nemet ma en em gave sempl. E  
vugale a grie clasc ar medicin : — Medicin  
an ene eo ar c'henta, eme Christoph. Gal-  
ved e oue e confessor, ac e oue digassed e  
Zoue deza; ac e lavaras en d-oa c'hoant  
da veza noued ive. — An nouen, eme ar  
re a ioa var e dro, ne vez roed nemet pa  
vez ar maro gant an dud; a c'hui ne  
d-oue'h nemet sempl. — Ia, eme ar c'hristen  
euruz-ma; mes, mar bez apelled, e  
varvin eb an Nouen. — Pa oue great e  
lavar. — Va bugale, emeza goude, dalhit  
mad da lezenn Doue; bevit etrezoc'h e  
peoc'h ac e carantez, ac grit, evel don-me,  
da Amiss ar vad a vezo eaz deoc'h; na  
vankit ket dizi. — Christoph a varvas, ac  
an noz varlerc'h Amiss a velas aneza e  
creiz ur sclerizen gaer, ac e lavaras dezi  
delec'her mad, ac e devize, evit poaniou  
berr, un euruzdet efin.

Mikeal an Nobletz

Doue a zigasse e vella mignonet da gon-  
soli e zervicherez humbl. An Aotrou  
Mikeal an Nobletz a gassas unan eus e  
berz da lavaret dezi caout coura, a ca-  
red Doue en despet da bep-tra; ac e tis-  
cuezas dezi biliennou (*mein*), divar bord  
ar mor, evit lavaret dezi, evel ma oa bet  
goalc'hed aliez ar viliennou-ze gant ar mor  
o skei varno, i a vise goalc'hed caer ive  
gant an trubuillou o coueza varni.

Pa dostea an eur da Amiss da lacaat ar  
rozen diveza en e c'hurunen, abars mont  
d'an Ee, me lavar abars ma teuas ar poa-  
niou diveza varni, Doue a zigassas dezi  
c'hoas ar c'hlaç'har da velet ar re a zis-  
cueze dezi ar muia carantez, o vont eus  
ar bed-ma, ac o lezer anezi var o lerc'h.  
An Aotrou Mikeal an Nobletz a gouezas e  
paralizi, a choumas seiz miz evel cruci-

fied, var e vele, ac a varvas e Conq, en ur  
c'hoz campric. Unan a ranke beza oc'h  
entent outa, evel ouz ur c'hrouadur; bez'en  
d-oa goulenned caout abars ma varvse,  
eveledig'ez bennac gant Jesus crouadur a  
gant Jesus var ar groaz: Doue en d-oa  
selaoued e beden. Markiz Kergroadez a  
c'hoantaas e vize casset da Gastel Ker-  
groadez; mes Abostol Breiz-Izel a lavaras  
bennoz Doue deza, ac a gavas gvell mer-  
vel en ur gampr dister. Amiss ne oa mui  
eta evit esperout e teuze Mikeal an No-  
bletz de c'honsoli a da rei dezi aliou mad.  
Ouzpense, d'ar memez mareou, e collas  
ive e madoberour carantezuz, Aotrou Tre-  
bodennic.

Maro Amiss Picart

Vardro seiz miz goude, Amiss a velas  
ive e zro o tont. An 20 a viz kerzu e clan-  
vas, ac antronoz e oue sacramanted. Ar re

a oa var al leac'h a zirede an daelou eus o daoulagad o velet e joa ac e c'harantez. Evit ma vize brassoc'h aze e joa er Baradoz, Doue ne roas ket dezi da zantout, en e amzeriou diveza, ar joa ac an dousder a ro er mare-ze perliessa, de vefi mignonet. Amiss a g'emeraz aon ac encrez o velet ar varn o tostaat. Goulén e d-oa great caout perz e poaniou e Zalver, ac en e angoni er Jardin Olivet; ac o veza ma oa cre avoalc'h e c'harantez da zoug'en lod eus ar beac'h-se, Doue, evit ma vize caeroc'h c'hoas e c'hurunen, ne est ket anezi. Santout a reas un eveleb dic'hout, un encrez ker braz o sonjal er varn, ma venne disesperi. Clevet e vize o lavaret. — Pe rin-me, pec'herez paour ma z-oun, pa deui Doue d'am barn ? Pa c'houlennno count eus ar grassou am euz bet, petra respontit-me ? — An Aotrou Doue a zo un Tad mad. — Ia, emezi, mes or bar-

ner eo ive. — Atao en d-euz bet sousi ahanoc'h. — Ia, a setu perac em euz tro da grena. — N'ho bezit aoun ebed. — A ! m'ar comprenfe an dud, eme Amiss, peg'en serijuz eo barnedig'ez un Doue ! — Amiss, ac a boaniou oc'h euz-hui gouzanved evit Doue ! — N'eus fors, n'oun ket evitbeza eb aoun.

Goude ar gombat-se e d-oue un all eneb ar feiz, an droug-speret o clase e lacaat da ziscredi ar pez a lavar Doue deomp. Anter-nos a zonas, ac er mare-ze e teuas, evel en un taol, ar peoc'h ac ar joa en e spered. E feiz a deuas ferm, an esperans ac a garantez a zavas da uhela. Antronoz an Aoutrou'n Escop a ieas da velet ar glanvourez santel, a vennigas anezi, ac a lavaraz dezi pedi evita ac evit oll Escopti Leon.

Deiz Nedeleg, da 7 eur diouz ar mintin, e testumas ur restadig nerz, e savas var e

daoulin, ac e oue cleved o lavaret actou a feiz, a esperans, a garantez, a gontrision, ac o lavaret da Jesus kemeret e ene. Ur pennadic goude, en eur lavaret : Jesus a Mari, e tremenas. (1562.)

An Aoutrou'n Escop ac oll vev'in Castel a oue en e enterramant, ac ar Popl a douche chapeledou outi, evit o selher gant resped, evel relegou. E bez a zo er Gate-drall e kichen an Aoutrou Trebodennic, e madoberour, ac a veler atao dirag aoter Sant Gouenou. En e buez, coulz ac e buez Mikeal an Nobletz, e caver cals a draou burzuduz, cals mercou a santelez, a meur a ini a dle caout sonj c'hoas da veza cleved cana an diou vuez santel-se var ar meaziou.

Ar vuez-se, a ziskuez deomp pegement a dall ober peden a galon var bassion Jesus-Christ.

Setu aman eur c'hantie coz evit diski chom pell da bedi var poaniou hor Salver.

Var don : *Vexilla Regis.*

Saludi a ran a galon  
Jesus hag he oll Bassion,  
Jesus hag he oll Bassion  
Ra vezo scrivet em c'halon.

Me offr da Zoue ar salud-man  
Evidomp oll guitibunan,  
Dre an daouarn Sant Caurintin,  
Evit hon assista var hor fin.

Me ho suppli, o Speret Glan,  
Inspirit d'am ene breman,  
Ma c'hallin gant compassion  
Consideri ar Bassion.

3 *Pater d'he Bassion e jeneral.*

2. Jesus o veza glac'haret,  
Ha gant eur spont bras estlamet,  
A c'huezas he oad binniguet,  
E' corn ar Menez Olivet.

Gleb oa he faç gant he zaelou,  
Abalamour d'hor pec'hejou,  
Abalamour d'hor pec'hejou  
E crenas eus he oll ven'prou.

*3 Pater d'ar Goad a c'huezas ha d'an daëlou  
a scuillas var ar Menez Calvar.*

3. Pa en em santas melconiet,  
Teir heur var he zaoulin stouet,  
Gleb gant eur c'huez a zour ha goad,  
E pedas humblamant he Dad.

*3 Pater d'he Oræson var Menez Olivet.*

4. Eun Ael guenn-cann er c'honsolas  
E creis he spont ha glac'har bras,  
Hag a bresantas eun hanap  
Leun a boaniou abers he Dad.

*3 Pater d'ar C'halir eus he Bassion.*

5. Neuze Jesus guir Vap Doue,  
A lavaras a galon cre :  
Ra vezo gret ho polonte,  
Neket ma hini, ma Doue.

*3 Pater d'ar conformite eus he volonte da  
volonte he Dad.*

6. Pa achuas he Oræson  
Gant respet ha devotion,  
Gant Judas e oue trahisset,  
Ha gant tud cruel amarret.

*3 Pater d'he Erennou.*

7. O carantez væn eus ar bed!  
Gant he re oue abandonnet,  
Hag egis eun Oan dispennet  
Gant cals a vleizi arrajet.

*3 Pater d'he Abandon.*

8. Gant taoliou, crachou ha façadou,  
Carget oue e faç hag he c'henou ;

Ouspen e oue tennet he varo  
Gant tud cruel ha divalo.

*3 Pater d'he C'houliou, Crachou ha Façadou.*

9. Eno cals a fals testeniou,  
Injuriou vil ha scandalou,  
A oue gant counar dislonket,  
Gant ar Jusevien diboellet.

*3 Pater d'he Injuriou.*

10. Gant Herod's voa goapeet  
Egis eun den diskiantet,  
Egis eun den diskiantet,  
Gant eur sae venn e oue guisket.

*3 Pater d'he Sae venn.*

11. Pa oue gant tud fall accuset,  
Gant soudardet oue fouetet,  
A scoe egis guir diaoulou  
Gant guial, kerdenn ha kentrou.

*3 Pater d'he Flagellation.*

12. Pa oue evelse dispennet,  
E eskern oue disoloet;  
A dall ar penn beteg an troat,  
Ne voa nemet gouliou ha goad.

*3 Pater d'he Oad scuillet en he Flagellation.*

13. Goudese he benn binniget  
Gant Curun spenn oue curunet;  
En he zorn dre goap eur gorzen,  
Laket gant he adversourien.

*3 Pater d'he Gurunen spenn.*

14. O veza erfin condaonet  
Da veza er Groas merzeriet,  
Dar Menez Calvar, ar Groas,  
Gant cals a boaniou a zougas.

*3 Pater d'he Boan o tougen ar Groas.*

15. Eun truez bras oa he velet  
Gant ar Groas pouner afflijet:

Allas ! en he gein e chommas  
Eur gouli dre bouez ar Groas.

*3 Pater d'ar Gouli he gein.*

16. Arru var ar Menez Calvar,  
Divisket oue gant tud barbar  
Eus he sac, e devoa gret  
He Vam Mari hep gri ebed.

*3 Pater d'he Sae hep gri.*

17. Jesus c' veza astennet  
He dreit, he zivrec'h binniget,  
Gant tachou criz a oue staget  
Ouz ar Groas var an douar astennet.

*3 Pater d'he Dachou.*

18. Piou a ouffe, va Jesus,  
Compren ar boaniou truezus  
A santas ho Corf pa gouezas  
Ebars en he zoul ho Lamgroas.

*3 Pater d'he Dourmant pa oue savet er Groas.*

19. Gant he oad sacr e c'holoas  
An douar tosta hag ar Groas,  
Da effaci ar viltansou  
A c'holoe hon eneo.

*3 Pater d'he Oad a scuillas er Groas.*

20. Pa oue gorroet a huel,  
Enep ar glao hag an avel,  
O veza he oll c'hoad scuillet,  
Gant sec'het bras oa-tourmantet.

*3 Pater d'he Sec'het.*

21. Hogen tud criz a reas dezha  
Vestl ha guinaier evit eva ;  
Sellit ha sellit c'hoas, mezhvier,  
Ouz ar breuvach-se d'hor Salver.

*3 Pater d'he Vestl ha guinaier.*

22. O sellet ouz hor pec'hedou,  
E arrousas gant he zaelou

E faç, ar Groas hag an douar  
Ken estranch e oa he c'hlañnar.

3 *Pater d'he Zaelou a scuillas er Groas.*

23. Pa velas he Vam binniget  
He boanniou bras ha diremet,  
Cals a zaelou ehars ar Groas  
Gant keuz bras dezhan e scuillas.

3 *Pater d'an Daelou a scuillas he Vam.*

24. Neuse an heol a semplas,  
Ar mein dre greis en em fraillas,  
An douar spontet a grenas,  
O velet eun Doue er Groas.

3 *Pater d'ar Miraclou pa edo er Groas.*

25. He Vam guer a recommandas  
Da Sant Ian so he vignon bras,  
Ha Sant Ian d'he Vam binniget,  
Da veza Mam dezhan bepred.

3 *Pater da recommandation he Vam da  
Sant Ian ha Sant Ian d'he Vam.*

26. Abars mervel el Lamgroas,  
Seis gomz precius a lavaras ;  
Sonjal a rin enno ato,  
Hag ispicial var ma maro.

1. O fardonnit, emeza, ma Zad,  
Me ho suppli a galon vad ;  
Dre ignorans em offansont,  
Ne ouzont ken petra reont.

2. Sec'het em euz. 3. Tat binniget  
Perac oc'h eus-u ma c'huiteet?

4. Chetu ho Map fidel, maouez ;  
Map, chetu ho Mam da jamez.

5. Neb aoun goude ma maro,  
Memor ac'hanoc'h am bezo,  
Hirio e viot er Baradoes  
Ganeme ha gant an oll Ales.

6. O ma Zad binniguet en En  
Me recommand deoc'h va ene.

7. Ar pezh oc'h eus gourc'hemennet,  
A so ganen penn da benn gret.

3 *Pater d'he seiz Comiz diveza.*

27. Allas ! ahed he ~~mission~~ sion,  
Merzeriet oue he galon,  
Hag he Ene trist oue toullet  
Gant eur c'hleze a geuz diremet.

*3 Pater da Boaniou he Ene.*

28. Teir heur astennet el Lamgroas,  
Evidomp oll e anduras ;  
A dal ar penn bete ar plantou,  
Ne a nemet goad ha gouliou.

*3 Pater Tan teir Heur ma chommas er Groas.*

29. Dar fin ebars el Lamgroas,  
He Ene precius a rentas,  
Etre an divrec'h binniget  
Eus he Dad, evit hor pec'het.

*3 Pater d'he Varo.*

30. Goude-se gant eul lans lemmet  
He gostez sacr oue digoret,

Pe dre hini e tiscuezas  
He galon ha carantez bras.

*3 Pater d'al Lanç a zigoras he gostez.*

31. Erfin gant he Vam melconiet,  
He Gorf eus ar Groas diskennet,  
A oue gant truez recevet  
Etre he divrec'h binniget.

*3 Pater en enor d'he Gorf etre daouarn  
he Vam melconiet.*

32. Me fell d'in pelloc'h saludi  
Bemdeis ar Groas, ar pemp Gouli,  
Ehars ar Groas gant Madalen  
Me a lavaro evelhen :

O Croas so leun a esperanç !  
Ennoc'h ema hon oll fizianç,  
Roit d'ar bec'herien guir pardon  
Dre veritou ar Bassion.

*3 Pater d'ar Groas.*

33. Me ho'salud, o pemp Gouli !  
Gant eur c'hoant ~~as~~ d'oc'h adôri,  
Ra viot skrivet em c'halon  
Gant Jesus hag he Bassion.

*5 Pater d'ar pemp Gouli.*

Allas ! allas ! ne allan mui  
Beva gant keuz ha melconi,  
O velet ho poaniou cruel,  
O Map ker d'an Tad Eternel !

Pa sellan ouz ho tourmanchou,  
Dour ha Goad scuillet, ha Gouliou,  
Ma c'halon so em c'hreis rannet  
Gant eur glac'har estranch meurbet.

Kicit pell diouzin peb joa,  
Ema var Menez Golgotha  
Staget ouz ar Groas, va Jesus,  
O maro euzic ha spontus.

O pec'het criz ha milliget !  
Te az euz evellen muntret,

Te az euz evellen muntret  
Ma Zad ha ma Mæstr binniget.

Sioas, sioas din-me pec'her,  
Crucifiet em euz ma Salver,  
Gant ar pec'hejou commettet  
Ahed ma buez tremenet.

Ra vezo rannet ma c'halon  
Gant guir keuz ha contrition,  
O sellet ouz ar Gouliou  
O devez gret ma fec'hejou.

Sioas din me dleie mervel,  
Ne ket ho Map, Tad Eternel ;  
Castizet ez eo ar Mæstr mad  
Evit he servicher ingrat.

Pebez graçou a rentin-me  
Evit ho maro, ma Doue ?  
Pebez graçou a rentin-me  
Evit kement a garante ?

Evit ho cloar hag oc'h enor,  
Grit din, va Jesus, an enor,

Ma hillin bete ar maro  
Dougen ganeoc'h ho Croas ato.

Me iell din chom da virviken  
Ehars ho Croas gant Madalen,  
Evit gouela ganti ato  
Ma fec'hejou hag ho maro.

Ma bouet a vezo ar poaniou,  
Ma breuvach ho vestl, va Autrou,  
Ma c'hambr a vezo ho costez,  
Ma contemplin ho carantez.

Likit Jesus ho Passion  
Hag ho pemp Gouli em c'halon.  
Srivit em c'hreis, o va Autrou !  
Ho Croas, ho Curun, ho Tachou.

En heur hor maro, ma Doue,  
Gant ho Coad guele'hit hon ene,  
Ha dre verit ho Passion  
Roet deomp he c'raç ha guir pardon.

*Oræson en enor d'ar pemp Gouli.*

Me ho salud, o pemp Gouli !  
C'hoant bras am euz d'oc'h adori ;  
Ra vezo scrivet em c'halon  
Jesus hag he oll Bassion.

O va Salver ! me ho suppli  
Abalamour d'ho pemp Gouli,  
Abalamour d'ho pemp Gouli,  
Ho pezet truez ouzomp-ni.

Abars mervel, o va Jesus !  
Effacit gant ho Coat precius  
An oll offansou commetet  
Ahed ma buez tremenet.

Grit din, grit din hivisiken  
Ober abred guir binijen,  
Ha roit din var ma fassion,  
Eurguirgeuzha contrition. 5 *Pater, etc.*

*En enor d'ar c'heuz en devoa an Itron Varia  
o sellet ouz ar bemp Gouli he Map binniget  
Jesus.*

Mam a druez, me ho suppli,  
Abalamour d'ar melconi  
Ho poa, sioas, o contempli  
Ehars he Groas ar bemp Gouli.

Plijet ganeoc'h ma assista  
Brema hag em heur diveza,  
Evel m'oc'h euz bet recevet  
Ho Map el Lamgroas astennet.

Evel m'oc'h eus hen recevet  
Pa oue eus ar Groas diskennet,  
D'am fin recevet va ene  
Ha presantit-hen da Zoue. *5 Pater, etc.*

*Instruction var Bassion ar Verc'hez binniget  
en enor d'ar seiz Cleze a gueuz.*

A greis ma c'halon c'hoant am euz  
Da enori ar seiz Cleze a geuz  
Pere a doullas ar galon  
Eus ar Verc'hez sacr va Itron.

1. Pa ziskuezas dezhi Simeon  
Eus he Map ker ar Bassion,  
Gant eur C'hleze a geuz diremet,  
He c'halon oue daouhanteret. *Pater, Ave.*

2. Pa renkas d'an Ægypt tec'het,  
O tougen Jesus binniget,  
Pebez glac'har a santas-hi?  
Pebez tourmant ha melconi? *Pater, Ave.*

3. Pa ziancas d'ar Vam a druez,  
He Mabic ker ahed tri devez,  
Eur c'hleze terrubl a doullas  
Hec'halon gant nec'hamant bras. *Pater, Ave.*

4. Ha pa her c'havas o tougen  
Al Lamgroas pouner gant anken,  
Piou a ouffe compreni  
He hirvoud bras ha melconi? *Pater, Ave.*

5. Pa er guelas ebars er Groas  
O vervel gant tourmanchou bras,  
He c'halon trist a oue rannet,  
Hag e Ene crucifiet. *Pater, Ave.*

6. Pa oue diskennet eus ar Groas,  
Etre he divrec'h er c'hemeras,  
Hag e scuillas cals a zaelou  
Var he Faç hag he C'houlou. *Pater, Ave.*

7. Ebars er bez pa er guelas,  
Adeo, ma Map, a lavaras,  
O melconi ! o glac'har bras ! *Pater, Ave.*

Guerc'hez Vari, Mam da Zoue,  
Assistit gant ho seiz cleze  
Ma Ene kez, pa vezo red  
Renta cont da Varner ar bed.

*Oræson d'ar seiz Sant eus a Vreiz.*

Saludomp guitibunan ar seiz Sant eus a Vreiz,  
Rac hi o deuz astennet en hor Bro-ni ar feiz,  
Saludomp dreist ar re all hon Tad Sant Caorintin,  
Da veza hon Advocat breman ha var hor fin.

Glorius Sant Caorintin hon Tad carantezus,  
Presentit, me ho suppli, hor c'halon da Jesus ;  
Presentit hon eneou d'an Itron Varia,  
Ha da Sant Joseph ivez en hon heur diveza.

Ha c'hui Aotrou Sant Malo, ho pet sonch ahanomp,  
An tan eus ho carantez taolit hirio varnomp,  
Cassit ar Bleiz infernal pell ahan diouz hor Bro,  
Evit na vezimp trec'het en heur eus ar maro.

Aotrou Sant Patern, Escop ha Patron a Venet,  
Sellit ouz ho pugale, sellit ouz ho tenvet,  
Sellit ouz ho pugale, sellit ouz ho tenvet,  
Ouz ar Gernevis ivez a so ho mignonet.

Aotrou Sant Samson, c'hui so Escop hag Abostol,  
Da genta ebarz Bro-Saos, goude en Escopti Dol.  
Allas ! emamp bepred e taill da vont da goll,  
En han Doue abred mad roit sicour deomp oll.

Aotrou Sant Brieç, Patron Escopti Sant-Brieç,  
Bezit dre ho carantez oazomp oll trugarec,  
C'hui a so tost mignon d'hon Tad Sant Caorintin,  
Digassit deomp ho coulmic pa vezimp var hor fin.

Aotrou Sant Pao!, Conductor hac Escop a Leon,  
Bezit Conductor deomp-ni, recevit hor c'halon, (*bis.*)  
Pell diouzomp en hor maro pellait an dragon ;  
Hor presentit da Zoue en hon heur diveza,  
Pa rankimp dirac Jesus hep mar comparissa.

Aotrou Sant Tugdual, Escop ha Patron Lantreger,  
Hor recommandit bepred da Jesus hor Saiver,  
Ha pa vezo red lezel ar vuez hag ar bed,  
Chasseit pell diouzomp ar serpent milliget.

Me ho salud adarre seiz Sant eveus a Vreiz,  
Bemdeis skrivit doun en hor c'halon ar feiz,  
Ha likit en hon ene esperanç, carantez,  
En Env rentimp graçou eveus ho trugarçz.

FIN.

## TAOLEN

|                                 | Pajen. |
|---------------------------------|--------|
| Approbations .....              | v      |
| Protestation de l'auteur.....   | vi     |
| Lettre du R. P. Gourvennec..... | vii    |
| Ali d'al Lennerien.....         | xi     |

### LEVR KENTA

|                                                                                           |    |
|-------------------------------------------------------------------------------------------|----|
| Bloavezion kenta Dom Mikel.....                                                           | 17 |
| Mikel Nobletz e ti he dad coz, e Maner Kerodern,<br>e Plouzeniel.....                     | 21 |
| Mikel Nobletz e Bourdel ; ar Verc'hez en em<br>ziskuez dezhan.....                        | 27 |
| Mikel Nobletz e scolach Ajen ; grasou caer roet<br>dezhan gant Doue, hag ar Verc'hez..... | 31 |
| Mikel Nobletz var ar studi da vont da veleç,<br>he garantez birvidic.....                 | 42 |
| Mikel Nobletz e Castel-Paol ; brezel gret dezhan<br>e ti he gerent.....                   | 45 |
| Mikel Nobletz e Paris ; cuzuliou mad an Tad<br>Coton.....                                 | 52 |
| Offeren genta Dom Mikel ; he retred e Treme-<br>nac'h .....                               | 55 |

BIL LEVR

Missionou e Leon hag e Landreger

|                                                                                                                                            |     |
|--------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|-----|
| Mission Plougerne; Dom Mikel casset kuit diouz maner Kerodern; unan eus he gerent a glask he laza; kerent Dom Mikel distroet ouz Doue..... | 65  |
| Mikel Nobletz e couent menech Sant Dominic, e Montroulez. — Missionou en Escopti Landreger.....                                            | 77  |
| Missionou en Escopti Leon: en Enezennou Eussa, Molenez, Vaz.....                                                                           | 83  |
| Dom Mikel e Conk-Lochrist. — He labouriou benniget gant Doue.....                                                                          | 96  |
| Guerz var buez Dom Mikel.....                                                                                                              | 99  |
| Marc'harit Nobletz ha Franceza Troadec.....                                                                                                | 104 |
| Ar blasphemou lamet eus ar vro-se.....                                                                                                     | 105 |
| Mission Landerne; Propheti gret gant ar missioner.....                                                                                     | 108 |

TREDE LEVR

|                                                                                          |     |
|------------------------------------------------------------------------------------------|-----|
| Missionou en Escopti Kerne.....                                                          | 110 |
| Missionou Kemper, ar Faou, Conk-Kerne, Pont-n-Abad, Goazien, Sizun, Meilars, Kemper..... | 113 |

LEVR PEVARE

|                                                                                                                   |     |
|-------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|-----|
| Dom Mikel e Douarnenez.....                                                                                       | 144 |
| Buez Marc'harit Nobletz.....                                                                                      | 150 |
| Brezel enep Dom Mikel; an Aotrou Belec, Escop Kerne, a ro he vennoz d'ar merc'hed santel a sicoure Dom Mikel..... | 158 |
| Mission gret gant an Tad Kintin e Ploare.....                                                                     | 159 |
| Dom Mikel hag an Tad Bernard.....                                                                                 | 163 |
| Dom Mikel pistiget gant an diaoul; mont a ra da velet an Tad Julian Maner da scolach Kemper.....                  | 164 |
| Red eo dezhan kuitat Douarnenez.....                                                                              | 171 |

LEVR PEMPET

|                                                                                                            |     |
|------------------------------------------------------------------------------------------------------------|-----|
| Dom Mikel e Conk-Lochrist.....                                                                             | 175 |
| Jannet ar Gall.....                                                                                        | 176 |
| An Tad Maner ha Dom Mikel e Conk-Lochrist..                                                                | 180 |
| Dom Mikel condaounet da genta, ha goude-se meulet gant an Aotrou Cupif, Escop Leon...                      | 183 |
| Glenvet diveza Dom Mikel; he lizer d'an dud a Zouarnenez; stourm enep an drouc-speret; he deir angoni..... | 191 |
| An Tad Maner hag an Tad Bernard e Conk; alhou mad roet dezho gant Dom Mikel.....                           | 199 |
| Maro santel Dom Mikel. — Burzudou, inte-ramant.....                                                        | 20  |

LEVR C'HUERVET

|                                                |     |
|------------------------------------------------|-----|
| Prophetiou ha Miraclou.....                    | 215 |
| Prophetiou .....                               | 215 |
| Miraclou e Conk-Lochrist .....                 | 219 |
| — e Tremenac'h.....                            | 228 |
| — e Conk-Leon.....                             | 231 |
| — e Douarnenez.....                            | 233 |
| Cantic evit pelerinet Sant-Mikel e Douarnenez. | 235 |
| Mari Amiss Picart.....                         | 246 |
| Cantic var Bassion Jesus-Christ.....           | 265 |
| Instruction var Bassion ar Verc'hez.....       | 281 |

